

'505647

TRAGEDIEN  
**SANT GUILLARM**  
CONDT EUS AR POETOU

“ Me zo Condt a Boetou hag a zo puissant,  
“ Vaillanta den a zo dindan ar firmamant. ”

Sant GUILLARM, *Act quenta.*

“ Biniguet vezoz ann heur, me zo prest da vonet  
“ Da voëlet ma Jesus hag he Maim biniguet. ”

Sant GUILLARM, *Act diveza.*




MOULET E MONTROULEZ  
E TY J<sup>s</sup> HASLÉ, MOULER HA LEVRER  
8, RU A AIGUILLO, 8

— 1872 —








505647

TRAGEDIEN

# SANT GUILLARM COND'T

DEUS AR POETOU.



E MONTROULEZ

E ty JULES HASLÉ, Mouller ha Levrer.

—

1869.

# CHETU AMAN

## ANNOYO AN ACTOURIEN

Ar VERC'HES.	Ar SENECHAL.
An Ælez RAPHAEL ha GABRIEL.	Ar TENZORIER.
Sant BERNARD.	Ar BANQUIER.
Sant GUILLARM, Condt deus ar Poetou.	Eur CONSAILLER.
Ar Pap EUGEN, ar Gardinal hac habitantet Rom.	Eur C'HAPITEN.
ANACLET, Pab fauz.	Eun OFFICER.
Ar ROUE TURQUI.	Allan CARO hac e vroec.
Ar ROUE HIBERNI.	LAVIGN hac e vroec.
Ar ROUE PERS.	Eun HERMIT.
An DUC, breur d'ar C'hondt, hac e vroec.	Eur POT-A-GAMBR.
Ar GOUARNER.	Daou PACH.
Ar GENERAL.	PACH Röue Hiberni.
An ESCOP.	PACH Roue Pers.
Eur BARON.	Eur TABOURINER.
Eun DIGENTIL.	Eur DROMPILLER.
	SOUARDDET.
	MESSAGERIEN.
	Eur PLAC'H possedet.
	DIAOULLO.



TRAGEDIEN  
SANT GUILLARM  
CONDT DEUS AR POETO.

---

AR C'HONDT A ANTRE GAND DAOU PACH, EUN DIGENTIL,  
EUR PÓT-A-GAMBR HAC E TENZORIER.

*Ar Chont a lavar.*

**M**E zo Condt a Boetou hac a zo puissant,  
Vaillanta den a zo dindan ar firmamant.  
Ne gredan ket e ve var an douar tro ront  
Vaillantoe'h evidon, avez quen divergont.  
Queit ha m'a voa ma zad er bed-man er buez,  
N'e gommanden netra hervez ma bolontez :  
Mes breman he rancan ren var an douar  
Hervez ma bolontez pe me a raï glac'har.  
Da guenta he rancan caout commandamant  
Var aour a var arc'hant quen a vezin contant ;  
P'am bezo dastumet eun nombr bras aneze,  
Men a rayo pep tra hervez ma bolonte :  
Neuze he rancan caout, an dra-ze a zo skler,  
Pep coanta ar merc'het da dremen ma amzer.  
N'e respectin hini, me ranean he gavet  
Tout hep commandamant, ha groaguet ha merc'het  
Hac a pep sort traou all a raï contantamant  
Din ebars er bed-man : me renq cavet m'ha c'hoant,  
Commandi en antier hervez ma bolonte  
Partout dre ar vro-man, me assur an dra-ze.  
Rac se, me ho supli da vezan diligent  
D'ober ma bolontez ha ma gommandamant.  
N'ep ha vezò control enep guis d'am bolonte,  
M'er lacaï d'ar maro, m'oc'h assur an dra-ze

*An Digentil.*

Autro, hon never eo beza oll diligent  
Da heuil ho polontez hae ho commandamant,  
Me bromet gant grāc Doue, heb camet fazia,  
Va never eo bepret dec'hu oboïssa.

*Ar C'hondt.*

Nep a raï din adrez da gaout aour hac arc'hant,  
Me hen recompanso evel eun den vaillant,  
Rac red eo din cavet da lacat em zenzor,  
Me renq cavet mado, evel m'en deus ar mor.  
Rac se, ma Zenzorier, dec'hu e commandant  
Augmanti va zenzor, hep camet fazia;  
M'ar beomp goernisset a aour hac a arc'hant,  
Ny hon bezo pep tra hervez hor santimant.

*An Tenzorier.*

Pa m'eus bet an enor da veza Tenzorier,  
Me en em acquitto sur ebars em never,  
Me lacaï ho leve bepret da augmanti,  
Me zo servicher dec'h en queit ha ma vevin.

*Ar C'hondt.*

Nen deo quet ma leve avoalc'h d'am c'honduin,  
Me renq cavet arc'hant bepret dre ma querin.  
Rac se quemeret pront, partout drez ma queffet,  
Ne bon, m'ho contanto, n'ho pet quet a vorc'het.

*An Tenzorier.*

M'ar quemeran arc'hant en hep lec'h evel-se,  
Me a ve punisset gant an Autro Doue,  
Quemeret gant justic, lequet ep dale pel,  
Hevel eul laer public condaonet da vervel.

*Ar C'hondt.*

N'en deus quet a justic enep lec'h er vro-man  
A grette enep guis donnet d'am c'horijan,  
Nac a lavare guir var va actiono :  
M'ar greont din insult, ne bon, m'ho c'horiyo,  
Me a ziscoelo dez he zon me puissant;  
Mes red eo din cavet bepret aour hac arc'hant.

*An Tenzorier.*

Justic a zo iveau puissant er bed-man,  
Ar rouane memeus a deu d'ho maintenan.

*Ar Chondt.*

Credet certenamant, n'en deus quet er bed-man  
Roue quer puissant m'a raen fors anezan :  
N'a zonjan enep guis na Marquis na Roue,  
Condt, Baron, Due na Prince, pelec'h bennac ma ve.  
Ar pez a lavaran a renquer da zerc'hel;  
Nep n'a zento ouzin, me raï dezan mervel.  
Rae se, groet diampee'h da ober promptamant  
Eun amas puissant en aour hac en arc'hant.

*An Tenzorier.*

Ne bon me a raïo, n'ho pet quet a vorc'het;  
Dindan ho puissanç me raï ar pez zo dleet :  
M'ho servicho fidel, certen n'e vanquin quet,  
Me gommero partout evel ma commandet.

*Ar Chondt.*

Mes red eo din gouzout m'a z'eus nombr anezo,  
Rac evit tud dister n'a dit quet voar ho zro.  
Va oll blijadurez ha va oll pass-temps  
Cavet affer ouz tud ho deus cals a chevans :  
Me n'e meus quet affer ouz tud zo ho poagna,  
Rac dre boan ho divrac'h he medint ho veva.  
Me a fell din cavet an nombr a gant mil scoet,  
Pe eur yalc'hat mad demeus a ducadet,  
Rac se ho supplian, m'ar be hor polonte,  
Da ober ho possUBL m'a quevin aneze.

*An Digentil.*

Gant justic e credan he queffet aneze :  
Hemedint deiz ha noz ho pill a c'hontre,  
Divar ben pemp guennec e reont setanço  
Da revina an dud evit dastum mado.

*Ar Chondt.*

Me n'a ran quet a gaz digant piou hor bezo ;  
Mes red eo goud quenta hac y hon refuzo ;  
Ha c'houi, ma Digentil, da c'houlen da guentan  
Digant ar Senechal en prest din-me breman,  
M'ar be he bolontez reï din eun dee mil scoet,  
Me er lezo en peoc'h, n'en din quet de voelet.

*An Digentil.*

My a da bartia hac yello de gavet

Da gas al lizero oc'h eus din-me roet.  
M'er pedo da guenta da reï din aneze,  
Ha m'ar deu d'am refoz, c'houi a voelo goude.

(Sortial a ra.)

*Ar C'hondt a lavar d'he Pot-à-gambr.*

M'a na ro, m'en assur, me yel neuze souden :  
Me raï dezan ho reï, ya ha cals ouspen.  
M'en bezo he oll vad ebärs em gourc'hemen,  
En lacaï en eur stad da glasq an'aluzen.

*Ar Pot-a-gambr.*

M'ha carac'h cas eur re betec ty ar Banquier,  
Ennez en deus arc'hant hac a zo dibreder,  
A ro var interrest, a revin quement den  
M'a ro deze arc'hant, an dra-ze zo certen.

*Ar C'hondt.*

Pardien ! guir eo ze, red eo mont e vele  
Da c'houlen digantan, ha m'er peo goude,  
Ya, doubl interrest ! leveret-se dezan,  
M'a ne fell dezan reï m'er goerzo quer dezan.

(*Ar Pot-a-gambr a sorti.*)

*An Digentil a lavar.*

Autro, chetu me bet en ty ar Senechal,  
Evel m'a meus comzet, hon respontet ractal  
En deus lavaret din, p'en deffe cant mil scoet  
N'e roffe quet eun diner, rac n'e ve quet peet.

*Ar C'hondt.*

Hel leal, reï a reï, rac me yel e vele  
Hac em bezo arc'hant, pe otramat he vue.  
Me ha lacaï goerza quement zo en he dy,  
Hac am bezo e stad, he dy hac he mado.  
Var ben eur veach all, ma am anaveo ;  
Me n'e ran quet a gas nep guis deus ar justic,  
Me fell din ma hunan ober partout d'am guis.

*Ar c'henta Pach.*

Autro, m'ar plich guenec'h permettin din-me se,  
Me a lavaro dec'h m'ha caffet aneze  
Ebärs ty an Escop e z'eos aour hac arc'hant,  
Hac en deus aneze cazi en porneant.

*Ar Ch'ondt.*

Ma bachic bian , gouir eo se , c'hui voar ar virionne ,  
Sur en ty an Escop he caffet aneze ;  
Rac enez en deus sur , mar en deus den er bet ,  
Hac a alfe reï din dec pe daouzec mil scoet ,  
Ha m'a na ro din-me en antier ma goulle ,  
Me y ello da guerc'hat en prest he vourgueden .

*Ar Pach.*

Me ya da bartia da lavaret dezan .  
Oc'h eus intention da gavet digantan .

*Ar Pot-a-gambr a lavar d'ar Ch'ondt.*

Autro , chetu me bet en ty ar Banquier ,  
Lavaret en deus din n'e roï quet eun diner :  
Pa ro var interrest int arc'hant ar Roue ,  
Hac e rance cavet cotion aneze ,  
Eur Santificateur , hac ouspen quement-se  
Ha pea dre avanç interrest aneze ,  
Bep tri mis en avanç quent evit m'a roge .

*Ar Ch'ondt.*

Chetu ny gante oll breman ta refuset  
Vel pa n'a ouffet quet pe a lec'h hon savet .  
Pa la tette mornon ! ar vech-man vezo ret  
Din monet da velet a men vo refuzet .  
Or za , n'eus quet a gaz , plijadur vo din-me ,  
Pa arruin ennon me gommando deze ,  
Me ho lamo a stat hac ho lacai da fall  
Ma teu foïnt d'am anaout marteze eur vech all :  
M'ar contestont ouzin m'ho lacai quer munut  
M'a rer goude ho maro dan annevalet mut .

*An Digentil.*

Ha enep lezen Doue , Autro , he raac'h se  
Noc'h eus ket a affer a netra digante ;  
Mado oc'h eus avoalc'h a drugare Doue ,  
Rae Doue a diffen ober droue d'hon nessan  
Na donnet enep guis da vengi var nezan .

*Ar Ch'ondt.*

N'en d'hon quet en humor da glevet da sarmon ,  
Me tisco da brezec ous eun den a fesson .  
Sellet ar mic'hiec , ar c'hoquin didalve ,

Penos e teu da choqui eun den evel d'hon-me.  
Abalamour da ze , assuret , te ranco  
Goerza tout en antier ho tier ha querrio ;  
Ma n'a rez quement-se m'em bezo da vue ,  
Me ha tisco da vlam eun den evel d'hon-me.

*An digentil.*

Autro , m'ar commandet me raï ho polontez ,  
Me voerzo en antier ep cavet tam truez.

*Ar C'hondt.*

Men bezo da vuez ma n'a rez quement-se.  
Me vel arru ma Fach , eun dra zo a neve.  
He bien ! ma Fachic , petra en deus lavaret  
An Autro an Escop ? Ha me zo refuzet ?

*Ar Pach.*

Ya , tout en antier , quement a c'houlennet .  
Lavaret en deus din n'a roï quet eur guennec .

*Ar C'hondt.*

Avoalc'h eo quement-se , me a ya betec enne ,  
M'ho rento glac'haret , assuret int a ze :  
Ha c'houi oll assamblez a renco dont guenez ,  
A nep a boeltrono men bezo he vuez .

(*Ar C'hondt a sorti.*)

---

*AR BANQUIER a lavar d'AB SENECHAL.*

Autro ar Senechal , me deu betec ennoc'h  
Evit eun tamic affe pehini a gontin deoc'h .  
Ar C'hondt deus a Boetou zo bet ho clasq arc'hant ,  
Pa n'a m'eus quet roet e fell ma ruinan .

*Ar Senechal.*

Unan demeus he dud zo bet guenen aman  
Da c'houlen diguenen arc'hant en prest dezan ,  
Hac en deus laret din ma n'a rogen dezan ,  
He teuje ar C'hondt en quer evit ma revinan .

*Ar Banquier.*

Demp betec an Escop ha leveromp dezan  
E cleer dont e quer evit hon revinan .

AR GOUARNER, AR BANQUIER, AR SENECHAL HAC  
AN ESCOP.

*Ar Gouarner a lavar.*

Salud dec'h, Autro an Escop. Ni zo deut d'ho cavet  
Evit conta dec'h eun darn deus hor sujet.  
Darn a dud ar C'hondt zo bet betec aman  
Da c'houl diguenemp arc'hant en prest dezan,  
Ha lavaret demp ma n'a rogemp dezan,  
He teuje he-hunan evit hon revinan.

*An Escop.*

Unan deus he dud zo bet iveau ama,  
Hac en deus lavaret cazi ar memeus tra :  
Ya, eur som notabl, betec daouze mil scoet.  
M'ar caran ho reï n'en deui quet dam guelet.  
Ha m'ar rogen dezan quement a c'houlenne,  
Assuret enep guis var ma zro ne deuje.

*Ar Senechal.*

Digueneme e c'houlen, a n'hon pas dec mil scoet,  
M'ar caran ho reï n'am bo droue ebet;  
Ha m'ar rogen dezan quement o c'houlenne  
Assuret var ma zro enep guis na deuje.

*Ar Banquier.*

Sepenant me m'eus aon n'e deuio d'hor guelet:  
N'en deus quet ha fiout en eun den revoltet.

*An Escop.*

Gouir sur a leveret, n'a fiomp quet ennan;  
Hen a gavo tud fall evit donnet gantan.

*Ar Banquier.*

Beza he eus tud fall : en pep lec'h he caffet  
Muin demeus ar sort-se evit a dud honest.  
Tud fall a zeui gantan, assuret omp a ze,  
Rac se e m'eus mil aon razan deus ma bue.

*Ar Senechal.*

Donnet a raï en quer evit tra assuret,  
Eun dra bennac a raï pa vezo antreet.

*An Escop.*

Me oc'h assur en fat, en quer m'a antre,  
Hor bezo eun affront, assuret omp a ze;  
Sicouret ac'hanomp, ha ni er c'hontanto  
En aour hac en arc'hant quement ha zefotto.

*Ar Gouarner.*

N'ho pet quet a vorc'het , me a diffenno quer,  
Me ya da lacat urs , da ober va never.

*Ar Senechal.*

Rac se , bezit fidel da viret bon tan caer,  
Ha ni ho sicouro , m'ar ho pe nep affer.

*Ar Gouarner.*

Ya me zifeno , gant ar c'hraç a Zoue ,  
Me a zeui d'ho caout varc'hoas da greis de.

*An Escop.*

Doue da reï dec'h ar c'hraç da zont d'he guemeret ,  
Neuze gant graç Doue ni vezo divorce'het.

*Ar Gouarner.*

Me ya breman en quer da c'houlen soudardet ,  
Var bars eun heur aman me vezo preparet.

*Ar Senechal.*

M'ar guel ar Gouarner quemeret ar C'hondt ,  
He lacat prizonnier, n'hor bezo muin a spont ;  
Ni a raïo dezan cazi eur memeus tra  
A lavare da ober, ze sur a brometta.

*Ar Banquier.*

C'houi , Autro Senechal, magistrat er guer-man ,  
Ha gle ober justiç bepret da bep hunan.  
Pa vezo an Autro ar C'hondt lequet dec'h er prizon ,  
Me a raïi justiç ep tam compassion ;  
Hac a gavo testo , ep tam difficulte ,  
Me lacaï d'ar maro ep caout ontan true

*An Escop.*

Me raïo publia partout dre ar c'herrio ,  
Dre an oll parozio, evit cavet testo  
Deus ar rapineres hac al laeronzio  
Hac ar violamant : Dre vertu an testo  
M'ar be cavet coupapl dre lezen vajeste ,  
He vezo condaonet d'ar maro ep tam true.

*Ar Banquier.*

Me a meus mil aon rac n'e gaffe testo ,  
Dre ma ze eun de revoltet dre ar vro.

*An Escop.*

N'e meusmorc'het ebet : pa vezo prizognier

Ni hor bezo testo demeus a pep quartier ;  
Rac m'a ve er prizon , an oll a lavar sé ,  
James n'e deu er mes p'en deffe mil bue.

*Ar Senechal.*

Cals a dud puissant zo bed var ar bed-man ,  
Pere zo bet tromplet aneze ho-hunan ,  
Pere ne gavet den er bed-man birviquen  
A vije trech' de-ze an dra-ze zo certen ,  
Mes pa droe ar fortun e teuint da goea.

*An Escop.*

D'emp de n'em retira. Varc'hoas ni glevo  
Hac he en deus dezir da zonnet var hon tro.

*Eun Tabouriner a antre hac a lavar.*

Ordrenet eo dec'h oll quemeret an armo ,  
Ha donnet en ty quer da gavet an Autro .  
Ar Gouarner a guer en deus din lavaret  
Donnet doc'h assina da zonnet d'he gavet.

*Ar Gouarner.*

Habitantet a guer, evit m'ha intentet ,  
Ar C'hondt deus a Boetou a gle dont d'hor guelet :  
Discriffet en deus din m'am bezo da lezel  
Gantan an alc'hoëo demeus a borzo quer  
Evit m'a antreo , m'a commando enni  
D'an oll habitantet , hervez he fantazi ;  
Hac e ranque cavet an aour hac an arc'hant ,  
Daou uguent million , quen a vezò contant :  
Hen a raï he roll hervez he boloute ,  
Da ober demp-ni poan hep cavet nep true.  
Ma lavar dre he scrit he rai goerza or mado ,  
Quen a vezò savet dezan e c'houlenno.  
Bet e voamp er conseil gant noblaz ar c'hartier ,  
Hor c'honseil zo bet da diffen ontan quer.  
Chetu aman ar sujet d'ho peza dastumet ,  
Responent din breman petra e leveret.

*Ar c'henta Soudard.*

Quement-se ha ve mad , Autro ar Gouarner ,  
He ve gret goard bemdez da viret ontan quer ;  
Ha m'ar be rebellant donnet doc'h attaqui ,  
Ni hon deus armo mad evit he repoussi.

*An eil Soudard.*

Me zo bet aliez ho heuil ar c'hampagno,  
Hac a het ma buez o mania an armo :  
Biscoas n'a guevis den a nep sort nation ,  
A raje din treï, rac me a meus calon.

*An triet Soudard.*

Avoalc'h a leveret, mes c'hoas n'he ouzoc'h quet  
Pe sort den eo ar C'hondt, hervez m'ha parlantet ,  
M'a ve arru aman, a dra-ze a zo guir,  
N'he gretac'h na sellet na lavaret eur guir.

---

AR C'HONDT HAC HE GOMPAGNUGNES.

*Ar C'hondt [a] lavar.*

Hor sus, Capitennet, va zud oll en antier,  
Me ho suppli breman da vezad din fidel.  
Pa vezo question evit antren en quer,  
Neuze e commansin da ziscoe ma souer :  
Rac me lavar dec'hu, Cabiten va arme ,  
Tollet hevez m'ho pet a c'houi a boeltrone ;  
Rac evel ar c'henta, c'houi rance bepret  
Beza ar vaillanta deus an oll soudardet.

*Ar General.*

Autro, hep contenaneç, chetu me prest aman ,  
Biscoas n'em hoe morc'het betec an heur a vreman ;  
Evit discleria dec'h ar pez zo em c'halon ,  
Me bromet dec'h james me n'a vezin poeltron.  
Quen dre pado an dir zo en bec ma c'hlenve ,  
Me demoigno dec'h va guir fidelite :  
Non pas dre ma c'homzo, evel m'ha contan dec'h ,  
Ne bon c'houi a vello pa arruo ar bec'h.

*Ar C'hondt.*

Evidoc'h, Tenzorier, ha zo bepret fidel ;  
A bel zo, e credan, he zoc'h ma mignon quer ;  
Ne bon, m'ar gallan c'hoas cavet patientet ,  
Me ho recompanso, n'ho pet quet a vore'het ,  
A c'houi, oll Autrone, a gredan zo iveau  
Er memeus santimant, guelet vo hep dalez.

*Ar Pot-a-gambr.*

Terrubl e zon souezet o velet en pe guis

He trettet ac'hanomp nac iveau hor servich.  
Eun Doue zo en Env a var ma bolonte,  
A men a meus, Autro, ouzoc'hu carante.

*Ar C'hondt.*

Assuret, Autrone, me a gred fermamant  
He vezin servichec'h fidelamant.

*An Digentil.*

A guement a voelis biscoas var ar bed-man,  
Biscoas n'an boe courach evel a meus breman.  
Avis a ra guenen ma ven presantamant  
Oc'h antren en Poetou en em gaffen contant.  
Pala jarni mornon ! He douet dec'h a ran,  
Birviquen gant uan ma c'hroc'hen n'a lezan.

*Ar Gouarner gant e Soudardet.*

Salud dec'h, Autro ar C'hondt, penos ac'hanoc'hu ?  
Chetu me deut d'ho caout evel ma zoc'h arru ;  
Rac me a bromet dec'h, gant guir fidelite,  
Biscoas ne voelis den quen gravet em ine :  
Ya, gant carantez evit ma intentet,  
Er fesson ma caran biscoas n'e meus caret.

*Ar C'hondt.*

Autro ar Gouarner, terrupl e zoc'h glazet,  
Credi a ran e zoc'h eun traïtour em andret.

*Ar Gouarner.*

Credet parfetamant james ne songis den  
Betec an heur a vreman, an dra-ze zo certen ,  
A c'hoas n'e gredan quet evidoc'h, Autro ar C'hondt,  
He rac'h din recul na quemeret neb spont.  
Me zo bet aliez en meur a vataillo,  
Ha biscoas ne gollis er brezel en nep tro.

*Ar C'hondt.*

Clevet ta, Gouarner, re robust ho cavan,  
Terrupl he gomzet rust ebars er vro-man.

*Ar Gouarner.*

M'ar oc'h eus an dezir da lavaret eun dra,  
Comzet ha ni glevo gant cals dimeus a joa.  
Rac se, demp er placen ep dale quen aman ;  
Neuze ni a glevo petra ret er vro-man ;  
Rac ne bretantan quet c'hoas he vec'hu qu'en hardi

Da Bretanti netra enep va fantazi.  
Autro ar C'hondt, m'ho ped, leveret din bremān  
Pelec'h na pe en bro chetu dre aman.  
An nor-man zo serret ouzoc'hu franchamant.  
M'ar contestet ouzin n'a vezin quet contant,  
Aman eo lavaret penos oc'h eur goal den  
Ne ret fors a Doue, a diaoul, nac a zen  
Hac e meus an dezir da glevet ho toarre,  
Quent monet davantach comzomp bremān aze.

*Ar Chondt.*

Terrupl out effrontet da c'houzout va doare.  
Piou a gommando din-me ? Eun den eveldout-te !  
Tol eves mad, ma den, pe he vezi tromplet,  
Rac m'ar fachan ouzit me n'as pardonnin quet.

*Ar Gouarner.*

Ma lavar quement all dee'hu, Autro ar C'hondt,  
Biscoas me ne voelis eun den quen divergont,  
Abars ma quitaffen biquen divar oc'h hent,  
Me a zepre ma c'chie a golle ma squient,  
A dorre ma divrec'h, a denne bleo ma fen,  
Quent evit pretanti comz en eur sort termen.  
Terrupl oc'h effrontet, malevrus he veet,  
Sanchet opinion buana ma c'hellet ;  
Attaqui ac'hanon gant comzo goloet,  
Quen a meus poan speret me meus ouz da glevet,  
Gant malic e frezan, gant depit e varvan,  
Coll ma squient a rin pa songin neubeutan.  
Vantre tette mornon ! Pa gleffen parfoeltra,  
Te pe me a rancō ar vech-man perissa.

*Ar Chondt.*

Terrupl oc'h aheurtet, Autro ar Gouarner ;  
Falveout a ra dec'h alc'hoëa ouzin quer,  
Evel pa n'a ven quet ar henta anezi :  
Pe c'houi zo en coler, pe oc'h eus freunezi.

*Ar Gouarner.*

Freunezi n'a m'eus quet, en coler eo e zon.  
C'houi a zo caz daze certen, Autro ar C'hondt,  
Ouz en em revolti a enep ar guer-man.  
Rac se e zon fachet, hac e zon deut aman.

Evit lavaret dec'h promptamant ar vech-man.  
Birviquen evel-se n'e antreet aman.  
Penos, den fall m'a zout, collet eo da squiant ;  
Ancouet e heus Doue, Roue, an oll zent ;  
An diaoul deus an ifern zo antreet ennout ;  
Biscoas ne voelis den revoltet evel-dout ;  
Possedet eo a gren da galon gant mado ;  
En tenzorio ar bet e man da zilisso.  
Eun den a galite ! Fi da guement-se tout !  
Tolet eves, Autro, pe ho pezo irvout ;  
Rac me a lavar dee'h gant amitie ep quen,  
Ha non pas dre coler na gant eur galon yen,  
Va c'halon zo bepret evit ho servigin ;  
Que n'en deo breman n'en doc'h displiget din.  
Me n'en don quet traïtour, me a meus droug ouzoc'h,  
Ha malic em c'halon ne dalfe quet ennoe'h.  
Er fin ne baten mui da gomz var quement-se.  
Me a gret em c'halon oc'h eus quittet ar fe,  
Perac e spontin me evit guelet ar C'hondt ?  
N'en deo quet ar Roue. Ma ve quen divergont  
Donnet da forei quer enep ma bolonte,  
M'ar antreet ebars, me am bo ho pue.

*Ar c'henta Soudard.*

Guel eo dec'h he lezel, rac n'en doc'h me promet ;  
En zo goassan clenvez ha quement a gaffet.  
M'ar ho pe affer outan, neuze c'houi a velo.  
Lezomp-ni anezan ha tennomp hon hillo.

*Ar Gouarner.*

Me a varfe cant guech, an dra-ze m'er promet ,  
Quent m'a teuffe en quer da ober drouc ebet.  
Arretet, Autro ar C'hondt, pe me ho ho pue :  
Ni zo aman en goard, hae e vec'h eur Roue ,  
N'e antreo den aman n'e glevin ho doare.

*Ar Chondt.*

Re aheurtet ho cavan, Autro ar Gouarner,  
Ha n'ho poehu quet dec'h diguenen eul lizer ?

*Ar Gouarner.*

Pardonnet din, Autro, dec'h he voe recevet  
Eul lizer deus ho peurs a voe din digasset.

Me er c'homunicas da habitantet quer,  
Ma teujont da sponta ho clevet an tener,  
Ma zint oll rezolvet da zont de n'em diffen,  
M'ar fell dec'h dont en quer, an dra-ze zo certen.

*Ar C'hondt.*

Perac he spontetu ? C'houi ne beet diner,  
Nac an artizanet pere a chom en quer.  
Mes ar re pinvidie a rance reï din-me  
En antier ma c'houlen, pe otramant ho bue.

*Ar Gouarner.*

Salocroas ! Autro ar C'hondt, n'e c'hoarvezo quet se :  
Me ho pet da retorn m'ar be ho polonte.

*Ar C'hondt.*

N'en dout quet esperet da reï din en antier  
Quement a c'houlennan scrivet dre ma lizer.

*Ar Gouarner.*

James n'a bermettin dec'h se, a lavaran ;  
Rac evit comzo caer n'e antrefet quet aman.  
Rac se, me ho suppli, retornet prompt d'ar guer ;  
Ma n'a ret me raï urs d'ho renta prizognier.

*Ar C'hondt.*

Va renta prizognier, eun den evel d'hon-me !  
N'he heus na urs na pouvoer da ober an dra-ze ;  
A m'a ouffen ep quen he pe bet an dezir  
D'am sellet evit se na da lavaret guir,  
Me plante ma c'hlenvez cant coech evit unan,  
Er calon da guenta hac er coquinet-man.

*Ar Gouarner.*

En em rentet, Autro, da donnet prizognier,  
Pe m'en bezo ho puez, an dra-ze a zo scler.

*Ar C'hondt.*

Quer vo did da gomzo, me a bromet did se,  
Rac e zout var ar poent m'a colli da vue.

*Ar Gouarner.*

Pa golfen ma buez me n'e ran quet a gas ;  
Me a varfe aman quent sortial am plas.  
He bien ! ma goardo, red eo en em gouraji  
Ouz an diaoul bras a zeu d'hon attaqui,  
Rac en em rentet evit divoal ho pen,

Pe ho pezo malheur, an dra-ze zo certen.

*Ar C'hondt.*

Va c'halon sur em c'hreis a fres gant anquen :  
Red eo dissimuli guenec'h, mihiyean.

*Ar Gouarner.*

Biscoas n'e meus guelet eur jeant evel-dout,  
En quement a ma hes partout he res irvout.  
Mes pa ve an ifern ouz da zicour breman,  
James a enep din n'e antrees aman.  
Guel ve guenen mervel mil guech evit unan  
Quent m'a antreac'h en quer evit e revinan.

*Ar C'hondt.*

Mervel a leveret : breman ni a velo  
Pehini ac'hanomp da guenta a vanco.

*Ar Gouarner.*

Certen me voar er fat james me ne vanquin,  
Evidoc'h ho-hunan james n'e reculin.  
Mes ardou an diaoul a zo ouz da sicour,  
N'en deus man evidout nemet an tan pe an dour.  
Mes Jezus ma Zalver ha sicouro bëpret  
An nep a gombatto en hano an Drindet.

*Ar C'hondt.*

Diffen quer ouzin-me a fell did da ober !  
N'en doat quet suffizant da se, ma mignon quer.

*Ar Gouarner.*

En hano an Drindet, me ho ped, arretet !

*Ar C'hondt.*

Ep tam remission, breman he finisset.

*Ar Gouarner.*

Autro ar C'hondt, marteze en em queffet tromplet.

*Ar C'hondt.*

Raizonni a res c'hoas, fripon fall, effrontet.

*Ar Gouarner.*

M'ho ped, Autro ar C'hondt, en hano Doue hon lezet.

*Ar C'hondt.*

Das lezel, obstinet, da vuez a rancan.

*Ar Gouarner.*

Ret vezo dre c'hoari e hol guenec'h quentan.

*Ar C'hondt.*

Me gred e zout pare ar vech-man gouscoude.

*Ar Gouarner.*

Barbar hac innumen , tirant ha didalve.

*Ar Chondt.*

Coms a res c'hoas ouzin , fripon , er fesson-ze.

*Ar Gouarner.*

Diaoul bras an ifern , te a c'heus ma bue.

*Ar Chondt.*

Fripontet effrontet , coquinet didalve ,  
M'ho tisco da attaqui eun den evel d'hon-me.  
Rac se en em diffen , me a bromet did se.  
Me antreo en quer hac am bo da vue.

( *Laza ra ar Gouarner.* )

*An oll Soudardet assambles.*

Mizericord , Autro , pardon , en an Doue.  
Ny a c'houlen pardon hac ouspen hor bue ;  
Ny offr dec'h hor servich ar rest deus hor bue.

*Ar Chondt.*

Me ho pardonne tout ha roï dec'h ho pue  
P'an doc'h en em rentet , assuret oe'h a ze.  
Ma visach resolvet ha to de n'em diffen ,  
M'en bije ho pue , an dra-ze zo certen.  
Rac se , chommet aze pe retornet d'ar guer ,  
Me rai ma ordrenanç breman ebars en quer ,  
Hac a raio ma feuc'h gant ar binvidjen ,  
Men bezo ma c'houlen , an dra-ze zo certen.

---

**AR SENECHAL, AN ESCOP HAC AR BANQUIER.**

*Ar Chondt a lavar.*

He bien ! Autrone , nac evit pe sujet  
Oc'h eus ac'hanou-me quen difesson trettet ?  
Ha dont d'am refuzi evit neubent a dra  
N'e gleiae'h quet ober , an dra-ze a gredan .  
Ha serri quer ouzin , ha n'ouzoc'h quet eo me  
Au Autro Souveren partout dre ar c'hontre.  
Responent din breman , mes n'e leveret guir.  
Quent m'a voan deut en quer he voac'h meurbet habil ,  
Ha roet guenec'h moez d'am lacat er prison ,  
Da laza ma goardo hep tam remission .

*An Escop.*

Pardonnet din , Autro , a ze am excuzet  
Ar Gouarner a guer en devoa concluet  
Da lacat ober goard , me a broniet dec'h se ,  
N'en devoa quet a urs , Autro , da ober se.

*Ar C'hondt.*

Quer e zeo bet dezan , m'e meus bet he buez ,  
Hac em bezo arc'hant , pe m'e gollo iveau .  
Ha quement a c'houllan n'a rabattin diner ,  
Pe m'e lacaï an tan partout da zevi quer.

*Ar Senechal.*

Enep lezen Doue he raffac'h quement-se ,  
N'hon deus quet a vado da zevel ar som-se .  
Pa deffac'h da voerza hon oll vad en antier ,  
N'e zafac'h quet ar som a fell dec'h divar quer.

*Ar C'hondt.*

Belistr ha coquin fall , hac avis a heus-te  
E ran me ar justiq evel m'a er greste ?  
Ha m'ar be eur paour ques er prizon did lequet ,  
Ne ves james contant n'e pean revinet.  
Neuze e vi bemdez ous e interroji  
Quen a pezo tennet quement mad a guivi .  
Ma n'a gueves testo d'en lacat d'ar maro ,  
Te a glasco erfin quellies deus a dro .  
M'a quivi lee'h avoalc'h hep cavet tam truez  
Da lemen digantan e zanves hac he buez .  
Mes din-me n'e ri quet , cret assur an dra-ze ,  
Men bezo ma goulen pa z'hon deut da vale .

*Ar Banquier.*

Autro , m'ar plich guenec'h reï din daou de pe tri ,  
Me n'e c'houlennan quen evit ho fourveï .  
Me roï den en antier , moyennant graç Doue ,  
Quement a leveret m'am bezo liberte .

*Ar C'hondt.*

Ya , me roï amzer evit ho fourveï .  
Rac se gra diampech ha quenta m'a c'hilli ,  
Rentet din mil scoet , hac e c'helli neuze ,  
Beva atao en peoc'h ha cavet liberte .  
Mes evidoc'h ho taou a ranco reï din-me

Daou mil scoet var-n-uguent , pe m'em bo ho pue ,  
Hac evit va foan da veza deut en quer  
He rancan daou mil scoet , an dra-ze a zo scler  
N'e rabattin diner n'am bezo quement-se  
En aour hac en arc'hant , pe otramant ho pue.

*An Escop.*

Impossibl e ve demp ho cavet fete :  
Reit demp eiz de termen , Autro , da glasq ane.  
Ar som a zo notabl , n'eo quet ez oc'h cavet ,  
Sur ny hô fournisso dec'h , certen n'he vancomp quet.

*Ar Chondt.*

N'e roan quet a dermen , credet en guirionne ,  
Beza oc'h eus moyen da bean aneze.  
C'houi oc'h eus marc'hat mad da veza quit gant se ,  
Ha me quercouls marc'hat da gavet ho pue.  
Rac se , ma Zenzorier me gommand dec'h breman  
D'ho lacat er prizon , ha commanceet goerzan.  
Quement mad ha gueffet deze en ho ziez ,  
Ha ma n'a ve avoale'h men bezo ho puez ,  
He depechent ober abars m'a retornin.  
Me ya da dy ma breur camet n'e arretin  
Rac se grettu depech. Breman me retorno ,  
M'a rebarbont ouzin m'ho lacaï d'ar maro.

*An Tenzorier.*

Autro , me a raïo quement a gommandet ,  
Hac a raï ep faut ar pez a leveret.

(*Ar Chondt a ya er mez.*)

*An Tenzorier a lavar.*

He bien ! Autrone , red eo pea breman  
Hervez an ordrenanç oc'h eus clevet aman ,  
Pe donnet d'ar prizon , ha me voerzo neuze  
Quement vad a guevin ebars en ho tiez.  
Va c'harg eo ober ze pa z'eo din commandet  
Gant ma mest an Autro , p'an deo bet partet.

*An Escop.*

Autro , hon sicouret , m'ar plich guenec'h , breman :  
E man en ho pouer donnet d'hon assista ,  
Ho tont da rabatti , p'ho heus autorite.

*An Tenzorier.*

N'e rabattin diner , assuret credet se ,

Red eo dec'h pea ar som pa zo dec'h ordrenet,  
Hep contenanc breman, pe he vet prisonniet.

*Ar Senechal.*

Ma na rabatet demp nen deo voaz dimp pean.

*Ar Tenzorier.*

Diffennet eo ouzin, rac se astet buan.

*Ar Senechal.*

Deut guenemp ni hon daou m'or bo or liberte :  
Ne songet quet certen monet dirac Doue.

---

*An Duc breur d'ar C'hondt a lavar d'he vroec.*

Va fried, eur hoan vrás a zo zur em c'halon  
Ho consideri ar spont, allas ! hae an eston  
A ra va breur ar C'hondt d'an habitantet ker,  
Betec m'en deus lazet mèmeus ar Gouarner.  
Pa zedi en quer e command tout deze,  
Evel pa ve eur monarq p'otramant eur roue ;  
Ma teu d'ho revina ep tam remission ,  
Ma n'ho deve arc'hant ho laca er prison.  
Mèmeus an dud honest pep goella deus a quer  
Zo gantan revinet quement zo er c'hartier.  
Ma collan ma squient pa deuan da volet  
Pe guer yaouanc he ze en em accoquinet  
Persecuti an ilis ep tam remission  
Muntra ha violi partout dre ar c'hanton,  
Hep cavet nep truez na respecti hini,  
He ra bepret peptra herves he fantazi.

*An Duques.*

Va friet, evit se n'ho pe quet a vorc'het :  
Nen doc'h quet responsable dar pez a leveret.  
Mar gra actiono a ve control d'ar fe  
He vezoo punisset gant an Autro Doue :  
Rae n'an doc'h quet capabl evit e gorija,  
Dec'h he rae insult querquent ha d'ar c'henta.

*An Duc.*

Va friet, nen deus cas : me meus ar volonté  
Da dont d'er c'horija gant ar c'hraç a Doue.

*Ar c'henta Pach.*

Goel ve dech en lezel, nen doc'h quet evittan ,

Un den revoltet eo mat deus var ar bed-man :  
Hac a lavar beva er bed-man en e roll,  
Un den eo ne ra fors a Zoue nac ha diaoul.

*An eil Pach.*

Guir sur a leveret, rac ne ra fors a den,  
Laza, muntra a ra, an dra-ze zo certen ;  
Violi ra ar merc'het ar groaguet dre ar c'hontre  
Hep cavet aon ebet a jujamanchou Doue.

*An Duc.*

Me garre ven capabl evit e gorija  
Pa golfen va oll mad ha va buez gantan.  
C'hoas me a ve contant, ma ve convertisset,  
Da recour he ine, sivoas ne ve collet.

*An Duques.*

Goel ve dec'h en lezel, pa zeo quen revoltet,  
Pidi Doue evittan ma vez pardonnet,  
Lacat offerenno ma plijo gant Doue  
Dont d'e convertissa ha da chanch a vue.

*An Duc.*

O Doue eternel ! Reit oc'h assistanç din :  
Ha c'houi Guerc'hes santel, a c'houi Speret divin  
Diguenec'h ar c'hraç, an ners a c'houlennan  
Da vonnet he bettec a de convertissan ;  
Da remontri dezan gourc'hemenno Doue,  
Hac ar c'hraç diguenec'h ma chancho a vue.

---

**AR ROUE TURQUI *a lavar d'e Pachet.***

Me zo ar Roue bras dimeus an Turquian ,  
Ar puissanta den a zo var ar bed-man .  
Gonnezet e meus oll, quement a zezirent .  
Biscoas en nep combat c'hoas n'en d'hon bet goassan  
Evit an dangerio a meus bet er bed-man .  
An oll nec'hamancho hac an dristidiguez  
A meus bet er bed-man en durant ma buez ,  
Dre ma c'hourach he zint oll tremenet ,  
Chomet on en peoc'h, trugare Mahomet :  
Ennez a zo fidel bepred d'e vignonnet ,  
James da den ne vanq p'en deve promettet .  
Pa commansis quentan donnet da gombatti

M'em boa neubeut a dud, me ho ped d'am c'hridi.  
Quenta combat a ris he voa en Tartari ;  
Enon assuramant he voe stard ar barti.  
Ogon, gant ar gourach deus va zello ep quen,  
He tisparfoeltris tout ep james lezel den ;  
Ar Roue anezi ha lequis prisonnier,  
Ha goude quement-se e c'hantrezis en quer,  
Ma lequis he vado da augmenti ma re.  
Neuze em boe courach ho velet quement-se,  
Ma c'hoantrezis neuse mornet da Limaci  
Ha goude quement-se ebars en Hiberni.  
Partout em c'hombajo e meus bed ar victoar ;  
Biscoas eneb lec'h ne meus cavet ma far.  
En Spagn, en Allamagn, en Bro-zos, en Candi,  
Hac ous ar re-man tout e c'his da gombatti.  
Hac e meus gonnezet, c'houi a zo din testo ,  
Va pachet, pa voac'h guenen er brezeillo

*Ar c'henta Pach.*

Biscoas ne meus guellet ha boe on en bue  
Eun den quen courajus ha ma zoch en arme :  
Nep a vige enon ho velet ar c'hoari,  
Gant eun tol lanç ebquen he lac'hoc'h daou pe dri.  
Ha me en ho guichen ha voa quer courajus,  
A c'houenne sicour bepred digant Venus ;  
Biscoas ne meus guellet evit eur pot bian,  
A guement am drec'he me n'en don quet en poan.

*An eil Pach.*

Biscoas n'em boe quement a c'hoant da gombatti  
Evel am boa, Sir, pa voan en Normandi.  
Avis a re guenen e voan prest da vervel  
En creis an dirantet terrupl int tud cruel.  
Mes c'houi gand ho mousquet a laze aneze.  
Quer pot hac ar c'hellien en o goelen neuze,  
Hac eur rivier a goat ho font voar ar pave  
Diouz ar soudardet dimeus ar c'hartier-ze.  
Neuze em c'houragis pa voelis quement se,  
Hac or boe ar victoar ep tam difficulte.

*Ar Roue.*

Terrupl e zon doaguet. Eun dra zo em speret

A zo ous va geni ; ne meus repos ebet :  
Avis a ra guenen, clevet eur brut ho ren  
Hae a ra din poan vras, an dra-ze zo certen.  
Eur C'hondt zo en Poetou, ha ne ra fors a den ;  
Me requet Jupiter da crevi he empen.

*An cil Pach.*

Penos, Sir ma mestr, ha doetanç oc'heussu  
N'ho peze trahizon diouzomp ha nep tu ?  
Me a zepre ma c'hic, ha dorre ma mempro  
Quent evit ho quitat evit nep brezeillo.

*Ar Roue.*

Avoale'h eo quement-se, ne meus quet a vorc'het,  
Pa zoc'h oll fidel din na vezin quet tromplet.  
M'ho suppli, Autrone, bezet fidel bepret.  
Daouest petra c'hoarfe rac ne ven surmontet ?  
Rac m'en a meus esper souten va amprez  
Entre em bezo yec'het ha ma touguin buez  
Rac se, ma zrompiller, het partout da vale  
Da lavaret d'am bobl beva en liberte,  
E mens bet ar victoar en quement ma zo bet,  
Ha leveret deze beza bepret fidel,  
Na vezint quet traïtour rac na deuffe brezel.

*An Drompiller.*

Sir, pa gommandet me a oboïsso ,  
Me a ya da bourmen partout dre ar c'hampagno  
Da lavarat d'ar bobl beza bepret joaus,  
He zoc'h pepred vainqueur a drugare Venus ,  
Sellaouet, Autrone, noblanç ha bouriñien ,  
Artizanet a ker hac ar varc'hadourien.  
Commandi a ra dec'h Sir hon Roue bras  
En em garet pepred, beza mignonet vras :  
Bet en deus ar victoar en quement ma ze bet,  
Var vor ha var douar, trugare Mahomet.  
Rac se bezet fidel pepred en he andret,  
Ha mar aru brezel he viet sicouret.

( *Sortial a ra.* )

---

*Ar C'hond a lavar d'he dud.*

Par la tete mornon ! freunezia a ran :

Jupiter, Mahomet, va sicouret breman ;  
Da Pluton ma mignon en em recommandan,  
C'houi Mars ha Mercur ha galon a bedan,  
Reit din oc'h assistanç pa meus nécessite ;  
Va doare a ouzoc'h ne zouetan quet aze.  
Eul lizer zo deut din breman zouden rentet,  
Digant eur mignon din e meus an recevet.  
Eur Roue a zo c'hoas ebars an Turquian,  
Biscoas nen deus cavet he bar var ar bed-man.  
Ret eo scriva dezan e meus c'hoant de volet,  
Mar be he bolontez, gant e oll soudardet.  
Rac se ta, ma c'hourier, het prest gant diligenc  
Bettec ar Roue Turq, hep ober contenanc.  
Reit al lizer dezan, ya, ep compliment,  
A beurs ar C'hondt Poetou, leveret franchamant ;  
Ha tolet evez mad petra ha laro dec'h,  
Evel ma retornfet vit ma clevin guenec'h.

*Ar C'hourier.*

Pa gommardet, Autro, me gle oboïssa ,  
Me a retorno prest hep camet arettia,  
Hac a lavaro dec'h evel ma lavaro  
Nemertan ha roffe din ive lizero.

---

*AB C'HOURIER a lar d'ar Roue :*

Sir, mar plich guenec'h, quemeret eul lizer  
A beurs eun den yaouanc n'eo quet deus ar c'hartier,  
En em recommand dec'h; chetu en langach ber,  
Me ho ped d'am depech evit ma hin d'ar guer.

*Ar Roue.*

Penos, coquinet fal, terrubl oc'h effrontet ;  
Me gret ne ouzoc'h quet ouz piou eo he comzet .  
Retornet var ho quis buhana ma elfet.  
Leveret d'an den-ze me yello d'er goelet ,  
Dindan eiz de aman en devezo brezel :  
Leveret se dezan pa arrufet er guer.

*Ar C'hourier.*

Adieu eta , Sir , me ya da bartia  
Hac a rento dezan ho quello hep tarda ;  
Credet assuramant me lavaro dezan.

*Ar Roue.*

Ha c'houi oc'h eus goelet biscoas quer revolte!  
Ha ma zeo ar C'hondt ? M'ho pet consideret.  
Fallout a ra dezan rei ar brezel dime.  
Jupiter, Apollon, ha c'houi bermetto se !  
Ha c'houi iveau Neptun a gommant er mor bras,  
Mercur ha Junon, ha c'houi ive Pallas,  
An Doue Minerv em c'hoste a choazan :  
Dezo en em roan quent evit combattan.  
Rac se, me ho suppli d'am azista bepret,  
Me a fio enoc'h ne vezin quet tromplet.  
Diana, c'hoas eur vœch va sicouret ive,  
M'en bezo evidoc'h pep sort fidelite;  
Couraget ma arme ha bezit fidel din :  
Ouz tud ho deus pouvoar e eomp da gombatti.

---

**AR C'HONDT GANT E DUD.**

*Ar c'hourier a laver d'ar C'hondt.*

Autro, mar plich guenec'h, intentet m'ho suppli.  
Biscoas na voelis tud evel en Tartari,  
Quer cris int a galon ha rust bras a vizach.  
Avis a ra guenen he zint leun a gourach.

*Ar C'hondt.*

Petra en deus laret an den-ze a nevez,  
Ha me zo e vignon, he mezan, cousecoude ?

*Ar Pach.*

Salocroas ! Autro ar C'hondt, lavaret a ra dee'h  
Var ben eiz dez aman en eur gavo guenec'h,  
Intantion en deus da livra combat dec'h.

*Ar C'hondt.*

Ze memeus a fel din, a ne c'houennan quen :  
Me a houie erfat em boa adversourien.

*Ar Pot-a-Gambr.*

Autro, teulet evoes gant aon na vec'h tizet,  
Rac enez zo eun den a zo leun a speret.

*Ar C'hondt.*

Penos en deus speret ? petra leveret-tu ?  
Ha c'houi a voar piou on ? ha sponta a rit-tu ?

*Ar General.*

Hac e ve an Ifern armet en hon enep,  
N'am bezo quet a spont pa vezin coleret.  
Avis a ra guenen e sao ma bleo em pen  
Pa glevan comz an Turq, assur, en ep tachen.

*Ar Roue a lavar d'e dud :*

He bien ! va c'honseil, quenta zo da ober  
Eo goulen assistanç quent monnet d'ar brezel.  
Ret e zeo dimp goulen sicour ouz Mahomet  
Pehini a adoran evel ma zeo gleet.

(*Aman e c'heont var o daoulin.*)

Neptun ha Pallas, Apollon, Jupiter,  
Lucifer ha Vulcain, Belzebut, Astoret,  
Anfin oll idollo assambles ho pedan,  
Roït din oc'h assistanç, ezom a meus breman :  
Biscoas n'am boe brassoc'h. Mar plich, reit sicour din,  
Quen a vezoz neuze me chommo d'ho pedi.

*Eun Diaoul a lavar :*

Nep aon, sao a lesse, quemer pront an armo,  
Ha quet da gombatti, me n'eur gavo eno.

*Ar Roue.*

Me ho trugareca, ma Doue Mahomet,  
Abalamour m'oc'h eus ar veeh-ma ma c'hlevet.  
He bien ! Autrone, a c'hui a voel breman  
Penos on respontet gant Doueo ar vro-man ?  
Rac-se, ho pet courach ha n'ho pet quet a spont,  
Na boeltronet james ha bezet divergont,  
Gant grac an idollo pere zo puissant :  
Nep a zo voar ne a vezoz triomphant.  
Biquen, me en assur, n'em bo misericord  
Evit ar gristenien pa vezoz deud ar sort,  
Rac se, oll Autrone, pa vezoz combatti  
Evit ar gristenien, ne espergnent hini.  
Me a recompanço nep a raï gaillardis,  
Pa vezin deut d'ar guer me a rayo ma guis.

*Ar c'henta Pach.*

Credet parfaitamant, biscoas n'oc'h eus goelet  
Evit eur pot bian eun all quen redoutet

Evel ma zon partout gant an oll gristenien.  
Biscoas bete breman ne meus collet gant den  
Nac evit nep combat ne guitaïs tachen,  
Na ne brissen ober evit nep sort Christen.

*An eil Pach.*

Ne bon tao, camarad, pa renquer combatti  
Neuze heli goelet eur potric ho c'hoari :  
Quer liger, quer buan ha quer sean ho varchin,  
Te vo nemert goad e lec'h ma tremenin.

*Ar Roue.*

Ion couraeh, Autrone, quement se a blich dip :  
Me vezo dec'h fidel ar goella ma hillin.  
An nep am sicouro deus ma necessite,  
Pa vezin retornet m'er goelo goude ze.  
Rac se n'ho pe doetanç e haen d'ar brezel,  
Quent ma chomfen er guer goel ve guenen mervel.  
Ne chommomp davantach, demp d'en em b'repari,  
Pa vezo poent monet ny yello da c'hoari.

---

**AR C'HONDT HAC E DUD.**

*Ar General a laver :*

Autro ar C'hondt a Poetou, gant ho permission  
Me laro dec'h eun darn am aprehansion.  
Sellaouet, m'ho suppli, mar deo ho polonte,  
Ha me lavaro dec'h breman ar virionne :  
Pa voan me ho pourmen var ar mes ar guento,  
He zeus bet rentet din raetal eur c'heho :  
He voa ar Roue Turq ho commanç rei brezel  
D'ho Majeste, Autro, sellet an infidel !  
Hac e meus bet sonjet he vije groet mat  
Dont d'ho avertissa ha dont da evessat.

*Ar Chondt.*

Me ho trugareca demeus ma oll pouver,  
C'houi zo en assuranc va brassa mignon quer.  
Sellet an infidel, traïtour ha deloyal :  
Abars eun heur aman me rai dezan e fal.  
Demp breman, Autrone, demp d'en em b'repari,  
Ha var nemeur amzer me yel d'e saludi.

AR ROUE.

Par la tête mornon ! Jupiter ma Doue,  
Chetu ny armet cloz ma guzul adare ;  
Ha deus d'am instrui ha da lavaret din  
Penoz pe en fesson he tleer combattin.  
Rac c'houi zo Jupiter, Roue d'an oll astro,  
Hac ar mest general var an oll idollo.

AR C'HENTA CONSAILLER.

Sir, me oc'h assur, pa vezin me tommet,  
Evit unan na daou na vin quet surprenet.

AN EIL CONSAILLER.

Sir, me a ya breman da denna voar e dy,  
E gastel hac e ker en antier a razin.

*Tenna a ra var ne.*

AR C'HONDT HAC E DUD A LAVAR EN COLER :

Vantre tête mornon ! petra zo a neve,  
Ma tenner em c'hastel hep goulen ma c'honge ?  
Ah, ah ! chetu aman ar Roue a Durqui,  
Eman zo courajus evel ma livrini.  
Me ho salud, Sir, a greiz va c'halon.  
Terrupl oc'h effrontet tenna quen direzon,  
Hep goulen ar c'honje deus a mest ar ker-man :  
Me gret ne ouzoc'h quet piou a chom aman.

AR ROUE.

Ny zo deut aman expressament, Autro,  
Evit rei brezel dec'h dre c'hraç hon idolo.

AR C'HONDT.

Par la tête mornon ! Penos, tra effrontet,  
Ma medi ho courach. Alon, ma soudardet,  
Tennet ho cleveyer ha lamet var neze.

AR ROUE.

Mahomet, Jupiter, parfoeltrit ho fенно,  
M'or bezo ar victoar dre græc on idolo ;  
Ny en em zicouro gant artifiç ive,  
Hon azistet eta doueyo deus an Eê.

AR C'HONDT.

Ho ! ne batten biquen da glevet ho langach,  
Ho clevet da gomzo me ha ya en arach.

Ha te en em rento, lavar din effrontet?  
Terrubl he zout hardi gant da dad Mahomet.

*Ar Roue.*

Birviquen an dra-ze ne raen evidout,  
Goel ve guenen cant coech perissa en irvout.

*Ar General.*

He bien ! Autro , a c'houi en em rento ?

*Ar Roue.*

Sicour a c'houlennan digant ma idolo.

*Ar C'hondt.*

Evit da idolo meus aon , nan dout goassa.

*Ar Roue.*

Mars , Jupiter , Venus , a re ze a adoran.

*Ar Chondt.*

Penos, tra effrontet, c'hoas n'en em renti quet !

*Ar Roue.*

Vantre sacre mornon ! Ma nan don glac'haret !

*Ar C'hondt.*

Rent din prest da glenvez, ne pezo drouc ebet.

*Ar Roue.*

Goel vez guenen cant coech beza disparfoeltret.

*Eun Diaoul.*

Me a renonç a gren, ma na gueres tehet :

Evidon me, ma den, ne chomin quet guenet.

*Ar C'hondt.*

Avis a ra guenen he clevan an diaoul  
Ho combatti ouzin evel eur Roue fol.

*Eun Diaoul.*

Fors ! fors ! fors ! voar ar C'hondt.

*Ar Roue.*

Biscoas n'am boa guelet eun den quen divergont.

---

AR C'HONDT.

Eman zo bet c'hoari oc'h eus guelet aman ,  
Biscoas ne meus goelet tud evel ar re-man .  
Lavaret mad voa din he voa an Turquiet  
Tud ar re terrupla a guement a gaffet ;  
Mes mar fel dese muin lavaret guir ouzin ,  
Me grougo ar Roue hac e dud a devin .

*Ar General.*

Quement se a ve mad foeltra tout ho feno ,  
Quen a vezu neuze n'or bezo peoc'h , Autro.

*Ar Roue gant e dud hac a lavar :*

Eman zo din affront , eman zo din glac'har .  
Biscoas ne voe guelet eun den voar an douar  
Quer redoutet hac en , an dra-ze a zo seler ,  
Bette m'en deus trec'het ma Doue Jupiter.  
Er fin , ne on ma han gant despet e frezan ,  
Gant ar glac'har ha spont ne on petra a ran .  
Em dizesper em be c'hoant bras d'en em lazan ;  
Ne allan mui denc'hel digor va daou lagat :  
Ret e zeo din gortos eur bloa pe daou aman ,  
Rac n'en don quet capabl da drec'hi voar nezan ,  
Col a ran ma squiant pa deuan da voelet  
Eur C'hondt evel ennez en deffe va drec'het .  
Biscoas bettec breman n'am boa collet combat ;  
Mes he leal breman he meus groet a dro vat .  
A ben daou bloa aman c'hui voelo c'hoari all ,  
Rac me a meus esper de lacat c'hoaz da fal .

*Ar C'hondt Hac an Duc.*

*Ar C'hondt a lavar :*

Ho serviger , ma breur , ha mat eo ho yec'het ?  
Pel a zo n'am boa bet an enor d'ho quelet .

*An Duc.*

Yac'h ha dispoz avoalc'h , a drugare Doue ,  
Da renta servich dec'h p'ho bezo bolonte .  
He bien ! va breur quer , petra zo a neve  
Ma zoc'h deut en quer oc'h unan evel se ?

*Ar C'hondt .*

Gret am boa eur goulen ouz an noblanc a guer ,  
Da c'hout a hi raje em andret eur faveur :  
Goab o deus groet a ze , mes quer eo bet deze .

*An Duc.*

Eur pec'het bras , ma breur , ho poa oc'h ober ze ;  
N'ho poa quet affer a netra digante .

*Ar C'hondt .*

M'en boa discrivet d'an Autro ar Gouarner

Ma teuje da reï din an alc'hoeo a guer ;  
Hac en deus refuset ac'hanon deus a ze ,  
Hac evit peamant me meus bet e vuez.

*An Duc.*

Va breur, pec'het oc'h eus 'tont laza ar Gouarnier  
Ha voa eun den honest mar boa den er c'chartier ,  
Ha ramassi mado an dud er fesson ze ,  
Ennez a zo eur c'hrim grevus dirae Doue.

*Ar Chondt.*

Va breur, en em drompla a ret voar ar poent-ze.  
Quement zo er bed-man zo crouet gant Doue  
Evit servich an den, ha rac se e c'hellen ,  
Pa zon den puissant, quemeret hep goulen  
D'am servigin queit ha ma vin er bed-man ,  
Rac goude ma maro n'am bo ezom netra.

*An Duc.*

Va breur, c'hoas eur veach, reprenit ar goms-se  
Ha sonjet er maro ordrenet gant Doue  
Quement a zo crouet gant Doue er bed-man  
A ranco tout mervel, an dra-ze zo patant.  
Daouest en pez stat red vo dimp finissa !  
Rac se, me ho suppli, deut da zonjal ennan ;  
Capabl vezo m'er goar dont d'ho convertissa ,  
Rac Doue hon Zalver en deveus lavaret :  
*Nolle mortem peccatoris sed magis convertatur.*  
Doue ne ordren quet laza den er bed-man ,  
E oll blijadures ma teufe da veva.

*Ar Chondt.*

Ne gomzet quet a varo, me ho suppli a ze ,  
Enes a zo eun dra lestan din a goste ;  
Doue a lez an den bepret en liberte.

*An Duc.*

En em drompla a rit, allas ! ho cridi ze :  
Considerit, va breur, gourc'hennou Doue  
Ha tachit da regli dionte ho pue ;  
Songit, me ho suppli, pa oc'h eus o disquet ,  
Ne dal netra ho gout ma na vent observet.  
Miserabl eo an hinfi a zo deut voar ar bed  
M'ar deu d'ho transgressi, sivoas dre eur pec'hed.

Goel vige dec'h, ma breur, ne vijac'h quet crouet  
Ha laquet da netra, va c'hridi a hellet,  
Evit dont da derri ar bianna gourc'hemen  
En deus groet hor Zalver, an dra-ze zo certen.

*Ar Chondt.*

C'houi a hel ober ze, oc'h eus doujanç Doue ;  
Ne vanq netra dee'h, tout hervez ho polonte :  
C'houi a zo pinvidie, puissant er bed-man ,  
Quement a zezirit ne zefot dee'h netra ,  
Ar rozen ar merc'het d'en em divertissa ,  
C'houi a zo sur evrus ha contant er bed-man .

*An Duc.*

C'houi ho pezo ive evel ma veritet ,  
Mes ret eo dec'h ober evel ma zeo gleet ;  
Rac me ne gredan quet e ve den er bed-man  
A deuffe d'ho refuz, m'oé'h assur an dra-man .

*Ar Chondt.*

Ne gredan quet e ve evit eur feumeulen  
Unan quen excellant ebars en ep tachen  
Evel ma zeo homan. Charmet eo ma c'halou  
Oc'h admira he guenet, he daoulagat mignon :  
Ret eo din e c'havet, an dra-ze a zo scler ,  
Ha te pa out savant que da bridicater.

*An Duc.*

Farsal eo a res, cas ganez va friet.  
Me golo va oll vad ha va bue guenet  
Evit difen ouzit mar fel dit ober ze.  
Ne heus-te quet a aon rac jujamant Doue ?

*Ar Chondt.*

Vantre sacre mornon ! me renonç da Zoue ;  
N'en deus quet a farço ebar en affer-ze :  
Me rancô e c'havet p'otramant da vue ,  
Rac se, hep contenanc, en em resolv da ze.

*An Duc.*

Barbar hac inhumen, tirant ha revoltet ,  
Ha te ve quer cruel quemeret va fried ?  
Cas ganez va oll vad ha ro patientet ,  
Les ganez va fried a garan quen parfet.

*Ar Chondt.*

Ne gomz quet davantach. Croguet enni potret ,

Me gollo va buez pe me renq e c'havet;  
Ha c'houi, coquinet fall, hetu tout a lesse,  
Mar chomet davantach m'en bezo ho pue.

*QUENTA OFFICER ar C'hondt a lavar:*

Deut ganemni, Itron, ret e vo dec'h donnet  
Gant ma mest an Autrou he zeo dec'h commandet.

*Quenta Pach an Duc a lavar:*

Nan daïo quet assur, me a bromet dec'h se,  
Discroguit anez y pe m'en bo ho pue :  
Eun dra vrás eo guelet he vec'h quen effrontet  
Cas ganec'h va mestres en despet d'e friet.

*Eil Pach an Duc a lavar :*

Courach, camaradet, ha divoallomp oute,  
Da diffen hon mestres n'en daïo quet gante ;  
Me a varfe aman an dra-ze a zo scler,  
Quent m'an deffe affront ma haë deus ar guer.

*Eil Pach ar C'hondt.*

Ganemp a dra certen e c'haï, me bromet se,  
Mar diffennet ouzimp or bezo ho pue.

*An Duques.*

Fors, va friet, sicour, balamour da Zoue,  
Da zifen va henor hac ouspen-ze va bue  
Ouz an tirant barbar a zeu d'am ravissa :  
Va friet, en an Doue, va sicourit breman.

*An Duc.*

Va sicourit, va zud, da lemel va friet  
A ya gant an tyrant barbar hac effrontet :  
Biscoas ne meus guelet er bed-man, me gret se,  
Ne respecte he goad, tyrant, nemedout te.

*Ar C'hondt.*

Vantre sacre mornon ! me renonç da Zoue.  
Penos, coquinet fal, mabou gast didalve,  
Mar chomet dirazon ma n'am bo ho pue.  
Autro, hit da sermon partout dre ar c'hontre,  
A c'hui, Itron, marchet, ne gontestit quet re.

*An Duques.*

O Doue éternel ! roît oc'h assistanç din ;  
Me ho ped ar vech-man da zont d'am c'honsoli ;

Biscoas ne voa den quen glac'haret a me,  
Me garfe he ven quit evit col va bue.  
Offanci va Doue, va c'herent, va friet !  
Siouas me va hunan a zo dizenoret,  
Ma ne deu va C'hrouer breman d'am azista :  
Me garfe ven maro hac et deus ar bed-ma.

*Ar Chondt.*

Vantre sacre mornon ! me renonç da Zoue,  
Na gomzit davantach ha querzet a lesse.

*An Duc.*

Va sicourit ma zud, da lemel va friet  
A ya gant an tyrant barbar ha revoltet.

*Ar Chondt.*

Penos, coquinet fal, poeltronet didalvez,  
Ma na guerit quitaat me am bo ho puez.  
Rae se, me lavar dee'h mar deut mui var va zro,  
Gant va c'hontelassen me ho tisparfoeltro.

---

*AN DUC e hunan.*

O malheur ar brassa ! ô tyrant ! ô barbar !  
Biscoas ne voa guelet da bar var an douar  
Nemet eur veach al gant an tyrant Hamon,  
Pehini a reas iveau ar memes action,  
Hac a voa quer cruel da ravissa e c'hoar  
A voa eur plac'h honest, he hano voa Thamar;  
Mes Doue eternel, c'houi a zo mad bepret,  
Dre ho misericord conservit va friet  
Ouz an tyrant cruel en deus hi ravisset :  
Pa na voa quet contant n'en deus quet a bec'het.  
Me a ya da gavet an Escop deus a guer,  
Ma carfe va zelaou e raffe he zevez,  
He prononci eur setanç a excommunuguet  
En retranchi a vesq an oll catoliquet,  
Ha neuze marteze gant ar c'hraë a Zoue  
En em gonvertisso hac e chancho a vue.

---

*AN ESCOP, AR SENECHAL HAC AR BANQUIER.*

*An Escop a lavar :*

Chetu ni revinet ar vech-man gant ar Chondt,

Biscoas n'am boa guelet eun den quen divergont.  
Pa deuas dar guer-man , m'oc'h assur deus a ze ,  
Me sonje coulz a voa e collen va bue.

*Ar Senechal.*

Gouir sur a leveret , n'en deus quet er bed-man  
Eun den all quer cruel , an dra-ze a gredan ,  
Ma n'or bije cavet are'hant da rei dezan  
E voamp oll revinet ha laquet da netra.

*Ar Banquier.*

Evit d'en em diffen ne voamp quet evitan ,  
Cavet en deus tud fall evit donnet gantan ;  
M'or bije contestet , an dra-ze a zo seler ,  
E lacaje an tan , me gred , da lesqui quer.

*An Escop.*

Mar deu mui var on dro e vezomp revinet ,  
N'or bo quet a arc'hant da reï dezan bepret.

*Ar Senechal.*

Ret vezo dimp bepret reï e c'houlen dezan ,  
Rac n'en domp quet capabl d'en em diffen ountan.

*Ar Banquier.*

Mar deu nemeur a voech da c'houlen quement-se ,  
N'or bo quet a arc'hant , assur eo an dra-ze.

*An Escop.*

Me voel arru e breur ho tonnet d'hor c'havet ,  
Eun dra benac a zo sur gantan c'hoarvezet .  
Salud dec'h , Autro an Duc , petra zo a neve ,  
Ma zoc'h breman en quer oc'h unan evel se ?

*An Duc.*

Allas ! sujet a meus hac am groa glac'haret ,  
Va breur , an Autro ar C'hondt , en deus ma desolet .

*Ar Senechal.*

He leal , Autro an Duc , ni a zo diezet ,  
Daou uguent mil scoet e zeo demni coustet ,  
Ho veza deut en quer ma zint dezan savet ,  
Ma coust din ma hunan bete unnec mil scoet .

*Ar Banquier.*

Din me e coust ive ep rabatti diner  
Dec mil scoet en antier , quent ma zeo et a guer .

*An Escop.*

Certen , coustet eo din trizec mil scoet en antier

Quent ma zeo sortiet hag êt dimeus a guer :  
C'hoas e zon evrus beza quit evit se ,  
Me sonje couls a voa e collen ma bue.

*An Duc.*

Ma vije ma oll vad êt gantan en antier,  
Ha lezet ma friet da chom guenen er guer,  
M'en a vije contant d'ho hol tout en antier,  
Quent laëres ma friet, an dra-ze a zo scler.

*An Escop.*

Penos heo êt gantan ho pried evel se !  
He grim a gri venjanç ous an Autro Doue.

*An Duc.*

Ya, gouir eo certen he zeo bet enlevet  
Diguennen deuz ar guer gant an den miliguet.  
Rac se on deut aman ma vezo decretet,  
Ha groet he decretta evel ma zeo gleet.

*Ar Senechal.*

Penos he zecreti ; n'en deus den er guer-man  
Ha grette en ep guis lavaret guir ontan.

*An Duc.*

Perac ne gretac'h quet ? c'houi a zo oblijet  
D'ober justic d'an oll evel ma zeo dleet :  
Evidoc'h zo choazet evit ma punisset  
Ar c'hrimo capital ha vezo er vro groet,  
Ha ma na rentet quet da peb hunan justic  
C'houi ranco oc'h unan anduri ar suplic.

*Ar Senechal.*

Nan don quet oblijet, me a lavar déc'h ze ,  
Rac aon am be neuze na golfen ma bue.  
Lequettan er prison ha neuze he voelfet  
Ha me a raï justic evel ma zeo dleet.

*An Duc.*

Me n'an don quet capabl da ober ze dezan ;  
Ma vijen ne voa quet êt ma fried gantan.

*Ar Senechal.*

Evidon en ep guis n'en don quet evit-an ,  
Rac se clesquet re al hac a allo ontan.

*An Duc.*

C'houi, Autro an Escop, ha renq da viana

Prononci eur zetanç de escomunuga.

*An Escop.*

Evit se ne rin quet, me lavar dec'h breman,  
Ne sourciin james en ep guis anezan.  
Ha petra a dalfe Demp sur ober an dra-ze?  
Eun den eo n'en deus quet deus a doujanç Doue.

*An Duc.*

Eun dra vras eo lezel eun den var ar bed-man  
D'ober pep sort crimo hep dont d'er punissa.

---

AR C'HONDT HAC AN DUCQUES

*Ar C'hondt a lavar dezi :*

He bien, ma c'halon ha ma c'hontantamant,  
N'en doc'hu quet breman ebars en ezamant?  
Biscoas ne voe ma breur eun den evel don-me,  
Na birviquen na ye, me assur a ze.

*An Ducques.*

Me ne ouffen beza em ezamant biquen  
Quen a vezo beza gant ma friet hep quen.

*Ar C'hondt.*

N'en deus den er bed-man ebars en plijadur  
Evel ma zoc'h breman, an dra-ze m'en assur.

*An Ducques.*

C'houi a zo eun tirant, eur barbar revoltet.

*Ar C'hondt.*

Gant ha ran darre all c'houi noc'h eus drouc ebet.

*An Ducques.*

Ar goassa sivoas din me zo dissenoret.

*Ar C'hondt.*

Ne gomzet quet a ze ha ni vo mignonet.

*An Duques.*

Den mechant, effrontet, cruel a diraison.

*Ar C'hondt.*

C'houi eo va c'halonic, va inclination.

*An Ducques.*

Te laca va ine evel en eur prison.

*Ar C'hondt.*

Va c'halon c'hoas eur voech ha va inclination.

*An Ducques.*

Traitour, den miliguet, me gret out possedet.

*Ar C'ondt.*

Aboe an heur quenta ma voelis ho quenet,  
Me gret en assuranc ar pez a leveret,  
Aboe ar moment ze oc'h eus ma ravisset.

(*An Ducques a goe dan douar.*)

*Ar C'hondt a lavar dezi :*

He bien, va c'halonic, petra eo qnément-ze ?  
Ret eo en em gouraji ha sevel adare.

*An Ducques.*

Cals a ret din a c'hoas gant ho comzo lubric,  
Hac ho fessonio fal, miliguet rejudic.  
Avis a ra guenen e zon prest da verval,  
Ne gredan quet james e ouffen beva pel.

*Ar C'hondt.*

Sevet, va c'halonic, arabat eo facha,  
Me zo ret din partout en em divertissa :  
Mar lavaran netra he zeo gant carante  
Eo en lavaran dec'h ha gant fidelite,  
Terrupl on contristet, memes poan a souffran  
Em speret, em c'halon evel-ze p'ho coelan :  
C'houi eo va esperanç ha va oll blijadur,  
Va oll gontatamant p'am be displijadur ;  
Va fianç er bed-mam ha va objet querra,  
Deus va oll tenzorio c'houi sur eo ar c'haera.  
M'em bezo evidoc'h en pad va oll bue  
Cals a fidelite ha cals a garante,  
Me ho caro bepret memeus bette mervel  
Hac e meus esperanç, Itron, da guen denc'hel.  
Rac se, me ho supli, diseleriet prontamant  
Petra ho gra dies perac nan doc'h contant,  
Ha mar e meus pouver en ep feçon ebet  
Da renta dec'h servich evel ma veritet,  
Me ho pet d'am c'hredi evel m'ho promettan,  
Deus a greüs ma c'halon me raïo mar gallan.

*An Ducques.*

Ar pouver-ze oc'h eus, gout a ret, couls a me  
Oc'h eus ma ravisset deus a douez ma ligne,  
Ha digant ma friet pehini am boa bet  
Hac a garan muïa hac a guerin bepret.

*Ar Chondt.*

Me zo eun den prudant a meus autorite,  
Me a gret he clean beza caret yve.

*An Ducques.*

Gouir sur a leveret ma ve c'houi a veffe  
Evel ma zeo gleet dindan doujanç Doue.

*Ar C'hondt.*

Arabat eo memeus sonjal en quement-ze,  
Goude p'an bezo spas me voelo an dra-ze.

*An Ducques.*

Avoalc'h eo quement-ze, discour a ret breman  
E medi da galon bars an traou ar bed-man,  
Da heuil da blijadur ha da vue infam  
Palamour ne gueves den a deuffe das plam.  
Ogon, me lavar dit, hep cavet aon ebet,  
Ma na chanches bue he vezi glac'haret :  
Doue a bermetto pa pezo uzet re  
Deus e batiantet, assuret out a ze ,  
Ma aruo guenet eur goal rencontr benac  
Ma na goulles pardon ous Doue a galon vad.

*Ar C'hondt.*

Lavaret e heus din meur a sermon deja,  
Eun den fal am heves herves ma intentan.

*An Ducques.*

Ar falla den zo bet biscoas voar an douar  
Pa zout bet quer cruel da ravissa da c'hoar :  
Hac en zo bet biscoas goelet var an douar  
Eun den quen revoltet, quen cruel, quen barbar,  
Nemet eun tirant all ha voe quen effrontet  
Ha eure ar memes tra, Amon he voa anvet.

*Ar C'hondt.*

Ret eo dec'h franchamant tevel voar quement-ze,  
Me zo permettet din commandi dec'h yve.

*An Ducques.*

Ne ouffen birviquen ancouat quement-ze,  
Eur c'hrim a gomméttan grevus dirac Doue.

*Ar C'hondt.*

Clevet ma c'harante, va speret, va dezir,  
Eun dra a laran dec'h certen hac a zo goufr.

Me c'houlen da desto ar steret hac al loar  
Biscoas ne meus caret unan var an douar  
Evel ma admiran ar brezanç ac'hanoec'h,  
Birviquen ne vancan da veza fidel deoc'h.

*An Ducques var he daoulin.*

Goerc'hes gloriis Vari, me recommand dec'h ma c'halon,  
Quemeret ma ine en ho protection :  
Mes, allas ! sivoas din petra lavaran me,  
Me zo criminales dirazoc'h, ma Doue ;  
Dre ar merit ar goad er groas oc'h eus scuillet,  
Digant an tirant-man breman ma delivret.  
Petramant, ma Doue, diguesset an anco  
Da lacat eur veach ar fin d'am devezio :  
Ne chomin quet pelloc'h d'offanci ma Doue  
En pep sort pehejo evel ma ran bemde.  
Maleur dide, tirant, malheur sur a pezo,  
Rac te a zo cos din da ober pec'hejo,  
Pec'hejo execrabil, leun a fallagries,  
Dre da superbite ha da autorite.

*Ar C'hondt.*

Biscoas ne meus goellet unan var ar bed-man  
A bliche d'am speret evel ar Brinces-man ;  
Rac ze leveret din, mar plich guenec'h, Itron,  
Perac tra n'en doc'h quet en dezir ho calon ?

*An Ducques.*

Pa deuan da zonjal, allas ! pe sort buez  
A gonduan guenec'h breman, sivoas dime,  
He teuan da sponta pa sonjan vezor ret  
Monet da renta cont petra em bezo groet,  
Deus ar pec'hejo bras hac an avoultriac'h  
A gommetan guenec'h, sivoas din allies.  
Credet parfetamant me gare vén maro  
Hag êt deuz ar bed-man, finisset ma dezio ;  
Evit oc'h offanci ma Doue vel ma ran,  
Ret vezor renta cont pa zonjin neubeutan.

*Ar C'hondt.*

Arabat en nep guis dont da zonjal en ze,  
Credet parfetamant, pe me'n bo ho pue.

*An Ducques.*

Penos ancouat birviquen quement-man?  
Ret e vo rentan cont pa zonjin neubeutan.

*Ar Chondt.*

Marchet, het en ho rout hac het prest a lesse,  
Me ho tisco da vlam eun den evel dome.  
Evel-ze eo gleet recompaci guisti,  
Pa vezer squis gante ho c'has er mes an ty.

---

AR C'HONDT GAND HE DUD.

*Ar Chondt a lavar :*

Hac en zo, Tenzorier, ma c'houffro guernisset  
Gant aour ha gant arc'hant evel ma zeo gleet ?  
Rae breman he rancan prepari eun arme  
Da gommandi partout herve ma bolonte.

*An Tenzorier.*

Ya, credet assur c'houi a zo puissant  
Ha pinvidic avoalc'h : evit aour hac arc'hant,  
Beza oc'h eus mado da sevel eun arme  
Pa ve dec cant mil den, me oc'h assur a ze.

*Ar Chondt.*

Eun den santel a Rom en deus din discrivet  
He zeus eur Pap neve breman souden lequet ;  
Hep ma zon bet james ous e zizobliji,  
Groet en deus eur zetanc d'am excommunigui,  
Groet diffen ous an oll da gonversi ouzin.

Me meus mil blijadur ho consideri ze :

Ma sevin eun arme evit mont ebette  
Me ha lamo ar Pap a lacaï he guile,  
Ha gommando partout herve ma bolonte,  
Partout dre ar bed-man, hep nep difficulté ;  
Neuze e vin tranquil pa vin em liberte.

Me ya da heritic evid cavet mado :

Quement den a gommand breman en ilizo,  
Me voerzo ho mado da augmenti ma re,  
Me en disco da vlam eun den evel dome.  
Rac se partiet tout da zastum soudardet  
Ha quemeret arc'hant quement hac a gueret.  
Hac het dre ar c'herrio da ober inban se ;  
Rac ze, groet diampech da ober an dra-ze.

*Eur C'hourier.*

Autro pa gommandet, raison eo dimp monet :  
Me ya breman d'ar guer da dastum soudardet,  
Ha noblanc, ha re all, quement den a voelin,  
Tout he vezoint contant da zont d'ho serviji

*An eil Courier.*

Ha mar contest nicun da zonnet guenemp-ny,  
Ny hel ho oblija pa gommandet demp-ny.

*Ar Chondt.*

Ya, mar contest den guenec'hu da zonnet,  
Leret deze eo me a meus ze commandet :  
N'en deus den d'ho refus, dindan boan e vue,  
Da zont d'am servija pa gommandan deze.

*Ar C'hourier.*

Ny raïo diampech da dastum soudardet,  
Ha neuze prontamant dy zeuio d'ho cavet.

*Ar Chondt.*

Hastet, groet diampech, c'hoas eur voech p'ho pedan ,  
Rac voar ben eiz de he rencomp partian.

*Eun Drompiller.*

Nep en deveus dezir da vonnet d'an arme.  
En servich eun den brao, eun den a galite,  
Pini en deus arc'hant, guin ha cher vad bemde,  
Bevet ha tretet mat herve e bolonte,  
Neuze dec scoet ar mis he vez e gajo,  
Eur blijadur eo servija an Autro.

---

ALLAN CARO HAC E VROEC, - EUN DIGENTIL.

*allan Caro a laver :*

Me ya breman da labourat deus ar mitin,  
A galon vat he labourin.  
Bet e meus hirie guin ardant  
Abalamour d'am groec a zo coant ;  
Meritet mat he voa guenen cavet eur horfat digante,  
Cals ac'hanoc'h ne roffe quet evit guin lot deus e vroec,  
N'en deus micher evit beva er c'hanton-man eun dogan  
Er vro man bet e meus hirie guin ardant.

(Mont a ra da labourat.)

*Groec Allan Caro a lavar :*

Hetu Allanic, da vit dour  
Hac astet prest dont d'ho labour.

*Allan.*

Hetu oc'h unan da guerc'hat dour,  
Rac me renq chom gant ma labour.

*E Vroec.*

Penos n'en defet quet pa gozean ?  
Deutu, Autro, d'ar c'hoquin-man,  
Ne guitaffe quet an ty-man.

*An Digentil.*

Perac, va den, n'en deste quet da vit dour ?  
Sentet ous ho groec ha et d'ho labour.

*Allan.*

Salocroas dre va lez, Autro,  
Nep a zo sehedic a yello.

*An Digentil.*

Creguet er pichez-ze ha querzet da vit dour,  
Pe mar tennan eur c'hlastren  
Me roïo dec'h a dreus ho pen.

*Allan.*

Goel he ve dec'h ne raac'h quet ;  
C'houi voar er fat he zon armet :  
Mar deut en ep guis var ma zro,  
Me ho foeltro gant ma hernio.

*Groec Allan.*

Trohet eur scouarn diontan  
Ma ne gar quitat an ty-man,  
Ma vezu neuze lavaret :  
Ar hoz dogan discouarnet.

*Squeï a ragantan hac e lavar :*

Demp breman d'on labour affo,  
Ha mar deu ar c'hornic voar on tro  
Ny er hasso quit ha vazado.

*Allan ha lar ontan e hunan :*

Eman eo ar vuez oc'h eus goellet  
En deus eur paour ques gant e vroec,  
Ha n'en de quet goel guenen he lezel,  
He guitat ha mont d'ar brezel,

Evit beva ganti er guis-se,  
Ha beza dogan coucoude?  
Foutre d'am groec ha coz botto,  
Me ya breman da veza autre,  
Me a ya d'ar brezel breman  
Rac ne chommin muin er vro-man,  
Henon den n'am anaveo,  
Hac e raïont ac'hanon Autro.

(Mont a ra er mes an ty.)

---

LAVIGN HAC HE VROEC.

*He Vroec a lavar :*

Penos, ma friet quer, me ho coel contristet !  
Na pe sort pinijen zo dec'hu ordrenet ?  
Eun den a vir galon en deffe covesset  
Tout an oll pec'hejo en deveus commettet  
Ha gle beza joaus, rac ma ve pardonnet,  
Mar gra ar binijen zo dezan ordrenet.

*Lavign.*

Impossubl he zeo din ober ar binijen  
Ha zo din ordrenet, an dra-ze zo certen :  
Pa sonjan quement-se va c'halon a vo din  
Birviquen an dra-ze me ne accomplissin.

*E Vroec.*

N'en doc'h quet oblijet da ober pinijen  
Da berrat ho puez, an dra-ze zo certen.  
Leveret, ma c'halon, petra zo ordrenet  
Ha mer graï evitoc'h mar be din permettet.

*Lavign.*

Lavaret he zeo din e rancan chom tri de  
Hep effa bannac'h guin. Pa sonjan an dra-ze !

*E Vroec.*

Hac e zeo capabl se da zont doc'h afflija  
Evit tremen tri dez hep monet da effa.

*Lavign.*

Ya, capabl avoalc'h, me oc'h assur a ze,  
Ma ven eun dez hep quen he colfen ma bue.

*E Vroec.*

Tevel, ma friet quer, hac ancounahet se,

Me bromet dec'h eun dra hac a zo guirionne,  
Mar queret derc'hel mat da ober pinijen  
N'em bo eur pipat guin en creiz ho courc'hemen.

*Lavign.*

Birviquen ne alien beva var ar bed-man  
Ma nan dan dan davarn evit gallout effan :  
Ar zon a ra ar goer ebars en tavernio  
Ha ra din caout ar guin cals excellantoc'h.

*E Vroec.*

Ret eo dec'h, ma friet, va c'hredi c'hoas eur voech :  
Deut d'en em gorija a hentet tud honnest,  
Heuillet evit exempl an dud fur er c'hanton,  
Ha converset gante, hac effet gant rezon.

*Lavign.*

Birviquen ne ouffen beva er fat gante ,  
Pa ve debret ho lein he c'heont a goste.

*E Vroec.*

Ret e vo, ma friet, dont d'en em gorija,  
Hac êt d'en em bournen, d'en em divertissa.

*Lavign.*

Reit din, ma friet, arc'hant da vont guenen  
Evit reï d'ar bevien pa arruont guenen.

*E Vroec.*

Dalet daou liard, n'ho pezo quen breman,  
Rac na deuffe dec'h camarad da vonnet da effa.

*Lavign.*

Nan din quet, assuret: reit din pemp goennec.

*E Vroec.*

Salocroas, ma friet, n'ho pezo quen breman :  
Hastet dont da leigna, me a ya de hoza.

---

ALAN CARO, LAVIGN, EUR C'HAPITEN.

*Allan a antre.*

Bonjour dec'h, ma c'hompaer, ma zetu evel-se ?  
Deut da rei chopinat, me roï eun all yve.

*Lavign.*

Penos, reï chopinat ! C'houi ra din glac'hari :  
Groet zo diffen ouzin na effin banac'h tuy.

*Allan.*

Ar voech-man he zoc'h spazet.

*Lavign.*

Ho senti ous ma groec he zon bet revinet,  
Ha ma iz da goves, ma voe din lavaret  
He ranquen chom tri dez hep monet da effa :  
Me meus eur glac'har vras p'an em consideran,  
Da veza bet quer zot da lavaret ze ,  
Ma carjen m'en am boa lezet ze a goste.

*Allan.*

N'en de quet ret dimni dont da zenti onte,  
Rac mar oc'h eus arc'hant ny effo coucoude.

*Lavign.*

Allas ! ma c'hompaer ques, ne meus quet eur goennec ;  
Ma groec pe deus clevet en deus int oll serret.

*Allan.*

Me ya da vit arch'ant da bea boudaillat  
Breman pa retornin, demeus a galon vat.

*Lavign.*

Pellec'h da vit arc'hant ? Me ya guenec'h yve.

*Allan.*

Me ya d'en eum anroll da vonnet d'an arme.

*Lavign.*

Petra reffet ennon pa vezet anrollet ?  
Rac demeus a c'hoarfe he ve goel caout sec'het.

*Allan.*

Dibri, ober cher vad hac effa guin beinde.  
Na zeffoto netra herve ma bolonte.

*Lavign.*

Avoalc'h eo quement-ze me ya da vont yve :  
Dem prest da vit arc'hant ha ny effo goude.

*Allan.*

Dez mat dec'h, Autro, ny on deus bolonte  
Evit dont d'on anrolli da vonnet dan arme.

*Ar C'chapiten.*

Ancien ho cavan da vonnet d'an arme,  
Goenna ha ra ho pleo, goel ve dec'h chom er guer.

*Allan.*

Me raï touza ma fen ha tenna ma hernio,  
M'en bezo eur berruquen hac e vezin Autro.

*Ar C'chapiten.*

Mat a ret o zenna ; n'en deus quet en arme

Tud a ve danjerus gant ho fen e guis-ze.  
Pe hano oc'h eussu, leveret din ma den ?

*Allan.*

Allan Caro a Donquedec,  
Lessanvet aman ar Bonedec.

*Ar C'hapiten da Lavign.*

A c'houi, va den, a zo yve deut evit monnet dan arme ?

*Lavign.*

Ya, Autro, rac ne meus quet  
Eur banne guin eus ma sec'het.

*An Chapiten.*

Breman he torri da sec'het,  
Rac me roï dit anter cant scoet,  
Hac êt en ker da bourneni  
Ha lequet evez d'en em vevi.

(*Mont a ra en e rout.*)

---

AR C'HONDT HAC E DUD.

*Eur c'hourier a lavar.*

Autro, chetu me bet ho tastum soudardet ;  
Tud chentil ha noblanc, Autrone Baronnnet,  
Bourc'hizien ha comun ha hep sort calite  
Zo en em anrollet da vonnet dan arme.

*Ar C'hondt.*

Deut mat oll a viet, me ha bromet dee'h ze,  
Rac dezir bras a meus da sevel eun arme.  
Evit monnet partout da commandi deze,  
Pa zoc'h oll tud vaillant ha tud a galite.

*Eur Baron.*

Me a zo eur Baron, a zo bet alies  
Ebars en armeo dre ar rouanteles  
Gant daou uguent mil den dimeus a dud vaillant,  
Da bunissa ar re ha voa rebeliant,  
Ha enep ar roue voaint en em revoltet,  
Mes me gant eun arme e meus int punisset.  
Quement deus en ep a voa en em savet  
Ha dimeus ar Roue a voa en em goapet,  
En eur guir en Muy, hac ebars en Avignon  
He falveas deze ma zrompla a fesson ;  
Me lacas d'ar maro tri-ugent aneze

Quement a voa enni, hep cavet tam true,  
Rac ma voaint revoltet a enep ar Roue,  
Ha renta ar re-all sujet de Majeste.  
Eur ker all en Candi a zifennas ouzin  
Ha menn dirol an tan da zonnet d'ho zevi.  
Goude-ze eur ker all ebars en Hiberni  
A kerris a sonjal donnet d'am attaqui ;  
Mes evit recompanç da ober an dra-ze,  
Gant ma c'hlenve hep quen me a viras onte ;  
Me ho lacas assur quer munut a bezio  
Ma hallet o lacat da ober pastejo.  
N'ho pezet quet a spont mar bezan me guenec'h,  
Me eo goassa quillen ha gaffet en ep lec'h,  
Evit ners nac adres ne foto quet dime,  
Pa or bezo affer me zicouro neuze.  
Assur me zo capabl hep quen gant ma c'hlenve,  
Pa zon en ho servich, me a bromet dec'h ze ;  
Ouspen me a raïo ar pez a gommandet,  
Ya, men assur dec'h gant pep fidelite  
Ho servija fidel gant pep humilite.

*Ar Chondt.*

O clevet ho comzo e zoc'h eun den vaillant,  
Rac se e meus dezir breman sur promtamant  
D'oc'h ober Cabiten partout voar va arme,  
Dindan va ordrenanç c'houi gommando deze.

*Ar Baron.*

Onez a zo eur garg ha ne veritan quet,  
Mar plich guenec'h, Autro, a ze am excusat.

*Ar Chondt.*

Ma na vijac'h vaillant, credet en eur guir cren,  
N'am bije quet desseing d'ho lacat Capiten.

*Ar chenta Pach.*

Prinç vaillant, generus ha constant,  
Vaillanta den a zo dindan ar firmamant,  
Me offr dec'h ma servich ha va fidelite  
Pa seo ho madeles dont d'am receo ive ;  
Me vo oboïssant dec'h, Baron a Franç,  
Pa meus me an henor da zont en ho presanç.  
Ebars en eur gombat a voa en Picardi

Ny or boe ar victoar pen-da-ben anezi.

*An Eil Pach.*

Me'n biscoas nan don bet oe'h euil an armeo,  
Hac e meus dezir bras, mar plich guenec'h, Autro,  
Da vont d'ho servicha hae a bromet yve  
Beza bepret fidel, moyennant graç Doue ;  
Rac me zo map eur C'hondt deus ar ker a Gandi,  
Ha meus lequet mado evit don dam disqui  
Da vania an armo, da c'hoari ar fleuret.  
A drugare Doue ne meus quet c'hoas collet.

*Lavign.*

Ha me, credet assur, e meus eun dezir bras  
Da vont en ho servich da approu ma c'hourach :  
P'am be bet eur banac'h dimeus a guin clerret  
Ne arz den dirazon, an dra-ze m'er promet.

*Allan.*

Me meus bet eun amzer, pa voan en Treguer,  
Me a voa redoutet gant habitantet ker ;  
Ne gaffet quet unan en eur guir evel cant,  
Na dec'he diouzin pa efchen guin-ardant.

*Ar C'hondt.*

He bien ! va zud quer, pa zoc'h oll tud vaillant,  
Breman he partiomp da vonnet promptamant  
Da ober beac'h Rom ; me contanto neuze  
Pep hini ac'hanoe h herve e galite :  
Davantach he roan, ar pillach en antier,  
Dar soudardet vaillant a zeui guenen en ker,  
Hac al liberte franch partout var ar merc'het,  
Nemert ma rezervan mar be hini cavet,  
Hini bet a ve coant, ma vez din roet ;  
Ha mado an Ilis ma vezint em requet.  
Rac se, demp assambles betec ar Romanet,  
Me billo an Escop hae e C'haloniet,  
Ni rai ho chasseal, ho lacat da netra,  
Hac ho chasseo tout dimeus ar provinc'-ma.

*Ar Baron.*

Tremenomp dre Boetou pa heomp cousecoude,  
Ha ny rai d'an Escop donnet guenemp ive  
Evit election dimeus ar Pap nevez,

Poc'h eus choazet unan herve ho polontez.

*Ar C'hondt.*

Ret eo monnet dre ennon : quent evit partian  
Ny raï dezan donnet pe guittat ar vro-man.

---

AR PAP HAC AR GARDINALET.

*Ar Pap a lavar :*

Pa zeo bolonte Doue ma beza instituet  
Da succedi d'ar plaç ma zon breman choazet,  
Rac me ho suppli, mar be ho polontez,  
Da bidi ma Salver da gaout ouzin truez,  
Ouz ar bec'herien baour a zo er gristennes,  
Ma roï deze ar c'hraç a vez necesser  
D'observi al lezen zo groet gant hor Salver,  
Ma vez effacet net an holl bec'hejo,  
Ha pedomp hor Zalver da reï deze graço  
A vez necesser da zonnet da veva  
Herve an ordrenanç en deus groet er bed-man.  
Rac se, pedomp Doue, mar be he bolonte,  
Ar Werc'hes biniguet, ar Sænt hac an Æle,  
Da brezervi ar fe hac an Ilis romen,  
Ha ma teui de ziffen ouz e adversourien  
Pere a fel deze donnet de distrujan,  
E lacat en revin, hac e c'has da netra.  
Rac se, Tad Eternel, sellaoet ma requet,  
Ha c'houi, Gœrc'hes santel, Rouanes an Ælet,  
Bezet, mar plich guenec'h, hor guir advocation  
Dirac Doue an tad evit ar gristennes.  
Rac se, e meus esper breman, hep dale pel,  
Lacat ar Jubile partout universel.

*Ar Gardinalet.*

Quement-ze a ve mad, assuret omp a ze,  
Evit cas dre ar bed dar bopl ar Jubile,  
Ma vez dispozet ar gristennien fidel  
Da bidi evidoc'h Jesus-Christ hor Salver,  
Ma vo he bolonte ma vezet prezervet  
Ha d'en em acquitta evel ma zeo gleet.  
Ar gustum a zo bet a viscos d'ar Papet  
Da reï eur Jubile universel dre'r bed.

**Ma vezo effacet net an oll bec'hejo  
Ha da gresqui ar fe partout dre'n Ilizo.**

*Ar Pap.*

Me ro dar gristennes breman ar Jubile,  
Dan ep zo penitant da netat oc'h ine,  
Pardon hac induljanç gant ma teuint da goves,  
Da venteni ar fe en mesq ar gristennes,  
Me ro pareillamant dan oll covessoret  
Ar ponvoer da absolvri ar c'hajo reservet,  
Nemet ma reservan da veza absolvet  
**Ar Chondt deus a Poetou a zo excumunuguet,**  
**Ma vezo eun exempl da guement zo er bed**  
**Na vezo nemertan deus a dud revoltet.**  
Rac se eo ret breman publia dre ar bed  
**Ar Jubile a meus dec'h tout accordet.**

---

*AR PAP FAUS.*

Araji a ran sur pa deuan da voelet  
Eus choazet eur Pap al ha me zo refuset.  
Men bezo he vue pe meu bezo he stat,  
Me a varvo presant ma n'allan beza Pap :  
Rac ne intentan quet he teuffe en nep guis  
Da gommand en ep lech var cheffo an Ilis.  
Pa la sacre mornon, ma na renq perissa !  
Gant arach ha depit assuret he frezan.  
Me vezo heritiq, bemde ma sarmonio  
Raï diffen ous an dud ne zeuint de zelao.  
Sperejo an iffern ma inspiret breman  
Da hout pe ar fesson dont a ben anezan.  
Quent ma chomfe Pap, an dra-ze zo certen,  
Me a ve goel guenen confonti en ifern ;  
Mes me a raïo goel hac a yello breman,  
Da rancontri ar C'hondt ha gle donnet aman.  
Ze eo din da ober, me a ya de gavet,  
Mar refus ac'hanon em graïo glac'haret.

---

*Ar Chondt.*

Salud dec'h on Escop, ni zo deut dre aman  
Evit dont d'ho pidi da zont d'on azistan

Var an election dimeus ar Pap neve,  
Ny ia breman da Rom evit ar sujet-se.

*An Escop.*

Autro mar plich guenec'h a ze am excuset;  
Eur Pap zo a neve breman soudan laquet.

*Ar Baron.*

Gouir eo a leveret, mes evit quement-se,  
Resolvet eo an Autro de lemel adare,  
Ha da lacat eun all evel ma zeo gleet,  
Ma na deut guenemp-ni m'ho rento glac'haret.

*An Escop.*

Ma fardonnet, Autro, mar plich guenec'h a ze,  
Ar Pap a zo choaze, gant an Autrou Doue,  
Rac an Tado santel a ve en oraison  
Ho c'houlen ous Doue da anavout erfat  
An ini ha ve choazet dindanan evit Pap.

*Ar Chondt.*

Nen deus quet a gontest ebars en quement-se;  
Ret eo dec'h dont guenemp pe guitat ar c'hontre.

*An Escop.*

Goel vo guenen quittat, an dra-ze mer promet,  
Quent ma raffen eun dra ne ve quet permettet  
Dre al lezen divin hac ordrenanç Doue,  
Goel eo guenen mervel quent evit ober ze.

*Ar Chondt.*

C'houi a renq ober-ze pe quittat ar c'hontre.  
Mar chommet davantach me'm bezo ho pue.  
Het prest, ma Zenzorier, het da guerchat.breman  
Quement zo necesser, hep reservi netra :  
Breman ni bartio da vont dar Romanet,  
Ni chasseo ar Pap hac e Gardinalet  
Ha lacaï ho mado da ogmanti ma re,  
Hac or bezo ar victor partout dre ar c'hontre;  
Rac gout a ret erfat he zoun me puissant,  
A guement zo breman dindan ar firmamant.  
Breman e zeus dee vla he voan en Itali,  
He quemeris kerrio, ya dre guir c'hoari,  
Vel ma zeo Obamon, Baïonne hac a Padou,  
Ha dre ar re-man tout e zoun me an Autrou,

Goude-ze Capadoce. N'ouffen quet lavaret  
Peguement a Kerrio a meus me gonezet ;  
A c'hoaz en Normandie assur he zon me bet ,  
Hac ar ker a Goutanç ha meus-me quemerret ;  
Ha goude-ze Turrin ha zo eur ker hep-si ,  
Ar gaëra ha gaffet ebars en Normandi .  
Me voar ne gretac'h quet evit lavaret dec'h ,  
He ven terrupla den ha gaffet en ep lec'h ;  
Rac sonjal a ra dec'h he zeo contadello  
A lavaran me dec'h , non , non , me er prouvo :  
Ya , pa vezo ret , n'ho pet quet a doëtanç ,  
Gout a ret va doare hac yvez ma buissanç .  
Breman me anvo dec'h an nombr deus a Kerrio  
A meus me gonezet en liez bataillo :  
Landreguer ha Guengamp , Sant Briec , Montroules ,  
Goënet , Quintin , Pempoul , Rostren ha Keraes :  
Anfin , me larvar dec'h e zon breman em-tyes ,  
Nen deus nemert ar Pap , henes am groa dies :  
Tro var dro en antier he zeo din ar c'hartier ,  
Ne gret den contesti na lavaret eur guir .  
Pa la tete mormon ! ne gaffet quet unan  
Quen redoutet a men partout dre ar vro-man .  
He lee'h ma prononcer an ano ac'hanon ,  
E crener gant eston hac epouvant rahon ;  
Partout dre ar vro man me zo anavezet  
Evit ar goellan den zo pevar c'horn ar bed .  
Pa la jarni mornon ! me renonç d'am Doue ,  
Nen deus quet a farço ebars en affer-ze ;  
Rac me a zo eun den biscoas na guevis par  
En ep canton ebet var an douar .  
Ya , pa ve ret din lavaret eur plaç all ,  
Ne gredan quet e ve er broïo infernal  
A grette donnet din evit ma attaqui ,  
Deus ma zellet hep quen he teuffe da greuvi .

---

AR PAP, AR GARDINALET HA HABITANTET ROM.

*Ar Pap a larvar :*

Va c'halon a zo trist gant eur goel guelo ,  
Hac am groa more'hedus hac a ra ouzin gaou .

Ar C'hondt deus a Pouëtou zo excumunuguet  
A zeu gant eun arme evit dont d'hor goelet.

*Ar chenta Cardinal.*

Allas ! sur avoalc'h eo e teuyo d'hor goelet :  
Eun arme puissant en deveus preparet,  
Ha mar gantre en quer he vezimp revinet ,  
Rac ar faos Anaclet a zo et de gavet ,  
Rac se , he ve mat demp prepari eun arme  
Evit en em diffen gant ar c'hraç a Zoue.

*An eil Cardinal.*

Me ho pet , Romanet , da zonnet d'hor sicour  
Evit dont da drec'hi nep zo dimp adversour.

*Ar Pap.*

Habitantet a ker , herve m'oc'h eus clevet ,  
Ar C'hondt deus a Poëtou zo excumunuguet  
A gle donnet en ker , assuret omp a ze ,  
Evit on revina hep mar gant e arme :  
Ma lemel-deus a Pap assur a fel dezan ,  
Ha lacat Anaclet evit on revina ,  
Ha ma na vemp capabl d'en em diffen ontan ,  
Eo goel guenen quitat ha mont deus ar ker-man .

*Ar Chenta deus a Ker.*

Na ve quet rezonapt he quitac'h ar ker-man ;  
Ni dalc'ho mat bepret evit oc'h azistan.  
Habitantet a ker , mar be ho polonte ,  
Da zonnet d'or sicour en on necessite.

*An Eil a Ker.*

Oblijet omp breman da zont da venteni  
Ar fe hac an Ilis , ho tont d'ho froteji ,  
Quercouls da gombatti ous an adversourien ;  
Nep na raïo quet se nint quet guir gristennien .

*An Driet a Ker.*

Sicouret he vezet gant ar c'hraç a Doue :  
Ny en em diffenno pa zeui gant e arme ,  
Ny guemero armo evit e repoussi  
Gant ar c'hraç a Zoue hac ar Werc'hes Vari .

*Ar Pevare a Ker.*

Ny hazardo , certen , hor mempro , hor bue ,  
Evit en em diffen ha menteni ar se :

Mar marvomp er stat-se he vezimp curunet  
Ebars er barados en mesq ar vartiret.  
Nen deus quet a brezel a bliche da Zoue  
Evel pa diffenner an Ilis hac ar fe.  
Rac se, en em sicouromp d'en em diffen ontan  
Evit en repoussi mar deu bettec aman.

*An Driet a Ker.*

Eun den danjerus eo : rac se pedomp Doue,  
Ar Werc'hes biniguet, ar Sent hac an Æle  
Ma roïont dimp ar c'hraç d'en em diffen ontan,  
Mar gantre en ker, evit en repoussan.

*Ar Pap.*

Pa zoc'h oll resolvet evit en em diffen,  
Ny a bedo Doue evit dont d'hor souten,  
Ha ni a breparo coucoude eun arme  
D'en em diffen ontan gant ar c'hraç a Doue.

(*Sortial a ra.*)

---

**Ar C'HONDT HAC E DUD.**

*Ar faus Pap a lavar :*

Salud dec'h, Autro ar C'hondt, me zo rejouisset  
Pa meus bet an honor d'ho peza rancontret.

*Ar C'hondt.*

Ha c'houi, tad venerabl, me ho salud yve  
Deus a greüs ma c'halon, pa zoc'h deut er c'hontre.  
Petric zo a neve ebars er c'hartier-man ?  
Eur Pap a zo choazet a neve, a glevan ?

*Ar Pap faus.*

Ya sur, Autro ar C'hondt, unan zo a neve,  
Hac a zo bet choazet, sur, en despet dime.

*Ar C'hondt.*

Nan deffan quet den brao, groet ar recit dime  
Deus e actiono, mar de ha galite.

*Ar Pap faus.*

Autro, me nan don quet capabl da ober-ze,  
Va excusi a ret, mar be ho polonte.  
Nen deo quet permettct en ep guis gant Doue  
Donnet da droue-prezec an eïl deus eguale,  
Mes pa fel dec'h clevet me ya da lavaret.

En zo leun a valiç, ingrat, sedicius,  
Effrontet, deloïal, injust ha gloriis;  
Treti a ra an oll hep enor na respet;  
Memeus evit netra he ve disobljet;  
C'houi zo deus an Ilis pen-da-ben retranchet  
Dre eur zetanç terrapl en deveus fulminet.  
Me, me gret em c'halon e man ho madeles  
Prest da zont da zouten bebret ar gristenes;  
Rac mar chom da c'houarn an Ilis er bed-man,  
E c'haï ar gristenes, assuret, da netra.

*Ar C'hondt.*

Ne raï quet assuret rac me viro ontan,  
Me ha lacaï eun all a chasseo anezan,  
An hini a choazin ha gommando neuze  
Partout dre ar gristenes herve ma bolonte.

*Ar Pap faus.*

Quement-ze a ve mat, credet se assuret,  
Ha Doue ho peo deus an oll vat a ret.

*Ar C'hondt.*

C'houi vez a choazin da veza Pap breman,  
Me a ya braman-zon lacat ho curuna.

*Ar Pap faus.*

Ne nan don quet capabl da veza er garq-se,  
Mes neamoins, ma Frinç, c'houi raï ho polonte.

*Ar C'hondt.*

Quement-ze a zo groet, demp oll en ker breman,  
Evel ma antrefomp ni raï e zivisca.

---

AR C'HONDT HAC E DUD,

AR PAP HAC HABITANTET KER,

*Ar C'hondt a lavar :*

Or sa, prest en em rentet, rac mar groet résistanç  
Me raïo dec'h certen santout ma buissanç.

*Ar C'henta deus ar Ker a Rom.*

Penos en em renta, den fal ha milliguet,  
En em den deus hor Ker, den excumunuguet.

*Ar Baron.*

Re hardi e comzes : breman ni a voelo  
Pehini ac'hanomp dre nerz a c'honeo.

*An Eil deus a Ker.*

Ni ziffenno ouzoc'h gant ar c'hraç a Zoue.

*An Driet a Ker.*

Mar gouzout combatti hevel a leveres ,  
He renques c'hoari eun tol da ziscoe din da ners.

*An Tenzorier.*

Hon adres a voeli , marteze hep dale ,  
Coustout ha raïo dit, assuret , da vue.

*Ar C'henta a Ker.*

Soit, nen deus quet a gas ; ret e vo eur voecl deomp  
Tenna or c'hleveyer hac en em dispennomp.

*Ar Chondt.*

Lest guenen al laer-ze : breman da bunissa ,  
Me lacaïo an tan da lesqui ar ker-ma.

*An Eil a Ker.*

Ne ry quet ,assuret, gant ar c'hraç a Zoue ,  
Ni ziffenno ouzit tre ma pado hor bue.

*An Driet a Ker.*

Effrontet fal ma zout, tirant, den miliguet,  
Me gret gant an diaoul eo e zout possedet,  
Digueri da gueno da gomz en termen-ze ;  
Mez a meus em c'halon pa sonjan en out-te,  
Rejudic miliguet, sel petra leveres,  
Dizoblij a res an Drindet assambles.

*Ar Chondt.*

Me ne zourcian quet, deus d'accordi guenen  
Pe me lacaï an tan da zevi ker fete.

*Ar C'henta a Ker.*

Goerc'hes glorijs Vari, Ronannes an Æle,  
A c'houi a bermetto e c'hoarfe quement-se !  
Ne gredan quet biquen e lessac'h eur barbar  
Evel ma zeo heman da ren var an douar,  
Da lacat herezi evel ma fel dezan,  
Mar continu bepret e rencomp col gantan.

*An Eil a Ker.*

Goel ve guenen mil goech dre vartir perissa ;  
Ha pan be cant buez m'ho c'hollo oll gantan  
Quent evit ma souffren e c'hoarfe an dra-zé.  
Autro ar C'hondt a Poëtou, goulennet ous Doue

Pardon d'ho pec'hejo, ha bezet den honnest,  
Ha casset ar brezel a ret d'ar gristenés,  
Pe e vezet confus, assuret oc'h a ze,  
Pa vezo renta cont en prezanc eun Doue.

*An Tensorier.*

Ne'n deo quet oc'h affer sonjal en quemen-se,  
Ne lavar dec'h netra nemet mont a lesse,  
Ha lezel guenemp ni ennes da bunissa,  
Ma na ret e vezet miserapl eveltan.

*An Driet a Ker.*

Hac e cleffen cant coech dre vartir perissa  
Me bromet e tele'hin bepret mat d'ar Pap man :  
Goazoc'h evit nau deo na Calvin na Luter.

*Eun Digentil.*

Divoallet, mar querret, pe me glac'haro ker,  
En em dennet an faç, a ze en ho pedan,  
Lequet evez ouzin, pan oc'h avertissan.  
Nen deus quet da farsal, en em reit prontamant,  
Hac e vezet lamet a boan hac a dourmant.

*Ar Pap.*

Apezet ho coler en hano an Drindet,  
Ha goulenet pardon diouz Roue ar bed  
Pini a offancet, sivoas, bemde c'houlou.

*Ar Baron.*

Me ne ouffen pelloc'h anduri e gomzou,  
Nen dout quet eun tol dorn ; mar comzet quen a ze  
Ar c'henta a vezu punisset e vo te,  
Hac ar Gardinalet pere a zo guenet.  
Quent ma hañomp a han, ne bon, me'r grañ soezet.  
Autro ar C'hondt a Poëtou, gant ho permission,  
Me c'houlen diguenech deus a greis ma c'halon  
Ma vezu punisset eun darn deus anez,  
Ha discaret dan traon darn ho superbite.  
Penoz e permettet, sonjet me ho suppli,  
An affroncho a rer dec'h ha da oll dud an ty  
Gant tud disquiantet vel ma zeo ar re-ze.  
Me a ve goel guenen finissa ma hue,  
Tud pervers, effrontet, superb hac arrogant ;  
Excumunuguet oc'h gante, mameus amant,

C'hoas ne leveret guir pa oc'h arru aman,  
Ne ars muï va squiant, finissa a rancan.

*Ar Chondt.*

He bien ! Autrinez, a c'houi zo preparet  
Da accordi guenen evel ma zeo gleet ?  
En em dennet am faç ha lest guenen ennes,  
Het a lesse, mar queret, en ker pe voar ar mes.

*Ar Chenta a Ker.*

Esfrontet fal ma zout, den barbar milliguet,  
Arretet pront da goler, en anno an Drindet,  
Ha retorn var da guis hep dale pel aman,  
Pe e teuio Doue erfin d'ho punissa.

*Ar Pap.*

Courach, ma zud Christen, diffennet ous ennes,  
En hano Jesus-Christ, hac e vam ar Werc'hes.

*Pot a gamp ar Chondt.*

Biscoas ne meus goelet tud quer kalet a ben  
Ha quen opiniatr, quen superb ha ma zent,  
Ne chenchont ket a brepos ar Romanet-se,  
Eur c'houlz bennac coucoude e tissent pea-ze.

*Ar Chondt.*

Or sus, ne batten muï da rezoni onte.

*Ar Pap.*

Courach, ma soudardet, en hano a Zoue.

*An Tenzorier.*

N'oc'h eus quet a affter da rezoni onte,  
N'or bezo quet a espern evit hini an ê.

*An Eil a quer.*

Me a mens esperanc, gant sieour an Drindet,  
E vi rentet confus te a da soudardet.

*Ar Chondt.*

Terrupl e zout hardi : lavar din, michieec,  
Me a gret e zout meo p'otramant affollet,  
En em den prest am faç ha te hac ar re-se ;  
Mar leveres eur guir m'em bezo da vue,  
Ha lez guenen ennes eur voech c'hoas pa pedan,  
Pe e teuï an tan foeltr da goeza er ker-man,  
Dre voyen Jupiter ha la fin a bedan,  
Ha va nerz va unan goude-ze da guentan.

*An Driet a guer.*

Ar respont a zo groet, n'ho pezo quet certen :  
Ni ziffenno ouzoc'h dre e'hraç ar Souveren,  
Hac ar Werc'hes Vari zo Rouannes en êe  
Ones hor sicouro gant sicour ma Doue.

*Ar Chondt.*

Me 'n bezo anezan p'otramant da vue.  
Or sa, ma soudardet, combattet aneze.  
He bien, Autro Pap, evit pe sort sujet  
Oc'h eussu ac'hanon quen diffesson tretet ?  
Donnet d'am dispriza evit neubet a dra ,  
Ne gleiac'h quet ober an dra-ze, a gredan !

*Ar Pap.*

Autro, mar plich guenec'h, ma escuset brema,  
Ne voa quet va dezir donnet d'ho tizoblija.

*Ar Chondt.*

Penoz, effrontet fal ! avoale'h e c'heus-te groet  
Pan don deus an Ilis guenede retranchet.

*Ar Pap.*

Autro, distroït m'ho ped, da ober pinijen,  
Ha me a roïo dec'h breman an absolven  
Deus an oll bec'hejo oc'h eus bet commettet ;  
Gant ober pinijen e vezet absolvet,  
Hac ho rento capabl da jouissa en êe  
Deus ar rouantelez preparet gant Doue.

*Ar Chondt.*

Na pe sort pinijen a fell did a raffen ?  
Me ne intentan quet petra eo pinijen.

*Ar Pap.*

Ar pinijen a zo gant Doue ordrenet  
Evit cavet pardon dimeus an oll bec'het  
Pere a gomettomp goude ar vadiant  
Pa ve deut an den en e intentamant,  
Ret eo cavet recours d'hor Salver biniguet,  
Hac ober pinijen evel ma zeo gleet.  
Ret eo ober quenta eur gouir goyession  
Deus an oll bec'hejo, ha satisfaction;  
Detesti ar pec'het zo control da Zoue,  
Ha banissa ar pec'het dimes ar volonté.

Dre ar govession e cleomp diseleria  
Ar pec'hejo hor deus comettet er bed-ma :  
Goude, contriction a zo ret da gavet,  
Da veza offanceet hor Salver biniguet :  
Ar satisfaction, ônes eo ar goassan ;  
Calz a dud zo daonnet balamour da oman.  
Nen deo quet avoalc'h coves da eur belec,  
Na coves ouz Doue, rac c'hoas e zeo gleet  
Ar satisfaction a gleer d'an nessa,  
An henor, ar mado ret eo restitua.  
Cals voar ar poencho-man a velomp o vancout,  
Ha den na bardonner hep restituin tout.  
Doue en deveus e hunan lavaret  
Nen daje den en evo hep beza peet  
Betec an diner bianna quement a zo gleet.  
Rac ze, en ho pedan, a ze en eum sonjet,  
Ha me ha roï dec'h breman an absolven,  
Mar en em disposet da ober evelen :  
Deus a gement pechet oc'h eus bet commettet,  
Mar goulennet pardon e vezet pardonnet :  
Doue ne c'houlen quet hor maro er bed-ma,  
Mert ma teuffe ar pecher d'en em convertissa.

*Ar C'hondt.*

Me ne meus quet affer eus a benijenno,  
Miret-e d'ar re all p'er ho goulennet ;  
Divisquet-tu timat dime an habit-se,  
Pe me guitta ar bed-man ma nan be ho pue ;  
Curunet din eman, pehini vezoz Pap,  
Pe me raï ac'hanoc'h, an dra-ze zo c'hanat.

*Ar c'henta Cardinal.*

Autro, ni non deus quet pouver da ober ze,  
Ar Pap a ve choazet gant an Autrou Doue,  
Ha pa ve consacret gant pep solennite,  
He renquer caout Esqueb da ober quement-se.

*Ar C'hondt.*

Ne dal quet rezoni, me a lavar dec'h se,  
C'houi renq e guruni pe men bo ho pue.

*Ar c'henta Cardinal.*

Autro, on excuset, ny ne raomp quet se ;

Rac se choazet re all, mar be ho polonte,  
Hac a raïo pep tra evel ma leveret :  
Mar plich guenec'h, Autro, a ze am dispancest.

*Ar C'hondt.*

Penos, oc'h escusi ! c'houi ranco ober ze  
Breman zouden vantan pe men mo ho pue.

---

ANACLET A ANTRE GUISQUET EN PAP.

*Ar C'hondt a lavar dezan :*

Salud dec'h, Autro Pap, Doue d'ho menteno  
Bepret var an douar ebars en grandeurio.

*Anaclet, Pap faus.*

Ha dec'h, Autro ar C'hondt, me ho trugareca  
Dimeus ar galite oc'h eus roet din brema.

(*Larat a ra dar guir Pap.*)

Ma benediction a roan d'ar vro-man ;  
Breman pa zon en carg sortiet anezan,  
Dre ma c'hommandamant e tiffennan expres  
N'ho pezo quet da chom en toez ar gristen,  
Hac er meneus tra da zont d'officia  
Ebars en nep cartier er rouanteles-ma,  
Evit punission deus ho gloriustet  
Chetu ar beamant oc'h eus bet gonezet.

*Ar C'hondt.*

Adieu, Autro ar Pap, me ya da bartia ;  
Dimeus ma fec'hejo ma absolvet breman,  
Me raïo d'an Esqueb donnet d'ho mentena.

*Ar Pap faus.*

Abalamour da ze me ya d'oc'h absolvi  
Deus a guement pec'het oc'h eus bet comettet  
Ha quement a reffet en amzer da zonnet.  
N'ho pet quet a vorc'het, nen deet d'an envo,  
Pa zon groet possesseur dimeus an alc'hoëo,  
Me zigoro an nor ma vezet curunet  
En toez an oll Sent hac an oll Sentezetz.

*Ar C'hondt.*

Adieu heta, Autro, breman me bartio,  
Mar ho pe nep affer bepret m'ho sicouro.

(*Sortial a ra.*)

*Ar Pap faus a lavar izel :*

Het pa blico guenec'h : breman pa bartiet  
Ma benediction ho pezo da vonnet.

SANT BERNARD, AR PAP UGENN HAC EUN ESCOP.

*Ar Pap Ugenn.*

O Doue eternel ! c'houi a zo mad bepret  
Pa souffret an insult a zo din breman groet,  
Permetti dan dud fal da gommandi breman  
Hep observi al lezen oe'h eus groet er bed man ;  
**Ma n'ho pe'r ar madalez da zont d'am azista**  
E c'hai ar gristenes ar vech man da netra :  
Ha c'houi Guerc'hes Vari, bezet avocades  
Dirac Doue an Tad, dirac ar gristenes,  
Ha ne bermettit quet e chomfe evelle  
Ar chismatiquet fal da goll ar gristenien.

*An Escop.*

Salud dec'h, Tad santel, penoz e man ar bed ?  
An tirant miserabl zo bet ous ho guelet ?

*Ar Pap.*

Bet eo ous ma goelet, revinet oun gantan,  
Hac ar gristenes paour a yelo da netra.

*An Escop.*

Tremen a raï an tourmant : Doue ne bermetto quet  
E ve ar gristenes paour pel bras persecutet.

*Ar Pap.*

Demp da gavet Bernard hac enez marteze,  
A zo eun den santel hac en convertisse. . .  
De bonjour dec'h Bernard : ni a zo revinet,  
Deus an Ilis santel e zomp oll chasseet.

*Sant Bernard.*

Pennos, deus an Ilis ! ha possabl e ve den  
Er bed-man quen ingrat, ive quen inhumen,  
Da zont da attaqui ar Pap zo gant Doue  
Lequet da labourat dindan e vajeste;  
Ha mar be den er bet a ve quer revoltet  
Da zont d'en attaqui evel-se hep respect,  
An hini zo lequet lutannant gant Doue  
A zo otorizet dindan e vajeste.

*Ar Pap.*

Pardonnet din, Bernard, a ze am escuzet,  
Ar C'hondt deus a Poëtou en deveus ma jamet  
Er mes dimeus a Pap : lequet gantan eun all  
Hac a zo chismatiq, hac a zo eun den fal.

*Sant Bernard.*

O Doue eternel ! penos e permettet  
Ober dar Pap affront rac dec'hu e zeo groet !  
Lezel eur chismatiq da succedi er bed  
Dan abostol Sant Per ho poa instituet  
Da vezan lutanant dindanoc'h er bed-man !  
Rac-se den ne glesse ober tra diontan.

*An Escop.*

Me deus ma escopti a zo bet chasseet  
Ha goerzet ma oll vad quement en deus cavet,  
Ha c'hoas e zon evrus bezan quit evit se,  
Me zonje coulz a voa e coljen ma bue.

*Sant Bernard.*

Eston bras eo clevet penos e commande  
Eun den er gristen quer cruel a ma ze ;  
Persecuti an Ilis hep cavet tam true,  
Nen deveus quet a spont rac jujamant Doue.

*Ar Pap.*

Nen deus den evittan, credet assuret se,  
Eun den nen deveus aon a den na rac Doue.

*Sant Bernard.*

Ret vezo coucoude monnet bettec ennan  
Da c'hout petra lavar deus ar Pap neve-man.

*Ar Pap.*

Goel eo dimp e lezel pan deo quen revoltet,  
Den nen deus plijadur evit mont d'er goelet.

*Sant Bernard.*

Nen deveus quet a gaz, me lavar dec'h breman ,  
Ret eo dimp e guemen evit donnet aman.  
Etu prest, Messajer, da lavaret dezau  
E command an Abat dezau donnet aman.

*Ar Messajer.*

Me ya hep dale pas da lavaret dezau.

Salud dec'h, Autro'r C'hondt, me a zo deut aman  
Digasset gant Bernard evit gout an doare  
Deus an election dimeus ar Pap neve.

*Ar C'hondt.*

Hac interrest Bernard eo gouzout quement ze ?  
Neanmoins, varc'hoas me glevo e zoare :  
Groet dezan prepari eul leign d'am soudardet  
Pe en devezo quun d'am beza conviet.

*Ar Messager.*

Me lavaro, Autro, dan Abat evel se  
E teuffet varc'hoas da glevet e zoare.

*Ar C'hondt.*

Ya, ha lar dezan bout ive preparet  
Da menteni ar Pap pini a meus lequet.

*Ar C'hondt a laver d'e dud :*

Demp-ni oll assambles dar gouent da voellet,  
Ha gouzout ar cher vad a raï dimp ar Bolret.

*Ar Messager.*

Antrezet en offern, Autrone, pa gueret,  
An Abat a zo prest da zont d'e lavaret.

*Ar C'hondt.*

Leret-i pa garo, pa ze en em brepreat,  
Rac ni n'omp quet astet da vonnet d'er c'hlevet.

*Ar Baron.*

An Abat a grede e voamp-ni deut aman  
Da gavet offeren digantan, a gredan !  
Ni n'on deus quet affer d'eus e offerennou,  
N'en domp quet deut aman, assur, vit ho zelaou.

*An Tenzorier.*

Ma vent prest da zonnet neuze ny a yaë,  
Mar be netra a vat neuze m'ho sicoure.

*Ar Pot a gampr.*

Ma carem-ni breman ober bourt dar menec'h,  
Lacat an tan er gouent, neuze teuffent er mes.

*La Vign.*

Me raï ze, mar queret, neuze e voelfet, pot,  
Ar menec'h o redec troncet gante ho froc.

SANT BERNARD a antre en eur gana ar Pange lingua.

*Ar C'hondt a lavar :*

Ma Doue, ma c'hrouer, me ho ped ar vech-man  
Dre ho misericord da zont d'am pardonan :  
Biscoas ne voe guelet eur pec'her er bed-man  
Quer miserabl ha me, an dra-ze a gredan.  
Va Doue, va c'hrouer, c'hoas eur voech ho pedan.  
Da bellad ar justic a deu d'am punissan ;  
Rac mar deut da exerc ho justic em andret,  
Allas ! a dra certen, sivoas, e zon collet ;  
Rac biscoas ne meus groet nemet oc'h offançei,  
Dre pep sort pec'hejo er bed-man, sivoas din ;  
Mes Jesus, map Mari, guir Doue eternel,  
C'houi oc'h eus anduret da brena ar pec'her  
Dre ar merit ar goad pini oc'h eus scuillet.  
M'ho ped d'am pardoni breman deus ma fec'het.

*Sant Bernard.*

Me a gret c'hoas eur voech e vezet pardonnet,  
Ny ya tout assambles da c'houlen ho requet.

*Ar C'hondt.*

Ma zad, me ho suppli, ma hin guenec'h yve  
Ebars en ho couent da bidi a goste.

*Sant Bernard.*

Salocroas ! Autro ar C'hondt, c'hoas n'en em fiomp quet,  
Rac ne ve dre fentic ho pe quemen-se groet.  
Het a lesse breman hac oc'h oll soudardet,  
Varc'hoas dar c'houlz-man deut are d'am goelet.

*Ar C'hondt.*

Me oc'h atrappo c'hoas pe e manco ma ardo.  
Penoz, coquinet fal, ne fijac'h quet ennon !  
Me ya da gonclui c'hoaz gant patientet,  
Neuze me lavaro pen-da-ben ma secret,  
Ha dious ma sonjin, an dra-ze a zo scler,  
Me lacaio an tan er gouent en antier.

*(Sortial a ra.)*

BERNARD e unan.

Pa zeuan da sonjal em Salver biniguet,

En e humilite, e zon rejouisset,  
Hac en extremite en deveus anduret  
En queit a ma zeo bet evidom-ni er bed :  
Rac se e lavaran gant guirone barfet,  
Nemert enoc'h, ma Jesus, neo contant ma speret.  
Avis a ra guenen eo ven assoramant  
Clasq plijadur ar bed pehini zo passant,  
Ha pa gonsideran ous en evrustet  
Pehini zo en êe d'am ine preparet.  
Avis a ra guenen e zeo bras ar pec'het  
Deus a lubricite gant an dud debordet,  
Ha quer coulz ar goller pehini zo o ren :  
Mam be memor a ze, an dra-ze zo certen,  
Ha guement ma ouffen e trelatte ma speret,  
Me bardonfe souden d'am oll ennimié ;  
Nem be quet ar galon da garet drouc da zen :  
Goudeze gourmandiq a zo eur pec'het vil  
Pehini zo comun dan dud a zo frajil.  
Consideret erfat en deus bet hor Salver  
Vest ha guinaigr er groas, pa voa prest da verval,  
Evit rassazia ar sec'het en devoa  
Deus op redempcion, pa voa ouz or prena.  
Quement se a ra din caffet confuzion,  
Ma meus eur regret vrás bars en creïs va c'halon  
Pa voellan an dud fal evel se debordet,  
Hep sonjal er maro gant Doue ordrenet ;  
Ne reont cas ebet na petra da ober  
Evit offanci Doue, hor mest hac hor barner.

*Ar C'hondt a arru, Bernard a lar :*

Salud dee'h, Autro ar C'hondt, me ho ped da avanc  
Evit ma contin dee'h hep ober contenanc,  
Touchant ar pec'hejo pere a gommettet :  
Sellaouet ac'hanon rac tout oe'h eus e groet.

*Ar C'hondt.*

Or sa, petra c'houde ma comzes quen hardi,  
Me sonje ne voa den er bed d'am repreni,  
Rac me a voar erfat penoz e surpassan  
En speret, en squient, quement zo er bed-man,  
En pep perfection quement zo er c'hontre,

Rac se ne ran istim a nicun aneze.

*Bernard.*

Me lavar did, mechant, penoz e zout tromplet,  
Rac dimeus ha ludu ha poultre e zout savet;  
Goude an orgueil-ze pini a guemeres,  
Ha te en deus esper da volet eun deves  
Hor Salver biniguet en pales an Drindet.

*Ar Chondt.*

Fin da guemen-se tout, nen em sourcian quet,  
Me a zo pinvidic hac i've puissant  
Hac a dremen partout evit enn den vaillant.

*Bernard.*

Ha pebes follentes, ha pebes sort sottiç  
Eo lacat plijadur da garet ar bettiç,  
Pa c'hellomp acquizitta ar gloar celestiel  
Queit a ma zomp er bed dre c'hraç an Eternel.

*Ar Chondt.*

Me a zo puissant hac a gle commandi  
Dan oll e rin marcha dre lec'h ma leverin.

*Bernard.*

Nan deo quet te ar mest ; rac se, me lavar dit  
He cleffes aboissa pa gommard Doue dit.

*Ar Chondt.*

Penos, te ve am mesprisse e lec'h ne ven me quet !  
Lavar din quement se, me gare da glevet ?

*Bernard.*

Mar dout dreist ar re all ebars en grandeurio,  
E ve goel dit beza en eur plaç all ous trao;  
Nep a goez a huel a zo goas dez'an pel  
Evit unan bennac a goeffe a izel.

*Ar Chondt.*

Doue ne lavar quet caret nep am c'hassa  
Nac an nep am repren, am laca da facha,  
Mar carfent ac'hanon ne lavarfent quet se,  
Rac se e zeo ret din cavet maliç oute.

*Bernard.*

Pa voa Jesus er groas en deveus lavaret  
Penos e vije ret d'an oll en em garet,  
Rac en a bardonnas d'ar pec'her e varo,

Pere en afflie dre dourmarcho garo.

*Ar Chondt.*

An destruction, hac en a zo pec'het ?

*Bernard.*

Enes eo ar brassan ha guement ha gaffet,  
Diffen a ra Doue drouc-comz dimeus a den.

*Ar Chondt.*

Evit injurio n'allan quet da zouten,  
Hac e tammaller din bemde muī oc'h vuī  
Ha rac se e rancan allies en em venjin.

*Bernard.*

Sonjet, me ho suppli, en passion hor Salver,  
Hac e tismanto ailliez ho coler :  
Jesus ne fache quet ous ar re en maltrete,  
Pidi a re e dad c'hoas evit ar re-ze.

*Ar Chondt.*

N'allan quet beza douç ouz an ignorantet.

*Bernard.*

Neus den en ho contre a raï goel pa gueret.

*Ar Chondt.*

Mar studian bepret continuellamant,  
Na mar pedan ive Done incessamant,  
E collin ma squiant, an dra-ze zo patant.

*Bernard.*

Labour muī oc'h muin, lavaret a ran dit,  
Evit goellan ma c'hilli pellat an diegui.

*Ar Chondt.*

Mar roan ma oll vad dar bevien adare  
Petra vo a ri-me va hunan goude-ze ?

*Bernard.*

Ne heus-te quet clevet penoz ar pinvidic  
A zo bet eun ingrat, ha chetu an daonnet :  
Doue a ro dimp oll entrezomp var ar bed,  
Da zibri, da effan, p'or be naon pe sec'het.  
Autro, ret eo dibri hac effa zo ive,  
Non pas dre gourmandie, mes dre necessite.

*Ar Chondt.*

Gant va c'homagnunes alliez e laran  
Calz a gomzo lubriq d'en em divertissan.

*Bernard*

Eur pec'het bras eo ze, credet assuramant,  
Ma na gueres sanch e querzi en tourmant.

*Ar Chondt.*

Me ne gredan quet e ve pec'het parlant  
Var eur sujet benac a ve divertissant.

*Bernard.*

Ya, mar queret comz deus an traou celestiel :  
Meulit incessamant on Doue eternel ;  
Goude-ze dalc'h secret quement a liviri  
Ha mir ar silanç liessa ma c'hilli.

*Ar Chondt.*

Me guemer plijadur o veza eun traïtour ,  
Me ra hipocrizi evit en em sicour ,  
Nen deus netra a vat em interieur ,  
Couscoude e tiscoean mad em exterieur.

*Bernard.*

Goel ve dit na raes, me a bromet dit se ,  
Rac te vez daonnet ma ne sanches bue.

*Ar Chondt.*

Me ya da avoui breman presantamant  
Va buez pen-da-ben, iveau ma santimant ,  
Ha guemen sort pec'het a meus groet er bed-man ,  
Ha bere e meus sonch en heur ma zon breman .  
Allas ! me voar erfat e meus-bet plijadur  
Oc'h c'heuil ma bue fal, debordet hac impur ;  
Gant ma zello lubric leun a vechanstete  
E tromplen assur et purra chastete :  
Me a garrie ar moez hac an ton excellant ,  
C'hoas e carren yve an daoulagat charmant ,  
An abijo a bris a blije d'am speret ,  
Eur pouvoer absolu contempli er merc'het :  
En eur vont dar marc'hat, o tremen er ruio ,  
Creïs al labour memes, bettec en ilizo .  
Evel se gant an tan violent em c'halon  
E presanten de pront va oll affection ;  
Mes gant eur bisach fent hac eur voez excellant ,  
Em bije mestrezet avizio mui vit cant :  
Me a bromette dez donnet d'ho dimizi ,

Ha goude-ze ne ren nemet ho affronti.  
En amzer-man e voeler ar merc'het quen orguet ,  
Ya, darn aneze a zo quen effrontet  
Mar discoezet deze eun tam affection  
E promettont dec'h prest ho oll affection :  
Mes eur maleur bras eo, pa er gonsideran ,  
Eul lod zo aneze a deu d'en em fardan :  
Gand eul lod secrejo a ongant preparet  
E frotont ho bisach ma vezo admiret :  
Ma ho goelac'h fichez gant eul lod rubano ,  
Lienaje a bris ha gant dantelezo ,  
E c'hallez lavaret gant guirionne certen  
E zint traou diguizet pe eur foesquen raden .  
Nan deus diou aneze eur memeus fantazi ;  
Unan a yel dan danc, hac eun all dar c'hoari ;  
Eun all dre he dezir hac he affection ,  
Gant he zeod milliguet hac he detraction  
A lamo an honor hac ar renome vat ,  
Ha guement a voellont dirac ho daoulagat .  
Eur rum all a zo c'hoas dre eur fantazi all ,  
Gant ho moez exceliant o clasq charmi re-all .  
Sur evit ar re-ze e meus bet fantazi ,  
Hac em bezo bepret en queit a ma vevin .

*Eur Plac'h possedet.*

Me zo gant an Diaoul tri bla so possedet  
Hac a zo sans-cess o fonnet, o tonnet ,  
Redec ha diredec, o ruillat, o querzer ,  
Crial hac esclami en quement ma zon bet .  
Satan ha Vulcan, Belzebunt, Astarot ,  
Ar re-ze a gredan eo a dalc'h ennon crog ;  
Breman am zraignont deus eun toul d'eun toul-all ,  
Dar plac-man goudeze em c'hessont da eun all .  
Enber e c'han d'ar mor, goudeze dan douar ,  
Enber a bego ar goe, em disclepont dan traon ,  
Goude er precipiè ha goudeze en tan ,  
Quement invention a zo tout er bed-man .  
Arrajin a ran sur pa gonsideran ze ,  
Ma caffen precipiè breman me n'em lasse .  
Me a ya da vale, da redec ma squient ,

Da eslami ar re a guevin var ma hent :  
Saccaji var an hent ar vugale munut,  
Laza ha disfoeltra partout al loennet mud.  
Ne respecttin hini : feumeulen, groec na pot,  
Den yaouanq na den coz, na goerset en ep sort :  
Ar re a rancontrin me ranco caout ho bue,  
Pe me yel gant Satan evellet hep ine :  
Divoar beg an tourrio me n'em dolo dan trao,  
Ha c'hoas, mar chommañ beo, my el dar milino,  
Ha dindan ar rojo neuze me n'eum blanto,  
Da c'hout hac y alfe parfoeltri ma mempro.  
Oc'h arraji bemde me glaseo al leonnet,  
Ar bleizi, an ourzet, moc'h goe ha serpentet,  
Ma'm bo compagnuez gante da viana,  
Pa ne allan cavet deus an dud er bed-man.  
Ranna rasse ma fen gant ar sonjezono  
A laca an Diaoul em speret avizio.  
Lavaret a ra din quemeret eur gontel ,  
Eun ach pe eur voel, petramant eur guizel,  
Eur pognard pe eur c'hleve, pe eur gontrelassen ,  
Ha monnet var an hent evel ar vollerien,  
Ha neuze quement den a voelen o tremen,  
Diffuoeltra aneze quer munut a queillien,  
O chacat gant ma dent ha dibri ho c'halon,  
E lezel gant ar chas evel eun ampoezon ,  
Hep respectti hini, daouest pe sort den ve,  
Na pe sort calite, na pe a vro e ve :  
Inventi tourmancho a neve flam deze  
Evit o massaci e lavar din yve ,  
Quemeret serifello evit dispen ho c'hiq,  
Evit o distaga, o rosta var ar gril.  
Lucifer, Lucifer, Belzebut a voellan,  
Hac eur vouel vrás var e ziscoa gantan !  
Or sa, donnet a ran d'en em dizesperi :  
Ya, gant ma bouel me roffe eun tol cre,  
Ha gant an tol quentan me am be e bue.

(*Tremen a ra pemp pe c'hoec'h den hac o laz oll.*)

(*Tremen a ra Sant Bernard hac a ya dan daoulin.*)

*Sant Bernard.*

Jesus, Jesus, Jesus zo redemptor ar bed.

*Ar Plac'h possedet.*

Jupiter, Appollon ! morbleur, ma zicouret !  
Penoz, lanso corden ! ret eo dit foeltra den  
Pe me precipito ma na zentes ouzin.

(*An Diaoul a apparis aman.*)

Eul laer bras eo eman, eur voler ar brassan,  
Me a ya gant ma dent d'en disparfoeltra.

*Sant Bernard.*

En anno Doue an tad en deus crouet ar bed,  
En anno Doue ar map en deveus hor prenet  
Hac ar Speret santel, en ano da Jesus,  
Aer-rouan divergont, me as rento confus.  
Jesus ma sicouret da c'hout petra voelan,  
Diaoullo a bep tu, assuret a gredan,  
Hac eun den possedet zo ous ma zourmant,  
Goerc'hes santel m'ho pet, reit oc'h assistanç din.

*Ar Plac'h possedet.*

Fors Calvin, fors Lutter, fors Sattan, Jupiter,  
Ar sorcer-man ra din arraji gant coller :  
Diguesset eur pognart ha neuze me'r lazin,  
Mes eur groas zo gantan d'en em diffen ouzin.

*Sant Bernard.*

En anno an Tad hac ar Speret santel  
Me deu daz conjuri a beurs an Eternel :  
Diaoul bras an ifern quitta ar plac'h paour-man,  
Te a zo possesseur d'he c'horf a d'he ine ;  
Sortiet prest er mes, e me an Eternel,  
En ano an Drindet, Tad, Map, ha Speret santel.

(*An Diaoul a sorti er mes ar plac'h.*)

*Ar Plac'h a lavar :*

Me ho trugareca, tad santel, a galon  
D'am beza delivret dimeus eur sort eston :  
Tri blas a zo breman aboe an heur guentan  
Ma zon bet possedet gant al Lucifer-man ;  
Mes dre oc'h orezon oc'h eus ma delivret,  
Dre voyen ma Salver hac e groas biniguet.

*Sant Bernard.*

He bien, ma merc'h paour, chanchet deus a vue  
Ha n'en em roet james d'al loen infernal ze :  
Moïennant graç Doue c'houi a iello en êe.

*Ar Plac'h possedet.*

Me ya breman zouden en toezi al leonnet,  
Da ober pinijen palamour d'am pec'het.

*Sant Bernard.*

Doue d'ho conduo.

*Ar Plac'h.*

Adieu, ma zad. Doue d'ho peo.

---

*AR ROUE HIBERNI.*

Me zo eur roue bras hac a zo puissant,  
Me ya da laret dee'h breman ma zantimant.  
Roue on en Hiberni var an oll sovajet,  
Pere a zent ouzin evel ma zeo gleet ;  
Tud hac a zo vaillant, courajus, redoutet,  
Suptil hac adrezus, james ne vent tromplet.  
Evit quement batail am eus bed er vro-man,  
Mar bijent em c'hoste james ne voan goassan.  
Pa guemeris quentan possession aman,  
M'em boa neubeut a nerz, gout a ret quement-man ,  
Mes me a zo bet trec'h d'am oll adversourien  
Hac e meus goæzet voarneze pen-da-ben.  
Mes eur c'helo neve am groa glac'haret bras,  
Eur Roue zo arru, evit dont da'm ziblaç.  
Rac se, me ho suppli, Courrier, gant dilijanc  
Het da glasq din sicour hep ober contenanc;  
Het prest d'an Turquian, leveret dar roue  
E c'houennan sicour digant e majeste,  
Rac ar Persianet en deus din lavaret  
Var ben eur mis aman em graïont glac'haret.  
Me am eus boan vrás pa sonjan quement-se,  
Pa sonjan bout en peoc'h em eus brezel are.

*Ar C'hourrier.*

Me ya hep contenanc da lavaret dezan,  
Hac a lavaro dec'h hac en a zo contant.

AR ROUE PERS *a lavar d'e Dud :*

Pala vantre saint gris ! coll ma squiant a ran,  
Bean zo eur roue hac a meus droug ontan ;  
Ar Roue Hiberni eo va innimi bras,  
Dindan ma buissanç me renq e gavet c'hoas :  
A ben tri mis aman me vezoz mest deza.  
Va Doue Jupiter, Mars ha Prozerpina  
A zo ous ma sicour er mor hac en douar ;  
James na vancont din, an dra-ze me er goar.  
Eun impertinent nen de quen an den-ze,  
Fallout dezan lacat en e dorn ar c'hlenve ;  
Rac biscoas ne guevis va far en ep combat,  
Hac e meus combattet ous calz a botret vad :  
Dre voyen Jupiter en deus ma sicouret  
Biscoas den er bed-man nen deveus ma zrec'het.  
Rac se het prontamant da lavaret dezan  
En em divoal mar car, breman me yel dezan.  
Me nen don quet poeltron, e avertissa ran,  
Rac me a voar erfat e vezin trech dezan.

*Ar C'hourrier.*

Raison eo din monnet pa commandet, Sire :  
Na zalein quet pel ne retornin are,  
Me ya da bartia gant resolution.

*Ar Roue Pers.*

Birviquen nep cartier nen deve evidon.  
Effrontet fal ma zeo, traïtour, impertinent,  
Eun den leun a valiç, eur fou, eun insolant.

PACH AR ROUE HIBERNI *a ya da gavet ar Roue Turqu  
hac a lar :*

Me a zo deut aman, Autro an Ampereur,  
Dimens an Hiberni evel ambassadeur,  
Da c'houlen diguenec'h azistanç evittan,  
Roue ar Persianet a ro brezel dezan.

*Ar Roue Turqui.*

Ya da, ya mignon, retornet pa gueret :  
Roue Pers zo eun den hac a zo puissant,  
En deveus drouc ouzin, ive me meus amant.

(Sortial a ra.)

PACH AR ROUE PERS A ANTRE *har a lar d'ar Roue Hiberni :*

Salud dec'h, prinç vaillant, me zo deud d'ho cavet :  
Ar Roue Persian en deus ma digasset  
Evit lavaret dec'h prest en em brepari,  
Ho soudardet ha c'houi, rac ret vezoz c'hoari,  
Exerci oc'h arme, rac dont a gle aman  
En esper, a sonc'h din, quemeret ar vro-man.

*Ar Roue Hiberni.*

Que dar guer, ma mignon, lavar dezan hardi  
E zomp oll preparet, nebon me en diffi.

*Ar Pach.*

Adieu heta, sir, divoallet mar queret,  
Eur goal glenve eo a guement a gaffet.

(Sortial a ra.)

*Pach ar Roue Hiberni a lavar dezan :*

Bet on en Turquian, lavaret en deus din  
E zeo ho servijer pa gueret commandi.

*Ar Roue Hiberni.*

Quement se a zo mad nen deo voas dimp monet  
Da glasq on adversour gant sicour an Durequet.

---

AR ROUE TURCQ HAC AR ROUE HIBERNI.

*Ar Roue Hiberni a lavar :*

Ho servijer, Sir, penos ac'hanoc'hu ?  
Ar vech-man e zoc'h fidel d'am sicour a bep tu ;  
Va adversour brassa eo ar Roue Pers,  
Eun den estranch meurbet hac eun den divergont :  
Oc'h adversour eo sur, me a gret erfat se,  
Abalamour ma zoc'h contrel dezan ive.

*Ar Roue Turcq.*

Roue ar Persianet a zo eun den infidel,  
Or massacri a raï an den fal ze mar guel :  
Rac se bezomp fidel evit en em sicour,  
Ni vezoz evittan hac e ve eun diaoul.

*Ar Roue Hiberni.*

Courach, courach, Sir, bezet bepret fidel  
Evit ma massacrin bremen an den cruel ;  
Terrupla den zo bet ebars en Barbari

E zeo ar Roue Pers evit beza den cri :  
Rac se Demp dar blacen vit en em brepari,  
Pa arruo enon ma vomp prest da c'hoari.

---

AR ROUE PERS HAC AN DIAOULLO.

*Ar Pach a lar :*

Bed on en Hiberni, lavaret en deus din  
E zeo prest pa gueret donnet da gombattin.

*Ar Roue Pers.*

Pala vantre saint gris ! medi ma c'hourach me ;  
Diaoullen an ifern ma sicouret yve.  
Quement so ae'hanoc'h, leonnet milliguet,  
Jupiter, ma mignon, ha ma mest Mahomet,  
Discoet ho puissanc, foeltret din ho feno,  
Lequet e dre'n anter, taillet e a bezfo,  
Pa vezoz question da guemer an armo.  
C'houi, ma Doue Minerv, zo mest er vataillo :  
Ret din ho puissanc, mar deus moyen er bed,  
Pa meus necessite, ma vezin sicouret.  
Col a ran ma squiant, nan dit breman presant :  
Hastet dont dirazon breman soudan vantau,  
Ha na lest hini beo, an dra-ze me ho ped,  
Goel ve guenen en beo certen bezan losquet,

---

AR ROUE HIBERNI, AR ROUE TURCQ, AR ROUE PERS  
HAC AN DIAOULLO.

*Ar Roue Pers a lavar :*

Ac'han, camaradet, chetu ni en em gavet ;  
Me guitta ar bed-man ma u'ho ran glac'haret.  
Diaoullo, ma oe'hu, avancet prest aman,  
Tollet ho flammo tan var gorfo ar re-man,  
Parfoeltret int quer munut a ludu,  
Evel a ra eur vilin ar flour deus an hed-du.

*(An Diaoullo a dol tan.)*

*Ar Roue Hiberni.*

Penos, tud milliguet, sorcerien execrabil !  
Me ho suppli breman, Saturn ha Jupiter,  
Discoellet dar re-man e zon ho servijer,  
Gant an tan artific hon lesqui a fel de ,

**Ha rac se, Jupiter, terrasset aneze.**

*Ar Roue Turcq.*

Mihieyen, leret petra a fel dec'hu.  
Idolo puissant, o pellec'h e zoe'hu !  
Parfoeltret aneze, na jest quet davantach  
Ac'hanon d'ho pedi, freuza ran gant arach.

*Ar Roue Pers.*

Pa le vantre jarni ! or sa ne batten moin.  
Sicour din, va idolo, evit ho barfoeltri,  
Dispennet aneze, losquet ha massacret,  
Ne respectet hini pa vezet commandent.  
Lequet artifço, flammo, tan violent,  
D'ho lesqui voar ar plac aman presantamant.

*Ar Roue Hiberni.*

Mahomet, ma oc'hu, discoellet ho puissanc,  
Sicouret ac'hanon breman gant ho presanc,  
Parfoeltret ho esquern, torret int a bezio,  
Hac achet din ho c'hic evel boet pasteio.

*Ar Roue Pers a den e glenve.*

Avancest, mabo gast, me renonç da'm Doue,  
C'houi pe men ar veech-man a gollo e vue ;  
Nen deus quen question, an dra-ze a zo goret,  
Tol evez mat, va den, pe e vi glac'haret.

(En em gregui a reont.)

*Ar Roue Hiberni a lar :*

An Diaoul, a gredan, a zo en e goste,  
En form ma ve eun den o combatti iye.

*Ar Roue Pers.*

Courach, Mars ma mignon, tol ar foeltr varneze,  
Ne chom quet mes requet da sellet pel onte.

*Ar Roue Turcq.*

Idolo puissant, deut breman d'ho foeltra.

*Ar C'hondt a Poëtou a antre hac a lar :*

An Diaoul da'm dougo ! petra eo quement-man ?  
Biscoas ne meus goellet c'hoari evel homan.  
Or sa, demp voarneze hep tam remission,  
Avancest, soudardet, hep tam apprehension.  
Allon, serpent vil, Lucifer milliguet,  
Breman me ho tizo pe e zon me tromplet.

(Sortial a ra.)

(An tri Roue an eil d'eguile.)

*Ar Roue Turcq a lavar :*

Col a reomp gant eman : pa-gleffen parfoeltra,  
Men toue dec'h certen biquen ne boeltronan.  
Me ya breman soudan da scrifa eul lizer  
Evit e gas dezan dre dorn eur messajer,  
Da ziscleria brezel dezan publicamant ;  
Etu ta, ma mignon, hep tam retardamant.

*Ar Roue Pers.*

Saturn ha Venus reit din oc'h assistanç,  
Parfoeltret ho fенно dre oc'h oll buissanç,  
Na lest quet aneze da rebarbi ouzin,  
Bezet bepret fidel er c'hoste ma vezin.

*Ar Roue Hiberni var e zaoulin.*

Lucifer, Jupiter, Venus hac Appollon,  
Me n'em recommand dec'h deus a greis ma c'halon :  
Oll Doueo hac idolo deus an douar,  
Roit din ar victor pe em bezo glac'har.

*Ar Roue Pers var e zaoulin.*

Neptun, Belzebut, Astarot ha Pallas,  
Foeltret on innimiet en calon ar mor glas ;  
Pe mar deuont aman, roet Demp ar gourach  
M'or bezo voarneze atao an avantach.

(Sevel a reont en o zao.)

---

AR C'HONDT A POETOU A ANTRE.

*Ar Roue Turcq a lavar :*

Aru eo ar vech-man va innimi mortel,  
Aru eo ar vech-man, me voel an infidel :  
Arrettet, camarot, pe vezi carteriet,  
Rac e zout var ar poent da vezan quemeret.

*Ar Chondt.*

Penoz ! lavar, va den, terrapl out effrontet ;  
Digor da daoulagat, cousquet out c'hoaz me gret.  
Avancet, soudardet, deut buan d'am sicour,  
Parfoeltret ar re-man, het varneze a foul,  
Ne espergnet hini, lazet ha cartieret,  
Tanet ha violet ha groague ha merc'het.

*Ar Roue Pers.*

Vantre d'or Mahomet ! pelec'h or'hu manet,  
Ar voec'h-man e varvan sur ma n'am sicouret.

*Ar Roue Turcq.*

Breman, Autrone, dispieguet oc'h armo,  
Squeit adreus ho feno a lest yac'h ho c'horfo.

*Ar Roue Hiberni.*

He bien, Autrone, tollet hevez, m'ho ped,  
An ini a dizin me er graï glac'haret.

(*Combatti a reont.*)

*Ar Roue Turcq a lavar :*

Ha ! ma lesqui a ra gant e artifisso.

*Ar C'hondt.*

En em rent, camarad, pe me tisparfoeltro.

*Ar Roue Pers.*

Va Doue Mahomet, me zo poas glaou ludu.

(*Ar C'hondt a sorti.*)

*Ar Roue Hiberni.*

Jupiter, va buez zo ar vech-man achu.

(*An tri Roue a ya er mes en eur grial.*)

---

*Ar Roue Turcq a lar :*

Goude quement trubuil a meus bet er bed-man,  
Quent gant ar brezeillo er rouanteles-man,  
Quent gant an nec'hamant am boa var ma speret,  
Ho sonjal em speret er pez so da donnet.  
Avis a ra guenen e meus ar volonté  
Da gombatti ar C'hondt pe da gol ma bue :  
Biscoas deus a dachen me na renquis quittat  
Evit nep innimi nac evit nep combat,  
Quen a voe an den-ze a zo quen divergont ;  
Rac evel eur c'hi clan e tilame varnomp.  
Mes resolveton c'hoas da gombatti ontan,  
Hac e cleffen meravel ne spontin muin razan :  
Ya, goel ve guenen cant mil goech perissan  
Quent evit ma trec'hes ac'hanon ar vech-man.  
Rac se, hetta Courrier, dallet al lizer-man,  
Hac et betec ar C'hondt, a leveret dezan  
E meus eur c'hoant bras da gombatti ontan,

Palamour ma zeo bet o ravaji ar vro-man.  
Birviplen an dra-ze ne accordan dezan.  
Herve ma intantan en deveus lavaret  
E renq gouarn ar vro-man, ar pez na raïo quet :  
Entre ma pado an dir a zo en becq ma c'hlenye,  
Me a ranco bepret souten va majeste.  
Goel e ve guenen cant coech evit unan mervel,  
Quent ma voelfen eñ plac eun den zo quer cruel.  
Er fin, me gred erfat, erve ma zantimant,  
E cleomp ar vech-man renta dezan tourmant ;  
Gant sicour va Doue ha gant e azistanc  
Mé'm bezo ar victoar. Courrier, gaît dilijanc  
Het da gavet ar C'hondt, ha leveret dezan  
E rancan c'hoas eur voech en em ganna ontan.

*Ar C'hourierr.*

Pa gommardet, sir, ret eo oboïssa ;  
Ar pez a leveret a rin sur mar gallan.  
Ogon, aon bras a meus pa vezin het d'e dy,  
Na raï ma distrujan gant ar valiç ouzin.

*Ar Roue.*

Ne sonjet quet en ze, nen deo quet permettet  
Da renti nep affront d'ambassadeur casset.  
Avoalc'h en deffe groet mar carre ober ze,  
N'ho pet morc'het ebet ha fiet ennon-me.

*Ar C'hourierr.*

Me ya da bartia entreze ar Poëtou,  
Mar retornan dar guer eno pezo quelo.

*Ar C'hourierr a lar dar C'hondt :*

Salud dec'h, Autro ar C'hondt, deus a greis va c'halon.  
Me a zo deut aman gant apprehension,  
Abeurs ar Roue Turcq en deus va digasset :  
Chetu aman eul lizer, me ho suppli lennet.

*Ar C'hondt.*

Penoz, eoquinet fal, terrupl e zon soezet !  
Het d'ar guer, ha d'ho mest deus ma feurs leveret  
Me arrivo gantan var ben nemeur amzer,  
Da reï brezel dezan, sonjet en e affer.  
Ret eo din eur vech e renti mizerapl,  
Quen a vezo neuze n'en em gavo erfat.

*Ar C'hourrier.*

Adieu, Autro ar C'hondt, me a rent dec'h graço,  
Me ya da lavaret dezan prest ar c'helo.

*Ar C'hourrier d'ar Roue Turcq.*

Me ho salud, sir, deus a greis ma c'halon,  
Abeurs an Autro ar C'hondt zo eun den divergont,  
Evel ma zeo certen, pa gleo comz a vrezel,  
Me sonje coulz a voa e voan prest da vervel.  
Lavaret en deus din ho rento mizerapl,  
Quen a vezoz neuze n'en em gueffet erfat.

*Ar Roue Turcq.*

An Diaoul da'm dougo ! ne ars muin ma speret,  
Hep mont d'en em venji var an den revoltet.  
Ha rac se, ma Bachet, goulennomp assambles  
Grasso an idolo, ma haïomp c'hoas eur voech  
Da lacat oll en tan, en goad hac en moguet,  
Quement den en antier a vezoz hon enep,  
Ha principalamant ar C'hondt deus a Poëtou :  
Jupiter en dalc'ho ar voech-man en e lassou.  
Ya, arraji a ran pa sonjan en den-ze,  
Bette col ma squiant memeus a ran bemde,  
O sonjal pe en guis na dre pe sort fesson,  
E c'hallen en tree'hi ebars en trahizon.  
Me ya da brepari eun arme puissant,  
Ar brassa a c'hillin, dimeus a dud vaillant :  
Quement se a gavan ar goella da ober,  
Rac ret eo cavet tud quent commanç ar brezel.

---

**AR C'HONDT GANT E DUD.**

Clevet, va den a gampr, dec'hu e commandan,  
Pa veet er batail ma veet ar goellan,  
Rac aon a meus terrupl ne vances a galon,  
Me raï ho punissa mar ho quelan poeltron.

*Ar Pot a gampr.*

Credet parfettamant james ne raen ze,  
Rac me ve goel guenen perissa en arme,  
Evit ma soupconnach an dra-ze em enep,  
Eun den quer puissant evel ma zon me bet.  
Pa glevan an drompil hac an tabourin bras,

E sao ma bleo em pen quement eo ma c'hourach,  
Ha pa ve tri c'chant den dirazon me armet,  
Ne vent quet evidon : biscoas ne meus goelet  
Ma far en ep tachen, evit eun den yaouanc,  
James ne meus doujet Franç, Turquet na Flamanc :  
Gout a ret ma doare, pa vezan colleret  
Nen deus den evidon, neus cas quen redoutet.

*An Digentil.*

Me zo bet meur a voech a enep an Durcquet,  
Biscoas c'hoaz en eb lec'h ne meus gante collet ;  
Ha me a bromet dec'h, mar gallan c'hoas eur vech  
Atrap ini an ê er gombat en hon toez,  
Birviuen n'am bezo mizericord ontan,  
Ne vanquin james dec'h, an dra-ze promettan.

*An Tenzorier.*

Autro ar C'hondt a Boëtou, me zo ho Tenzorier  
Evel ho Capiten ordinal er brezel ;  
Biscoas noc'h eus goelet eun den en ep cartier,  
Ha guement am drec'he nac er mes nac en quer :  
Me zo bet alliez en peril ma bue  
Aboe ma zon guenec'h o redec an arme,  
Biscoas bettec breman noc'h eus goelet hini  
Ha guement am zrec'he pa vije ret c'hoari  
Gant cleve na gant lanç, gant pic na gant mousclet,  
Na gant nep sort armo pa vijen coleret,  
Nac ive a grette scignal memeus ho dent,  
Rac mar caffen unan, me golfe ma squient.  
Anfin me bromet dec'h evel gant guirione,  
Pa vezan en coler den certen n'am zrec'he.

*Ar Pot a gampr.*

Intentet, Tenzorier, ouzoc'h e parlantan,  
Ha c'houi het eur c'hoari eun tol ouzin breman,  
Rac me lavar breman biscoas ne guevis par  
En eb lec'h er bed man var an douar.

*An Tenzorier.*

Penoz, lavar fripon a sonjal a res-te  
E zon eur marvailler evel ma out-te ?  
Me guitta Lucifer hac an oll idolo  
Ma na guere sreï peoc'h ha serri da gueno ;

Mar commansan guenet me a rai dit irvout,  
Ma na ziscoen dit petra eo ma gallout.

*An Dijentil.*

Ha c'houi gleo, Tenzorier, terrapl e zoc'h robust !  
Ne gleet quet parlant er c'his-se ous an dud.  
Rac se, me ho suppli da derri ho courach,  
Breman e meus esper e c'haïomp en beac'h.

*An Tenzorier.*

Sel nac a coquin fal zo arru var ma zro !  
Penoz, mic'hieien, ne ouzoc'h quet piou on !  
En em dennet am fac, roet din peoc'h aze,  
Pe me ho pruzuno evel quic eur paste.  
Terrapl out effrontet comz ouzin evel se,  
Rac mar fachan ouzac'h me oc'h estropife.

*Ar Pot a gampr.*

Nen deus quet a affer da sonjal rezoni,  
Goude ni a voelo piou a gollo ar barti.

*An Tenzorier.*

He bien, daou fripon, daou neant, daou scantec ,  
Ha c'houi oc'h eus courach ? me zo prest pa gueret.  
Biscoas n'am eus goelet aboe on en arme  
Evit tri na pevar na gombatchen onte.

*An Dijentil.*

Quement-se a zo mad : me zo contant yvez  
Da approu ma c'hlenve a meus bet a nevez,  
Evit discoe er fat penoz em boa esper  
Da gombatti ouzit ep dale pel amzer.

*An Tenzorier.*

Te ne n'em anavez es quet a dra sur, effrontet,  
Me ho tisco da gomz, gloriis out meurbet.  
He bien, Autrone, chetu me da guentan  
Prest da c'hoari ouzoc'h : piou a zeuio breman ?

*An Dijentil.*

C'houi lavar, Tenzorier, e zoc'h eun den vaillant,  
Breman me ho tisco mar approchet aman.

*An Tenzorier.*

Par la tete mornon ! eman zo din affront :  
Pe lec'h e zeo manet an Doue idol ont.  
Avis a ra guenen e collan ma squient.

Penoz on diffiet gantes en creiz an ent,  
Eun den quer puissant evel ma zon breman !  
Nan dint quet couseoude evit ma repoussan.  
He bien, Autrone, ha c'houi zo prest ho taou ?  
Darn dimeus ac'hanomp a zo ret a gollo,  
Hae specialamant ar c'henta a zo bet  
Hardi avoalc'h ac'hanoc'h d'am beza diffiet.

*Ar Pot a gampr.*

Na liviris netra na lavaran breman,  
Tol evez, mar queres, c'hoas er evertissan :  
Lavaret a ran dec'h divoal pa ho pedan,  
Rac mar trec'han varnoc'h james n'ho pardonnau.

(En em gregui a reont.)

*An Dijentil a lavar :*

Me a varfe cant coech quent evit ma tiseroguen :  
Pala ventre saint gris ! re e teut var ma c'heingn !

*An Tenzorier.*

En em rent heta, ha ro din da glenve,  
Pe otramant, ma den, me am bo da bue.

*Ar Pot a gampr.*

Biquen na raffen ze, goel ve guenen mervel,  
Pa vin maro aman nan din quet dar brezel.

---

AR C'HONDT HAC E DUD A ANTRE.

*Ar Chont a den e gleve hac a lar :*

Penoz, friponnet fal, evel se eo ober !  
Me a zelle ouzoc'h a brenest ma dourel :  
Mar ho eavan james en coler evel se,  
Credet assuramant em bezo ho pue.

(Sortial a ra.)

---

PROLOG.

Compagnunes honorabl, goelet oc'h eus aman  
Tud ar C'hondt a Poëtou ho clasq en em lazan.  
Pan deo bet arruet ar C'hondt gantes ho zri,  
E voaïnt anflametta ouz en em attaqui ;  
Mes breman c'houi voelo, allas ! eur gombat-all :  
Rac Roue an Turcqui a guemer hep farsal  
Gantan oll tud e dy hac e noblanç ouspen,

Hac e c'heont entreze hac ar blacen,  
Evit gorto ar C'hondt hac e dud a vanden.  
Evit e gombatti ho deveus coneluet  
Lacat tan artisiç ma voïent oll distrujet.  
Quement-se a ra dez chom pel amzer  
Da gombatti ontes, dre voyen Jupiter  
Ho devoa invoquet quent evit en em avancé :  
Goude sicour enes e c'heont hep contenancé.  
Ar C'hondt deus a Poëtou pa voello quement-se,  
E vezoz estonnet quercoulz hac e arme.  
Fallout a raï dezan ho zilezal a gren :  
Avis a raï dese e c'heont dan ifern,  
Pa voelont an tan-ze ho coeza var ho fen :  
E c'harrajont neuze ma bômbattont hep fent,  
Ha ma rentont confus an Turequet pen-da-ben,  
Hac o deus ar victor var ho adversourien.  
Erfin, assistantet, enber c'houi a voelo,  
Ne lavaran quen dec'h. Me gleo an trompillo  
Hac an dabourin vrás o c'hervel pepini  
Da guemeret armo, rac ret eo combatti.  
Escuzet, Autrone, ne meus quen a amzer,  
Breman incontinant e commanç ar brezel,

---

AR ROUE TURCQ, E SUIT HAC AN DIAOULLO.

He bien, Autrone, ha c'houi zo preparet ?  
Ret eo c'hoas dimp goulen sicour gant Mahomet.  
Ni ho pet, Jupiter, deus a greis hor c'halon,  
C'houi gommard dar c'horun en pep occasioñ :  
Ha c'houi, ma Doue Mars, zo mest er bataillo  
A supliomp yve-a greis hor c'halonno,  
Assambles gant Mercur, Minerv ha Junon,  
Venus ha Neptun, hac yve Appollon.  
Ma sicouret breman pa meus necessite,  
Pe roet ar gonseil, me zo contant a ze.

Ar Chenta Diaoul.

Quemer tan artisiç da deuller varneze,  
Hac en pat ar gombat gra subtil an dra-ze,  
Ha neuze marteze me en eum gavo guenet  
Ha te a voar heta piou a lavar dit se.

*Ar Roue Turcq.*

Me ho trugareca, va Doue Jupiter,  
Da zonnet d'am sicour breman pa meus affer.  
He bien, Autrone, n'ho pet quet a vorc'het,  
Ni hor bezo sicour en ep pep sort tempest;  
Me lacaï artifiç da voronet var ho feno  
Pa sonchont neubeuta, dre c'hraç an idolo.  
Biscoaz n'am eus goellet eun den evit eur C'hondt,  
Na drec'hchen, ha pa vije eun neubeut divergont.  
Jupiter d'er frezo ha Mars d'en saccajo,  
Neuze gant ma c'hlenve me en peur achuo.

*Ar Chenta Pach.*

Guir sur a leveret, biscoas ne meus goelet,  
Pa vijac'h er gombat voac'h ar goella bepret,  
Quen a voa combatti ouz ar C'hondt a Boëtou,  
Mes evit ar voech-man me gret e finisso.

*An Eil Pach.*

Ne meus quet a vorc'het p'on deus azistanç  
Digant an idolo,, nan daïmp en assuranc,  
Ha me a zo ive, evit eur pot bian ,  
Ar goellan ha gaffet ebars er c'hartier-man.

*Ar Roue.*

Bon courach, ma bachel, joa meus pa ho clevan :  
Aviz a ra guenen e trech'hin ar voech man  
Ar C'hondt deus a Boëtou hac e oll soudardet,  
Pe guer cri benac int ni ho craï glac'haret.  
Demp eta, Autrone, da dressa hon armo,  
Ha principalamant greomp artifisso  
Da strinca varneze pa vezomp er gombat.  
M'em bezo confianç pa vezin armet mat.  
Jupiter, Mercur, Mars, Venus ha Junon  
A zeuio d'am zicour quercoulz hac Appollon.

---

**AR C'HONDT HAC E SUIT A ARRIV EVIT COMBATTI.**

*Ar Chondt a laver :*

Sperejo milliguet, leonnet infernal,  
Reit din oc'h azistanç breman souden ractal,  
Da venji an affront pini rer din breman :  
Hep tam retardamant deut, oll ho consultan ;

En em dastumet tout da reï din ce'h avis,  
Hep exception em eus dee'h oll implich.  
Dizesperi a ran ha fonta en douar,  
Col ma squiant a ran ha mervel gant glac'har;  
Memeus freunezia a fel din ar voeeh-man :  
Reit din prest oc'h avis, gant glac'har e varvan.  
Pétra meus me da ober deus ar Roue fal-ze,  
An den impertinent am attaq adare?  
Mes evit ar vech-man, pa gleffen perissa,  
En pe me, en eur guir, a renco finissa.

*An Tenzorier.*

N'ho pezet nep morc'het, Autro, evit ennes,  
Ar gombat-man neo quet eur gombat a nevez,  
Quer e voe dezan, mar en deus memoar vad,  
Ma rancas enon rog quemeret tec'h ar c'hat.

*Ar Baron.*

Biscoas nan boe dezir evel a meus breman  
Da gombatti ouz den evel ouz an den-man.  
Avis a ra guenen, ma ve aman presant,  
Gant ma zello hep quen e sponten anezan.

(Aman e reont trous vrás gant ho armo.)

*An Dijentil a lavar :*

Aviz a ra guenen clevet trous an armo,  
An tabourin ho son; me a voel ho lango :  
Rac se, en em preparomp pa sonjer neubeuta,  
Divoallomp mar queromp, haru int ar vech-man.

*Ar Roue Turcq hac e suit.*

Serpantet violent, griffon an aer roüant,  
Deut oll d'am azistan, pe em bezo tourmant :  
Curuno ha luc'het, tempest hac avello,  
Ma sicouret breman dre c'hras an idolo.  
Freunezia a ran pa zellan e bizach,  
Avis a ra guenen e medi en arach.

*Ar C'henta Diaoul.*

Chede me deut presant evit da azista,  
Ne bon tao, camarad, na vezi quet goassa.

*Ar Roue.*

C'hoas e meus esperanç pa voelan Jupiter,  
Avis a ra guenen ennes a zo fidel.

*An Eil Diaoul.*

N'ho pet quet a vorc'het, tout e c'haïmp, ha neuze,  
Mar bezet ar goassa ni ho c'hasso ac'hane,  
Ha que hardimant hac esper ennon me.

*Ar Chenta Diaoul.*

Autro ar C'hondt a Boëtou, chetu deut ar Roue.

*Ar Roue.*

He bien ! tra superb, effrontet, arrogant,  
C'hoas e rancan cavet va rebec'h franchamant :  
Aboe ar veach-all, mam boa groet ar brezel,  
E zon bet o pourmen da glasq dit eur guentel,  
Hac e meus choazet ha clenve ha pico,  
Ha lanço ha mousclet, hac a bep sort armo,  
Hac e prezantan dit ar choaz dimeus ane,  
Tol evez, mar queres, breman ouz ma c'hlenve.

(*Reï a ra dezan eun tol cleve.*)

*Ar Chont a lavar :*

Manquet out, camarad, hogon queun ho pezo,  
Mè voollo pehini ac'hanomp a gollo.

*Ar Roue.*

Ya, pala sandier, disesperi a ran !  
Penoz, ma Doue Mars, adare e collan !  
Me requet Jupiter zo mest dar c'huruno  
Da zisquen voar da ben da foeltra da vempro.

*Ar Chondt.*

Na vez quet quen hardi, aveurtet ho cavan ;  
Gant da oll Doueo e sonjes on trec'han.  
Da Doueo ha te ha da oll idolo,  
Quement tra infernal a zo en ifernio,  
Me a tepre, ma den, gant eur greunen c'hollen,  
Hep lavaret marvail nac ar sicour a zen.

*Ar Roue.*

O tra epouvantabl ! diaoullo milliguet !  
Deut oll, treo infernal, ar vec'h-man em requet ;  
Evit saccaji din eman presantamant,  
Rac eur revoltet eo en hac e lutinant.

*An Eil Diaoul.*

Darho gantan mignon, an dra-ze a zo scler,  
Pa yo troet e guein groa neuze e affer.

*Ar Chondt.*

Avis a ra guenen e clevan an Diaoul  
O reï dezan cusuil evit c'hoari e dol.

*Ar Roue.*

Tollet evez breman ha divoallet ouzin,  
Ne ars muin ma speret, en eum venji a rin.

*Ar Chondt.*

Or sa, breman ma Barron, petra sonjettu c'houi ?  
Ho pedi ran quenta da vont da gombatti.

*Ar Baron.*

Sir, avancet heta ma clevin ho toarre,  
Escus a c'houennan dre ma zoc'h eur Roue.

*Ar Roue.*

Effrontet fal ma zoc'h, evel se eo parlant  
Ouz eun den eveldon a zo quer puissant.

*Ar Chondt o volet e Baron ho coll.*

Holla ! en em retiret pe men bo ho puez,  
Na bermettin james poussi varnezan re.

*Ar Roue.*

C'houi eta, Autro ar Chondt, a raïo evittan,  
Rac er bolonte-ze e zon me deut aman.

*Ar Chondt.*

He bien ! ya da, quement-se a zo groet.  
Or sus, ma soudardet, ha c'houi zo preparet !

*An Tenzorier.*

M'em boa lavaret mad e vije tom varnout.

*Ar Roue.*

Vantrechou ! ha te, Jupiter, hast donnet d'am zicour.

*Ar Chenta Diaoul.*

Fors ! n'allan muï pelloc'h, gra evel a guiri ;  
Avis a ra guenen e vary ma hizili :  
Biscoas ne voe eun den, certen var ar bed-man,  
A squiche an Diaoul que ne voa ar Chondt-man.

*Ar Roue.*

Gra e vel a guiri, ar vechi-man e varvan,  
Mallos an oll Diaoul ha roan d'ar Chondt-man.

(*Ar Roue a ya quit.*)

*An Tenzorier a lavar :*

Men boa bet lavaret quent finissa ar c'hoari,

E vije eur fler vrás gante pe guenemp-ni.  
Ya, dre guir c'hoari ho deus collet gueneomp,  
Partout e c'honneomp en quement ma c'heomp.

*Ar C'hondt.*

He bien ! Tenzorier, eun den vaillant oc'h bet :  
Ne bon, ma mignon quer, recompancest e veet.

(Sortial a ra.)

---

AR ROUE HAC E BACHET A ANTRE.

*Ar Roue a lavar :*

Col a ran va squiant, nen deus quen question,  
Avis a ra guenen e voellan daou demon,  
Ha gantes diou gorden evit presanti din,  
Da veza ma anco, ret eo din oc'h redin.  
Penoz ! bezan collet a ben diou vech gantan !  
Diaoullo infernal, ma sicouret breman,  
Prestet din ho taouarn evit m'en eum grouguin,  
En em brecipita a gaffen goella din.

*An Eil Diaoul.*

Malevrus, ne c'heus quen nemet se da ober,  
En eum dol en toul-man hac e ri da affer.

*Ar Roue.*

Me raïo quement-se : adieu, popl ar bed-man,  
Mallos ma idolo a roan d'ar C'hondt-man.  
Diaoullo malevrus a guement a gaffet,  
Diredet dam sicour da ober an tol fet,  
Croguet oll em daou droat ha torret ma gouzouc,  
Goel eo din quement-se evit monnet d'ar grouc.  
Satan, Pluton, Luter, quement diaoul zo tout,  
Ne dar quet davantach hep donlet var ma zro.

(Sortial a ra.)

---

AR C'HONDT HAC E DUD. *Ar C'hondt a lavar :*

Ret eo dimq c'hoas eur voech mont dar gouent hare,  
Evit lacat an tan da zevi ar re-ze :  
Rac se c'houi, Tenzorier, bezet fidel bepret  
Daouest petra vez, vit dec'h na vanquin quet.

*An Tenzorier.*

Me lavar quement-all, n'ho pet quet a vorc'het,

Er fesson ma c'hillin m'ho sicouro bepret.

*Ar Baron.*

Mar gallan c'hoas eur voech antren er gouent-se,  
Biquen compassion n'am bezo evitte,  
M'ho lacaï quer munut en tan hac en moguet,  
En goad hac en ludu, hep tam true cbed.

*Ar C'hondt.*

Or sa, var quement-se Demp en quer adare,  
Evit en eum bourmen: da ober eur bale.

---

SANT BERNARD , AR PAP , AN ESCOP , AR C'HARDINAL .

*Sant Bernard a lavar :*

Pa deuan da sonjal er C'hondt deus a Boëto,  
E sao ma bleo em pen hac e cren va mempro.  
Pliche gant ma Doue a zo Crouer dar bed ,  
E c'hallen c'hoas eur voech er gouent er goellet :  
Avis a ra guenen e raffen ma effort  
Evit ober dezan goulen mizericord.

*An Escop.*

Caer oc'h eus laret se, col a ret oc'h amzer,  
Nen deus muin a vemoar a Jesus hor Salver.  
Biscoas na meus goellet eun den quen revoltet  
Evel ma zeo enez, ma c'hridi a ellet ;  
Pa er goelis quenta en coler evel se,  
E sonjen couls a voa e coljen ma bue,  
Ha goudeze arre e creden em c'halon,  
Em c'hemere arre vit e brassan mignon.

*Ar Pap.*

Eun den douguet meurbet eo ar C'hondt a Boëto,  
Conqueret en deus tout cazi ar provinçeo.

*Sant Bernard.*

Mar gallan c'hoaz eur vech donnet den rancontri  
Me rai ma oll effort evit dont d'e zistrei,  
Moyennant azistanç auteur ar firmamant.

*Ar C'hardinal.*

Ne vo caz anezan, ar C'hondt so hep e bar,  
Nen deus den er bed-man quer cruel, quen digar.

*Sant Bernard.*

Poent eo dimp finissa ar recreation,

Ha monnet adare da ober oraison ;  
Mes evit an den-ze particulieramant,  
Ma teuï Doue da chanch breman e santimant.

**AR C'HONDT HAC E DUD.** *Ar C'hondt a laver :*  
Ret eo din hep tardi applica va squient  
Da dourmanti Bernard ha menec'h e gouent :  
Nen deveus quet c'hoaz pel abaouez ma meus bet  
Eun affront digante, ma mez eo en laret.  
Dont da lavaret din mont gantan da leinna,  
Ha neuze en em lacat assambles da gana.  
Quemeret a rejont memeus ar sacramant.  
Ma tiscarjont ma zud ha me ennon prezant ;  
Mes me am boa calon hac a voa courajus,  
Hac a falveas din mont dar relijus :  
Daou dra a voa en guen a bep coste dezan,  
Hac a vire ouzin, ne allen e lazan ;  
Mes mar gallan breman er c'havet evel se  
Hep tam remission men bezo e bue.

**SANT BERNARD GANT AR SACRAMANT.**

*Ar C'hondt a laver :*

Pale vantre mornon ! heman zo din affront.  
Penoz, sorcerien fal, traou infam, divergont !  
Na petra eo a ret, na petra a glesquet ?  
Pessort intantion a zo en ho speret ?  
Responent aman din prontamant, hep cartier.

*Sant Bernard.*

Distro c'hoaz eur veach ouz Jesus da Salver,  
Pehipi gant e c'hras en deveus da brenet,  
Tol evez mad, ma den, pe he vezi collet.

*Ar C'hondt.*

Mar queret ho croc'hen ne gomzet quet a ze.

*Sant Bernard.*

Distro c'hoaz, den mechant, distro ouz da Doue.

*Ar C'hondt.*

En em den deus ma faç pe mes craï glac'haret.

*Sant Bernard.*

Autro ar C'hondt a Boëtou, avizet mar queret :

James n'ho quitaïn, gret ar pez a gueret.

*Ar C'hondt.*

James n'en rentan, quent en em brecipiten.

*Sant Bernard.*

En ano da Doue a zo Crouer dar bed.

*Ar C'hondt.*

Coulz e zeo dit pidi en ano Mahomet.

*Sant Bernard.*

En ano an Ele hac ar Sent zo en evo.

*Ar C'hondt.*

En ano an Diaoul dimeus an iffernio.

*Sant Bernard.*

Ma Doue, ma C'hrouer, roït din oc'h azistanç.

*Ar C'hondt.*

Ha c'houi roït oc'h ini dime, dizesperanç.

*Sant Bernard.*

Mari, mam da Doue, ho pet onten true.

*Ar C'hondt.*

Me guitta Jupiter, ma n'an be da bue.

*Sant Bernard var e zaoulin.*

Distro ouz Jesus-Christ, goulen ontan pardon,  
Dre verit deus e maro hac e bassion,  
Ho contempli er poagnio en devoe e vam guer,  
Pa voa ouz er goelet ho prena ar pec'her.

*Ar C'hondt var e daoulin a rent e gleve.*

Me renonç pen-da-ben d'am bue tremenet,  
Moyennant azistanç hor Salver biniguet,  
Hac ar Voerc'hes Vari ; onnes zo bepret mad  
Ouz he oll bugale, mèmeus pa zint ingrat,  
Me c'houlen diganti he benediction,  
Ha digant ma Jesus e c'houlennan pardon.

*Sant Bernard.*

Courach, ma mignon, Doue da vezò meulet :

Adieu, Autro ar C'hondt, quen a vo ar c'henta goellet.

Biscoaz quement a joa nen devoe den er bed ,

Evel ma meus breman pan doc'h convertisset.

*Ar C'hondt.*

O gloriis Vari, guir vam d'on Redemptor!

Mizelour excellant, stereden deus ar mor.

Me voar er fat breman sur ne verittan quet,  
Evit ho servijer da vezan recevet :  
Sepenant coucoude e sonjan em c'halon,  
E meus eur fianç vras enoc'h bepret, Itron ,  
Hac e meus an dezir ive d'ho serviji  
Ar rest deus ma bue en queit a ma vevi.  
Rae se, me ho suppli d'am c'hemeret breman  
Evit ho servicher, ha pa zin deus ar bet-man,  
Prezantet ma ine d'ho map, en ho pedan.  
Ha c'houi, compagnunes, oe'h eus goellet aman  
Chanchamant ma bue, m'ho pet d'am imittan ;  
Rac bet a meus ar c'hraç da anaout pen-da-ben  
Penoz e voan manquet, hac e ren goal lezen.  
Jesus-Christ, ma Salver, zo en em discoelet  
Entre daquarn Bernard, evel mo c'heus goellet.  
Me ya c'hoas d'er c'havet evit cleoet gantan  
Hac en a zo moyen evit ma fardonnan.

(Sortial a ra.)

---

AR C'HONDT A LAVAR DA BERNARD :

De mad dec'h, ma zad, c'hoaz en em avansan  
Da c'houl diguenec'h oe'h aviz ar vech-man.  
Morc'het zo em c'halon ; coucoude e credan  
Oe'h eun den eveldon, mes me zo eur mechant.  
Enez eo ar sujet ma zon deut d'ho cavet :  
C'hoant a meus ar voech-man da vezan pardonnet ;  
Rac me a voar er fat penoz e zon manquet,  
Contant on ar voech-man d'ober vel ma lorfet.  
Esperanç a meus c'hoas em pardonno Doue,  
Gant ober piljen ha chanch deus a vue.

Sant Bernard.

Ma, ret e zeo ober an treo herve Doue.  
C'houi a voar coulz a me petra eo e bolonte ;  
Rac gout a ret er fat en deveus lavaret :  
An nep en deus dezir da veza pardonnet  
A rance tout quittat e oll vaniteo,  
Ha beza vigilant da serviji an Autro.  
Rac petra dal dan oll e oll var ar bed-man ?  
Rac mar col e ine e vije goel dezan

E vije bet mouguet ho tont var ar bed-man,  
Pe n'en dije bue, certen eo an dra-man.  
Rac se, me ho suppli, sonjet er vadelez  
En deveus evidoc'h Jesus, map ar Voerc'hes,  
D'ho peza prezervet ha lezet en bue,  
Prenet deus an ifern, me ho pet sonjet se ;  
Rac eur pec'het hep quen a verit an ifern,  
Mes Doue a bardon ar brassan pec'heorien.

*Sant Guillarm.*

Ma zad, a guir galon me zo rejouisset,  
Ma ouffen e ven c'hoas eur veach pardonnet :  
Raë se, me ho suppli a vir galon breman,  
Pardon dar pec'hejo a meus groet er bed-man.

*Sant Bernard.*

Mar oc'h eus an dezir da vonnet en envo,  
E renquet, assuret, rapari ho foto,  
Rapari dan ilis ha ramplissa ive  
Ar cheffo oc'h eus bet chasseet aneze.  
Neuze, goulen pardon ous an Autro Doue  
Dimeus an insolanc' oc'h eus bet groet deze,  
Hac ho fidi ive da zont d'ho pardonne,  
Ma petoint evidoc'h Jesus-Christ, map Mari,  
Ma vez e bolonte da reï dec'h gouir bardon,  
Ha donne d'ho receo en e brotection.  
Ha quemeret ive evit avocades  
Ar Voerc'hes biniguet, zo en êe rouannes ;  
En eum reï dezi ha sonjal er grasso  
A roï dar pec'herien pere ho goulenno :  
Rac evel ma lavar demp an oll doctoret,  
Pa voe var an douar graç ebet accordet,  
E renq bepret tremen dré daouarn ar Voerc'hes.  
Breman gret pinijen dimeus oc'h oll bue.

*Sant Guillarm.*

Goude ar c'hraç a Zoue dec'hu eo ma ine,  
Pene verdoc'h, sivoas, em boa collet an en ;  
Reit dime pinijen quement hac a guerfet,  
Me a zento ouzac'h gant ar c'hraç an Drindet.

*Sant Bernard.*

Chetu aman ar Pap och' eus dizoblijet,

Ha groet dezan insult quement oc'h eus carret,  
Ha mar oc'h eus dezir evit monnet dan êe,  
E renquent en lacat en e oll dignite.  
Ne apparchant ouz den donnet da choaz ar Pap,  
Doue a renq e reï evit e gavet mad.  
An Escop oc'h eus bet chasseet deus an ilis  
A renq dont ive adare var e c'hiz ;  
Dindan boan a pec'hi, pepini aneze  
A renquet da lacat en ho oll dignite.

*Sant Guillarm.*

Me raïo quement-se gant graç ma Doue ;  
Me a iello da Rom, hac o lacaï arre.  
Pep hini aneze ebars en dignite :  
Hac ho fet a galon da zont d'am pardonne,  
Pan don bet quer mechant da zont d'ho offanci.

*Ar Pap.*

Ya zur, ma map quer, m'ho pardon a galon,  
Hac a ro dec'h ouspen ma benediction ,  
Hac a meus eur joa vrás p'ho coellan distroet,  
Rac eun aon vrás am boa na vizac'h bet collet.

*Sant Guillarm.*

Ha c'houi, Autro Escop, diguenec'hu ive  
E c'houlennan pardon, pañamour da Zoue ,  
Dimeus an insolanc a meus ive dec'h groet  
Er ker deus a Poëtou, pa n'ho poa merittet,  
Memeus oc'h oblijet a enep lezen Doue  
Da reï dime arc'hant, queun vrás a meus da ze.

*An Escop.*

Deus a greis ma c'halon me deu d'ho pardonne  
Hac a bed ar Voerc'hes da zont d'ho proteji,  
Ha da reï dec'h graco a vez necesser  
Da observi lezen zo groet gant hor Salver.

*Sant Guillarm.*

Doue d'ho peo deus ar c'hraç din a ret  
O tont d'am pardonne, rae ner meriten quet.  
Me ho trugareca deus ar vat a ret din ,  
Rac me meus bet groet dec'h goassa ma illin.

*An Escop.*

Arabat eo da zen cavet sonch er bed-man

Dimeus an affroncho pere a rer dezan,  
Ret eo dimp pardonni mar deziromp cavet  
Pardon deus ar pec'het hor be bet commettet.

*Sant Guillarm.*

Demp en anno Doue da gommanç rapari  
Darn dimeus ar fauto a meus groet, sivoas din !  
Adieu dec'h, tad Bernard ; pedit a vir galon  
Doue dre e vadelez da reï din guir bardon.

*Sant Bernard.*

Ya, gant c'hraç Doue, me a bedo bemde  
Ma Salver biniguet vit ma hefet en êe,  
Ma vo e bolonte donnet d'ho pardonni,  
Hac ar c'hraç digantan dec'h da berseveri,  
Da ober pidijen deus an droug oc'h eus groet,  
Ma vezet rentet dign da voelet an Drindet.

*Sant Guillarm.*


O Doue eternel, Crouer ar firmamant !  
O Jesus, map da Vari, c'houi zo oll-puissant !  
O Drindet adorapl, tri ferson en Doue !  
Me a gret oc'h o tri er memeus calite.  
Homan zo din eur c'hraç a meus me rancontret,  
Dre c'hraç ar Voerc'hes sacr me a zo pardonnez.  
Va ine, sivoas din, a voa et dan ifern,  
Panaved Sant Bernard me am bije anquen.  
Da henes e clean, ya gant guirionne,  
Da Bernard e clean pen-da-ben ma ine.  
Me a ia breman da gavet an den santel,  
Pan deo ordrenet din na zalein quet pel,  
A zo aont en draouïen, tost hemedi aman ;  
Pa'n deo din ordrenet ret eo aboïssa.  
Rac se, ma oll dud quer, bezet fidel bepret,  
Ha goulennet sicour digant roue ar bed.

---

AR ROUE TURCQ, E SUIT HAC AN DIAOULLO.

*Ar Roue Turcq a lavar :*

Arrettet, eamarad, terrupl e zoc'h chanchet ;  
En eun dezert bennac, e credan, e zout bet  
Oc'h ober pinijen dimeus da follente.  
Ha c'houi oc'h eus breman bollonte coucoude



Da ziffen ho croc'hen ouzin-me adare ?

*Sant Guillarm.*

Chanchet a brepos, nen don muin er sonch-se,  
Va speret a lacan da serviji Doue,  
**Ha non pas er brezel nac en batail ebet ;**  
**Quement-se, ma mignon, a zo oll tremenet.**  
Me a c'houlen pardon diguenec'hu, Sire,  
Mar am eus offancet nep pret ho majeste.

*Ar Roue Turcq.*

Goechal te a res din da zouja gant eston,  
Gant ar zel deus da ben te sponte ma c'halon,  
Te voa vaillanta den a voa var an douar,  
Eun den fal, eun tyrant, eur geant, eur barbar ;  
Et out oll da netra, ne c'heus mouin a galon :  
Avis a ra guenen memeus out eur poeltron.  
Pa voaz ouz ma redec dre ar c'hampagn guechal,  
Neuze voas den avoalc'h, hac ouspen eun den fal ;  
Goas evit eun diaoul e voa, tra infernal.

*Sant Guillarm.*

Me a zo soezet bras pa deuan d'ho coelet  
Ho tont da adori an doue idolet,  
Pere n'ho deus sicour nac ive assuranç,  
Pere ne ellont quet ho miret deus offanc ;  
Ha me a gret penos e zeus ep mar eun **Doue**,  
Hac a zo crouer dec'h quercoulz eo dime,  
En deus crouet an oll, an ès hac an douar,  
An Ele hac ar Sent, ar steret hac al loar.  
Sanchet prest a lezen hac adoret Doue,  
Roue ar rouanne, zo leun a drugare ;  
Doue an oll doueo hac an oll idolet,  
Ho cridi dar re-ze, sivoas, e zoc'h daonnet.  
Lavaret a ret din oc'h eus nombr doueo,  
Mes nan dint netra tout nemet fos idolo :  
C'houi a ador doueo pere zo inventet,  
Ouzpen lezen Calven, Alcoran, Jupiter,  
Ha goude Mahomet, ha Pallas, ha Luter :  
Ha darn a zo quen dal a ador serpentet,  
Ha darn all a zo ador a bep sort loennet,  
Hac eun nombr all a zo ador eur voezen,

Eur c'hoq, eul loe, eun taro. eur marc'h hac eun ijen :  
Eur sort all a ador eur c'hi, eur c'has hac eun azen.  
Ar re-ze a gredet zo oll doueo ;  
Allas ! ha nan dint quen nemet faus doueo.

*Ar Roue Turcq.*

Penoz, map ar c'hast, tra excumunuguet !  
An oll doctrin a zo guenede revinet.  
Quitte an doue-ze hep tam difficulte,  
Pe me a raïo dit e colli da vue :  
Ha lavar din petra eo an doue-ze,  
Pe aman var ar plaç me'n bezo da bue.  
Chanche prest da lezen ha quitta da Zoue,  
Pe me tisco da barlant er guis-ze ouzin-me.

*Sant Guillarm.*

Me na ran quet a gas dimeus da dourmancho,  
Groet ével ma queret ha bezet ma anco,  
Ne doujan poan ebet, me gret ferm en Doue ;  
Ma sicouret breman, Jesus roue an êe.

*Ar Roue.*

M'ho pet, leveret din eur veach coucoude  
Pe sort sujet oc'h eus da gredi ho Toue ?

*Sant Guillarm.*

Crouer eo dan êe, dar mor ha dan douar,  
Unan dan deïo-man e possedin e c'hloar,  
Ha c'houi a raï ive mar sanchet a vue,  
Hac adoret Jesus a zo roue an êe.

*Ar Roue Turcq a ya dan daoulin hac a lar :*

Me rent dec'h an armo gant pere e sonjen  
Planta an erezi, hac a zistro a gren,  
Hac a c'houlen pardon ouzac'h, Autro ar C'hondt,  
Rae inspiret voan bet da reï dec'h eun affront.

(En em briatad a reont.)

*Ar Roue Turcq a gontinu :*

Me ro dec'h va bue, va c'horf ha va mado,  
Me c'houlen diguenec'h, Autro ar C'hondt a Boëto,  
Pardon a vir galon d'ho peza offancet,  
D'ho peza contestet dre lezen Mahomet.

*Sant Guillarm.*

O Doue, ma Crouer ! c'houi zo oll-puissant,

C'houi zeu da bardonni ar bec'herrien mechant,  
Reï a ret amzer de d'en em gconvertissa ;  
Bras e vec'h offanceet quent ma teud da facha.  
Discoe a ret, Jesus, dan dud ho madelez,  
Ha reï amzer deze da chanch ho goal vuez,  
Pa nan deo digoret an ifern d'hon lonca,  
Tud fal ha malevrus eveld'on hac eman  
Rac ni, sivoas demp, a zo bet debordet,  
Quer souillet hon ine gant viço diremet,  
Bep heur ha pep momet o vlasfemi Doue,  
Bepret e offanceemp, sivoas, e vajeste.  
Me ho pet, tud yaouanq, gant gouir devotion,  
Da adori ar sacramant deus a greis ho calon.  
Neus na coz na yaouanq neb lec'h na den savant,  
Ne gleont adori bemde ar sacramant.  
C'houi tado ha mamo, disquet d'ho pugale,  
Custumit-int abret da serviji Doue :  
Beza zo tud yaouanq maguet re libertin,  
Pere deu aliez da ober eur goal fin.  
Goerc'hes gloriis Vari, bezet avocades  
Ma haïomp dar barados d'ho meuli da james.

*Ar Roue.*

He bien, va breur, adieu dec'h a laran.

*Sant Guillarm.*

Doue d'ho cunduo d'e barados gantan.

(Sortial a ra.)

---

**AR C'HONDT HAC E DUD, AR PAP, AN ESCOP HAC AR  
GARDINALET, AR FAUS PAP.**

*Ar C'hondt a lavar dezan :*

Bonjour dec'h, ma mignon, me a meus bet faziet  
Beza lamet ar Pap evel a meus me groet ;  
Mes breman me a voar assur ar virionne,  
Pa meus bet an enor da voelet ma Doue  
Ebars er sacramant divin deus an auter.  
Neuze me bromettas a dra sur d'am Salver  
E lacajen ar Pap adare var e dron.

*Ar Faus Pap.*

Autro ne allan quet intent ho question.

En queit a ma chommin er bet-man en bue,  
Nen deus Pap all ebet na ne vezo james.

*Ar Chenta Cardinal.*

Effrontet out meurbet dont da lavaret se,  
Te nan dout quet capabl da veza er garg-se :  
Aboe mout commandet da c'houarn, ze so scler  
Nen deus urz vat ebet ebars en nep cartier.

*Ar Pap faus.*

Penos, ine collet, den fal ha milliguet,  
Te eo bet ar c'henta en deus ma recevet  
Da Pap er ker-man, ha lamet eguiile ;  
Ha breman e fel dit beza deus e goste.  
Me zo lequet da Pap ha ne guitaïn quet :  
En espet dec'h me vezo Pap bepret.  
Dre eur valiç e fel dec'h ober ze,  
Eur c'hrim a gri venjanç ouz an Autro Doue.

*Ugen, ar guir Pap.*

Ma mignon, me voa ar Pap, nan deut quet da facha,  
Rac me nan don quet cos mar doc'h deut dar guer-man,  
Rac commandet eo din evel ma voan lequet  
Gant Doue dont arre d'am plaç evel bepret.

*Ar Pap faus.*

Sellet an effrontet, ar c'hoquin didalve,  
Penoz e fel dezan ma lemel evel se !  
Gant ta gontadello, dre eur valiç ouzin,  
E fel dit dont em plaç evit ober mez din.

*Ar Chenta Cardinal.*

Eman a zo choazet, ya gant guirionne,  
Da veza gouarner ha viquel da Zoue,  
Gant ar seremonio a zo accomplisset  
Pa ve election evit choas ar Papet.

*Ar Pap faus.*

Hac eur c'hoste oc'h oll ; mes evit quement-se  
Me ne guitaïn quet ma offic'e coucoude,  
Ha me a lavar dec'h penos ne gleyac'h quet  
Donnet d'am attaqui evit eur sort sujet.

*Ar Guir Pap.*

Penoz, hac e fet dec'h chom da Pap evel se !  
C'houi zo eur chismatiq, consideret en ze ,

E fel dec'h chom da Pap da gol ar gristenés,  
Mes Doue a gredan n'er permetto james.

*Ar Pap faus.*

Hypocrit fal ma zout, ganr ta gontadello !  
En em den deus ma fac gant da oll sarmonio.  
Terrapl out arrogant gant da valiç ouzin,  
Envel ouz eur c'hi clan o tont d'am devori.

*Ar Guir Pap.*

Sallocroas ! ma breur quer, nen deo quet dre venjanc  
E fel din bezan ar chef deuz an ilis presant.

*Ar Pap faus.*

N'oc'h eus tam droue ouzin ! Ya te lavar ze ;  
Pa'm lemes deus ma stat e lemes ma bue.

*Ar Guir Pap.*

Ar stat-se zo gleet din herve lezen Doue.

*Sant Guillarm,*

Ar stat-se, va mignon, nen deo quet gleet dit.  
Me meus-i roet dit dre va otorite,  
En despet dan ilis, enep lezen Doue.

*Ar Pap faus.*

Men boa bet pardonnet dec'h oc'h oll pec'hejo,  
Ha digoret dec'h an or deus an envo.

*Sant Guillarm.*

Va mignon, ma c'hredet, james nan de gleet  
Reï an absolen ma na ve meritet.  
Ar c'hoessour yve, allas ! a ve daonnet  
Coulz hac ar penitant, man deve meritet.  
Rac se ho suplian, ya a guir galon,  
Da zenti c'hoaz ouzin evel eur guir mignon.

*Ar Pap faus.*

Rac se, gleet eo dec'h donnet d'am respecti,  
Ha quenderc'hel bepret, donnet d'am menteni  
Ouz ar ganailles fal-ze a deu d'am attaqui,  
Ha nen dint en ep guis dign da barlant ouzin.

*Sant Guillarm.*

Ma mignon, c'hoaz eur voech, palamour da Zoue,  
En em gonsideret ha chanchet a vue,  
Ha goulennet pardon ouz ar Pap veritabl,  
Hac e sello ouzac'h evel pa vec'h e map.

*Ar Pap faus.*

Ne meus quet da ober dimeus e bardonno :  
Ma lezet em offic, me raï dezan grasso.

*Sant Guillarm.*

Penoz ! en oc'h offic ! c'houi voar ar virionne,  
Me am boa ho croet Pap dre ma otorite.

*Ar Pap faus.*

Rac se, pa voan lequet, c'houi gleye yve  
Dont bepret d'am diffen ouz ar ganailles-se.

*Sant Guillarm.*

Sallocroas, ma mignon, vit ar vech divezan,  
Ma na gueret quittat me raï ho tivisca.

*Ar Pap faus.*

Ne meus affer a zen da zont d'am divisca,  
Ma nan deut d'am zicour me guitaï ar vro-man.

*Sant Guillarm.*

Me n'ho tiffennin quet, men lavar dec'h breman,  
Entre ma touguin bue me brotejo eman.

*Ar Pap faus.*

Roet en divus dit arc'hant assuramant,  
Abalamour da ze em lemes ar vech-man.

*Sant Guillarm.*

Oblijet on da ze : me am boa an lamet  
Er mes dimeus a Pap, rac se e zeo gleet  
Dont d'en lacat adare ebars en dignite,  
Ha da c'houlen pardon ouz an Autro Doue.

*Ar Pap faus.*

Pa deujoc'h d'am choas evit Pap a neve,  
Avis a re guenen e voac'h eun den Doue.

*Sant Guillarm.*

Ha c'houi à gleo, Anaclet, na gomzet quen a ze,  
Rac me voa revoltet sivoas enep ar fe.

*Ar Pap faus.*

Pa voaz quen revoltet, nes poa quen da ober  
Nemert continui, ha dont d'am guenderc'hel ;  
Pa voan me possesseur dimeus an alc'hoeo,  
Me zigorje an or dit pa vijes-te maro.

*Sant Guillarm.*

Eman eo ar guir Pap, ha eman a yello ;

Rac se, me ho suppli da serri ho queno.

(*Guisca a rer ar guir Pap.*)

*Sant Guillarm a lavar :*

He bien, tad santel, me ho pet ar vech-man  
Dre ho mizericord da zont d'am pardonnant.

*Ugen, ar guir Pap.*

Ma map, me ho pardon hac a bedo Doue  
Deus a greïs ma c'halon m'ho pardonno yve,  
Hac a ro dec'h breman en antier absolen,  
Gant ar gondition ma refet pinijen.  
Et da gavet Bernard, enes zo eun den mad  
Hac a zeuï d'ho receo evel pa vec'h e map.  
An tad Bernard a zo eun den santel meurbet,  
A obtено graço dec'h digant an Drindet,  
Ma vezò pardonnet dec'h oc'h oll pec'hejo,  
Ma n'em voëlimp en êe goude on trubuillo.

*Sant Guillarm.*

Me a ya d'er gavet en anno va Doue,  
Doue da reï dimp ar c'hraç d'en em goelet en êe.

*Ar Pap.*

Ya, gant graci Doue, mar groet guir pinijen  
E vezet pardonnet, Doue na c'houlen quen.

*Sant Guillarm.*

Grin gant c'hraç ma Doue, pa gleffen bout lazet,  
Me raï ar binijen a vo din ordrenet.

*Ar Pap.*

Adieu heta, ma map. Ho pezet quun bemde  
Da veza offancet Jesus, crouer an êe.

---

### SANT GUILLARM HAC E DUD.

Dem da gavet Bernard breman, ma mignonnet ;  
Pedet Doue evidon ma vezin pardonnet.

*Ar Baron.*

Oblijet omp da-ze, credet se assuret,  
Ni bedo evidoc'h tri ferson an Drindet,  
Ma vezò pardonnet dem-di hor pec'hejo,  
Ma n'em voelllomp en êe goude on oll boannio.

---

*AR C'HONDT a lavar da Sant Bernard :*

De bonjour dec'h, ma zad. Chetu ma digasset.

Gant ar Pap veritabl, en deus din ordrenet  
Donnet d'ho cavet da receo pinijen  
A vo ho madelez breman din da ordren.

*Sant Bernard.*

Me non don quet capabl da reï dec'h pinijen  
Pini ve convenapl dec'hu en ep moyen ;  
Rac pa gonsideran quement a pec'hejo  
Oc'h eus groet er bed-man, oc'h offanci an Autro,  
Ne ouffen en ep guis reï dec'hu pinijen :  
Rac pa ve difframet ha losquet oc'h esquern  
Ha douguet evit scoer var an oll croas incho,  
Pa ve torret ho pen ha brizet ho mempro,  
C'hoas ne ve quet avoalc'h pa ve groet quemen-se,  
Da appezi avoalc'h coler an Autro Doue.  
Pa ve troc'het bemde diouzoc'h eun ezel,  
Hac an neubeudigo groet dec'h bemde mervel,  
Goudeze dastumet, lequet en eun tantat,  
Goude gant an avoel donnet tout d'ho goentat,  
Dec'h ne ve quet c'hoas groet anduri re,  
Evit appezi coler an Autro Doue.  
Me lavar davantach, pa vec'h en beo losquet  
Evit dont da vernel en eur forn gorret,  
C'hoas ne gaflen quet n'ho pe peur beet  
Evit an oll fautto oc'h eus bet commettet.

*Sant Guillarm.*

Ma zad, me meus esper en madelez Doue,  
Hac e vin pardonnet c'hoaz evit quement-se ;  
Rac Mari Madalan, a zo bed pardonnet,  
Hac e devoa, sivoas, quercoulz a men pec'het.

*Sant Bernard.*

Gouir sur a leveret, pec'heres voa ive,  
Mes contantet e deveus da justic eun Doue.

*Sant Guillarm.*

Me a zo quer contant da zont da anduri,  
Pa meus bet ar malheur, sivoas, d'en offanci.

*Sant Bernard.*

Ho crimo zo quer bras ne on pe dre voyen  
E teuffen da reï enep sort pinijen.

*Sant Guillarm.*

Brassoc'h eo grāc Doue da zont d'am pardonne

Evit nan deo bet on maliç da zont d'en offanci.

*Sant Bernard.*

Sur gouir a leveret, me a voar er fat se :  
Bras eo ar misericord deus an Autro Doue.  
Mes justic Doue a renq beza peet  
Bette an distera diner, an dra-ze zo gleet.  
Rac se n'ouffen quet reï dec'h ar binijen,  
Ha guelliez a grim oc'h eus bed groet, ma den.  
Impossibl e ve din, ya gant guirionne,  
Reï dec'h eur binijen da effaci a neze.

*Sant Guillarm.*

Ho pet true ouzin, me ho pet, ma zad quer ;  
Sant Per a c'houlennas goech all deus hor Salver  
Pet coech dar pec'her pardonnin.  
Doue a respontas dezan en eur c'hoarzin :  
Quen aliez goech ma c'houlenje pardon,  
Pa vez regrettant deus a greis e galon.  
Chetu me en eur stat dispozetz d'er c'houlen,  
Me a goulen breman diguenec'h pinijen.

*Sant Bernard.*

Ma map, assuramant true eo ho elevet,  
Me gret assuramant e vezet pardonnnet.  
Pardonnet vezet sur, n'ho pet quet a vorc'het,  
Poc'h eus quitet a gren ho pue debordet.  
Rac se, me ho suppli ho pet patientet,  
Ha n'ho pet quet a spont ne vec'h quet pardonnnet.  
An Autro Jesus-Christ en deveus lavaret,  
En eur leoriq bian en er a ver serifet  
Ar batiantet hac an humilite  
Oc'h eus ebars en oc'h adversite,  
A blich muin da Doue evit ar gontatamant er brosperite.  
Pa ho coelan dispozetz da ober pinijen,  
Me ia breman da rei dec'h sclerijen.  
Raportet eo penoz, en eur leor historio,  
E renes er bed-man eveldoc'h, eun Autro,  
Hac en devoa ive commettet er bed-man  
A bep sort pec'hejo, memeus ar re brassan ;  
(Mes Doue a zo mad, hac en deveus bepret  
C'hoant da convertissan an dud fal revoltet.)

Ma teuaz da loja daou capucin d'e dy.  
E briet vertuus pa ho goelas arri  
Da c'houlen logeis hac entrezet an ty,  
A lavaras deze : allas ! ma mignonnet,  
Nen deus quet a voyen e vec'h aman lojet.  
Ma friet zo eun den hac a zo revoltet,  
Mar ho caffe aman, sivoas, e vec'h lazet.  
M'ho c'hondras neuze da dremen an nos-se  
En eur c'hraouiq bian evit gortos an de,  
Ha pa voa o coannia hi a voa contristet,  
Ma c'houllas e briet petra voa ar sujet.  
Ma respontas dezan : ma c'halon zo teuet  
Palamour da daou den a zo aman lojet ;  
Emedint aont er c'hraou hac ho divoar scornet.  
An dijentil pa glevas a yes prest da vitte,  
Non pas, ma ententet, palamour da Zoue,  
Mes evit contanti ha plijout d'e friet.  
An Itron, p'ho goelas, a voe rejouisset,  
Hac en monnet neuze a commanç d'ho zellet  
Ma voa an erc'h, ar scorn ouz ho divoar sclasset ;  
Hac en neuze vantam a commanç da voelan,  
Ha goude quement-se reï deze da goagnan.  
Pa voa debret ho c'hoan, neuze e voent casset  
En eur gamp tapisset evit mont da gousquet ;  
Mes int a lavaras : ny hor boa intantion  
Mont da gousquet dar c'hraou gant ho permission,  
Rae ni ne gouscomp quet james en goeleou,  
Goel ve guenemp monnet var eun tam plouz on daou.  
Salocroas, emezan, na bermettin quet se,  
Me guerc'ho dec'h aman eun tam plouz a goste.  
Hac en mont da guerc'hat en eur gonsideri  
Bue an daou capucin, gondeze e ini,  
Ma crene e c'halon ouz ho c'honsideri  
Ar boan hac ar fatiq a deuont da anduri  
Var ho c'horfo er bed-man, evit bezan salvet,  
Hac en da sonjal er pec'hejo en devoa commettet.  
Ma commansas neuze da voelan a galon,  
Ja da goulen pardon ouz roue an evo  
Dimeus ar c'hrimmo bras en devoa commettet,  
Ma ranne e galon gant quun ha gant regret,  
Ma arouze ar plouz neuze gant e zaero,

Da veza offanceet Jesus-Christ, hon Autro.  
Cas eure plouz dar gamp, dan daou gapucin-ze,  
Ma c'houlen gant douster digant an tado ze,  
Tado, leveret din a men vo pardonnet,  
Tregont vla a zo sur me ne meus covasset.

Ma responchont dezan : hac ho pe commettet  
Quellies a bec'het hac a den zo er bed  
Pe a greun sabr zo en tro an nodjo,  
Pe a ieoten so divoannet er prajo,  
Mar oc'h eus guir glac'har d'ho beza commettet,  
Me a bromet dec'h e vezet pardonnet.

Me gare, emezan, mar be ho polonte,  
Ma zad quer, emezan, e teuffac'h d'am c'hoves.  
Neuze ar c'habucin a lavaras dezan :  
Abars en em goves ret eo examina  
Ho corsianç er fat, dimeus ar pec'hejo  
Oc'h eus bet commettet a enep an Autro.

Hac en mont en e gampr d'en em examina  
Var an oll pec'hejo groet gantan er bed-man,  
Gant quement a glac'har d'ho peza commettet  
Ma rannas e gallon ha ma zeo bet marvet.

Ar gapucinet paour squis fatiq a voa meurbet,  
Ha yes en oraison da bidi an Drindet  
Ma vije e bolonte da reï dezan grasso  
Da gavet guir bardon dimeus e bec'hejo.

Neuze ar gapucinet a zeuas da gousquet,  
Ma voeljont e ine a zirac an Drindet ;  
Neuze an Diaoullo a zeu den accuzi.

An den-man emeze nen deus groet nemet oc'h offanci :  
E El mad den sicour a guemeras neuze,  
Hac an tad Seraphin er protejas ive.

An Autro sant Frances à zeuas den diffen,  
Ma fallas dan Diaoullo donnet prest d'er zurpren.

An Diaoul a zouten deze tout en ho fri  
Nen devoa groet netra nemet e serviji.

Hor Salver Jesus-Christ dre e vadelez vrás  
Ouz an tad Seraphin neuze a c'houlennas :  
Petra leveretu : na c'houi, sant Frances ?  
Hac en o lavaret da Jesus : mar be ho polontez  
Sant Mikel a boezo, mar plich, e oll euvro,

Quement en deveus groet bars en eur balanso.  
Ma lacas an Diaoul evit bezan poezet  
An oll pez'hejo tout en devoa commettet.  
Ma commandant sant Francees neuze en em ouagna.  
Allaz ! e œuvro mad, sivoas, nan dint netra.  
Querc'het e voe ar plouz, hac e glac'har poezet,  
En antier er balanc m'ho deveus gonezet.  
Rac se, me ho suppli, sonjet en quement-man,  
Ha tachet da zonnet bepret d'ho imitta,  
Ha me a bromet dec'h e vezet eveltan  
Evrus ebars en êe en ho heur divezan ;  
Rac aliez a voech e quever rapportet,  
Evit neubeut a dra tud a zo bet salvet.  
Rac se, covasset deus a greis ho calon  
Da veza offancet Jesus, roue an tron.  
Et betteq eun Ermit a zo aont en draouyen,  
Enez a roïo dec'h, assuret, pinijen :  
Sulvuin a binjen ontan a c'houennet,  
Neubeutoc'h ho pezo, an dra-ze me bromet.  
Adieu eta, ma map, me a bedo Doue  
Ma vezet evurus gantan ebars en êe.

(Poquet a ra dezan hac e sorti.)

---

SANT GUILLARM HAC E SUIT a ya da gavet an Ermit :  
squei a ra var an or.

Ma zad, me ho suppli, ma sicouret breman,  
Ma sicouret, m'ho pet, d'en em gconvertissan.

An Ermit.

Na piou a zo aze a fel dezan antren,

Sant Guillarm.

Ar C'hondt deus a Boëtou a fel dezan antren,  
Ma zad, mar plich guenec'h, da ober pinijen.

An Ermit.

Nen deuyo quet aman, an dra ze m'er promet,  
Eua den eo hac a zo bet excumunuguet.

*Sant Guillarm.*

Bet on ebars en Rom ha me convertisset.

Rac se ma ho suppli ma vo din digoret.

*An Ermit.*

Fachet oc'h ouz ar Pap, lequet guenec'h eun all

A zo eur chismatiq hac a zo eun den fal.

*Sant Guillarm.*

Lamet eo adare ha lequet eguile,

Ma zon convertisset a drugare Doue.

*An Ermit.*

Na fian quet ennoc'h rac eun den fal oc'h bet,

Na respectac'h ini, na feumeu len na groeg.

*Sant Guillarm.*

Achu eo quement-se, ha me convertisset ;

Da c'houlen pinijen diguenec'h e zon deut.

*An Ermit.*

Eun den fal oc'h meurbet a fel dec'h ma zrompla ;

Rac se men lavar dec'h fete nan deut aman.

*Sant Guillarm.*

Ma zad, me lavar dec'h en eur guir pen-da-ben

Penos on deut aman da c'houlen pinijen.

Sanchet on a vuez : me voar er fat on bet,

Sivoas, ar mechanta a zo bet voar ar bed ;

Ma zon convertisset breman, na c'heuillan muin

Ar sort buez fal a meus groet, sivoas din !

*An Ermit.*

Het en ho rout, ma den, me oc'h eneo breman :

C'houi a zo eun den fal hac a glasq ma zromplan.

Querzet prest a lesse, sentet ne deuffet quet aman,

Rac se het en ho rout pa laran dec'h breman.

*Sant Guillarm.*

Ma zad, c'hoas eur veach me a c'houllen ouzac'h ,

Mar be ho madelez accordet din ar c'hraç :

Digoret din ho tor, rac me a zo eun den

Hac a zo deut aman evit clasq pinijen.

Rac se me bromet dec'h e zon convertisset,

A drugare Doue me a zo tout chanchet.

N'ho pet quet a vorc'het evit digueri din.

Allas ! ma na zigoret ne on quet petra rin.

*An Ermit.*

E mout aze c'hoas ; me sonje e voas pel :  
Coulz e zeo dit paoues evel dont d'am guervel.  
Eun eston eo guelet eun den fal revoltet  
O tont da attaqui dorojo an ermittet.

*Sant Guillarm.*

Va escuzet, ma zad, mar plich guenec'h,  
Rac cavet pinijen a fel din diguenec'h.

*An Ermit.*

True a meus ouzac'h couseoude p'ho elevan.

*Sant Guillarm.*

En anno Doue, m'ho pet, ma sicouret breman,

*An Ermit.*

Ma ouffen ne vec'h quet den fal ha revoltet,  
Me a zigorfe dec'h ep cavet nep more'het.

*Sant Guillarm.*

Nan don quet. m'en assur, rac sanchet on a gren  
Hac e zon deut aman evit clasq pinijen.

*An Ermit.*

Mar deo gouir quement-se breman me zigoro.

*Sant Guillarm.*

Eun dezir bras a meus da vonnet dan evo.

*An Ermit.*

Ret eo quittat ar bed hac e oll vanite  
Ha mont a virviquen da serviji Doue.

*Sant Guillarm en eur boquet d'e zud :*

Adieu eta, ma zud, me ya en anno Dotie :  
Pedet ma pardonno Doue ma fec'hejo,  
Ma n'em voelfomp en èe goude on trubuillo.

*Ar Baron.*

Adieu eta, va mest ; me a bedo Doue  
Hac ar Voerc'hes biniguet pini zo en envo,  
Ma vezo e bolonte beza avocades  
Dirac Doue he map, en e rouantelez.

*Ar C'henta Pach.*

Adieu eta, ma mest ; quen a vo ar c'henta goelet.  
Me bedo evidoc'h noz a de an Drindet,  
Ma vezo e bolonte da reï dec'hu graço  
Evit cavet pardon dimeus ho pec'hejo.

*An Eil Pach.*

Ma mest, assuramant me n'ho quittaïn quet.  
Aboue mon biannic e zon guenec'h maguet ;  
Me a zalc'ho mat dec'h ha yel guenec'h ive,  
Me n'ho quittaïn quet queit a ma vin en bue.

*An Ermit.*

Salocroas, ma buguel, ne chommo den aman,  
Ha ne antreco den nemertan e hunan.

(*An Ermit a boq da Sant Guillarm.*)

Ma map, ha c'houi en deus dezir da vonnet dan evo ?

*Sant Guillarm.*

Ya, gant c'hraç Doue, mar be e bolonte.

*An Ermit.*

He bien, ma map quer, evit ho pinijen  
E roffet oc'h oll mad en antier dar bevien.  
Responent aman din, ha c'houi a raïo ze ?  
Enez eo pen an en evit plijout da Zoue.

*Sant Guillarm.*

Ya, me er promet, me a raïo pep tra :  
Mes penoz illin-me beva bars er bed-man ?

*An Ermit.*

N'ho pet aon rac netra nemet deus ar pec'het.  
Abalamour d'ho e'hoar oc'h eus bet ravisset,  
E touquet eur sae run bemde var ho croc'hen.  
Abalamour dar munstro ha guen aliez a zen,  
E touquet voar ho corf eur c'hourris ouarn,  
Aze quen a zeuio Doue d'ho parn.  
Palamour dar cher vat, dar guin, dar banquejou,  
Divoar bara ha dour bemde c'houi a yuno ;  
N'hor pezo james a guin da eva birviquen,  
Na quiq, na nep sort all, na nep banne souben.  
Neuze monnet da Rom evit goulen pardon  
Digant an tad santel, deus a greis ho calon.  
Ya, het da c'houlen digant ar Pap,  
Hac en ho receo evel pa vec'h e map.  
He bien, leret din ha c'houi zo resolvet  
D'ober ar binijen a meus dec'h ordrenet.

*Sant Guillarm.*

Ya, gant c'hraç ma Doue, me dalc'ho mad bepret

Da guement ordrenanç oc'h eus din commandet.

*An Ermit.*

Pedet a vir galon Doue, roue an êe,  
Ha n'ho po quet a boan oc'h ober quemen-se,

*Sant Guillarm.*

Me na ran quet a gas evit souffri poannio  
Bette ma hin eur voech da voelet an envo.

*An Ermit.*

Mar gret ho pinijen bezet en assuranç.

*Sant Guillarm.*

Grin mar plisch d'am Doue reï din e azistanç.

*An Ermit.*

Deut guenen, ma mignon, ha me reï ho guisca,  
Pa zoc'h en em reutet criminal ar voech-man.

*Sant Guillarm, dindan eun habit a binijen.*

Chetu aman eur c'hrimnal en deveus merittet

Pan dije cant bue ho beza oll collet.

Daouest ha me vezo pardonnet en êe,

Rac ne merittan quet pardon digant Doue :

Bonheur din mar gallan ober ma finijen

Jesus, map da Zoue, deut bepret d'am zouten

Evit ma froteji ha donnet d'am difen

Ouz an droug sperejo, mar deuont d'am zurpren.

Ha c'houi Goerc'hes Vari, zo rouannes an tron,

Quemerret ma ine en ho protection,

Evit man bo ar c'hraç evit perseveri

D'ober ar binijen a zo ordrenet din.

Me ya breman da Rom dimeus a galon vad,

Evit goulen pardon humblamant ouz ar Pap.

Me a meus eun aon vrás ho fonnet dirazan,

Quelliez a affront a meus rentet dezan.

Na dal quet rezonni, ret eo dime monnet,

Rac dre ma finijen e zeo din ordrenet.

---

*AR PAP HAC AR GARDINALET.*

*Sant Guillarm a lavar :*

Bonjour dec'h, tud santel, chetu me deut arre

Da c'houlen diguenech pardon ha trugare :

An Ermit en deus bet roet din pinijen,

Am zigas ho pete da gaout an absolen.

*Ar Pap.*

Ma map, credet assur me n'ho absolvir quet  
Palamour dar c'hrimo oc'h eus groet em andret.  
Het beteq an Ermit zo en Jerusalem :  
Enes a roï assur dec'hu an absolen.  
Me meus joa em c'halon ma oc'h convertisset  
Balamour doc'h ine, rac ne vijac'h collet :  
Rac se o pezet quun rac beza offancet  
Eun Doue a zo mat, dign da veza carret.

*Sant Guillarm.*

Adieu heta, ma zad, me a ya da gavet  
An Ermit oc'h eus din breman recommandet.  
Ma zad, me ho suppli da bidi em requet  
Jesus hac ar Voerc'hes ma vezin pardonnet.

*Ar Pap.*

Adieu heta, ma map, Doue d'ho conduo.  
Ha diouz pep peril bepret d'ho prezervo.

---

SANT GUILLARM E HUNAN.

Ma, chetu me en antier absolvet,  
A drugare Doue en deveus ma c'hrouet.  
Ha c'houi, Goerc'hes Vari, bed ma avocades,  
Groet din breman beva ebars en santelles,  
Ma vezin cavet dign pa hin deus ar bed-man  
Da vonnet dan envo goude ma heur divezan.  
Ret eo din construi eul lochennic aman,  
D'ober ma finijen ebars er plassic-man.  
Ma Doue, ma c'hrouer, me ho pet ar vech-man,  
M'ho suppli hae ho pet da zont d'am azista.  
Groet din, me ho suppli, condui ma bue  
Ha meravel en ho grac pa vo ho polonte,  
Ha goude quement se ma vezin recevet  
Ebars er barrados, en palez an Drindet.  
Me ya da repozi en anno ma Doue,  
Me a recommand dec'h ma c'horf ha ma ine :  
Quemeret a'hanon en ho protection,  
Va miret deus Satan hac e dentation.  
Ha c'houi, Goerc'hes Vari, mam deus ar santezet,

Ho pet bepret true ouz ho servijer quez ;  
Rac se me ho suppli da zont d'am azista  
A enep an diaoul, mar fel are dezan  
Cant tantationno donnet d'am suffocan.  
Oll sent ha sentezet dimeus ar barrados,  
Bezet avocades evidon deiz ha noz  
Ebars er barrados, dirac Doue an tad.  
Ma sicouret breman, me ho pet, ma el mad.  
Alliez gant an diaoul, gant ar c'hiq hac ar bed,  
Allas ! bette breman, me zo en em gollet,  
Ha rac se, ma Doue, ho pet ouzin true,  
Dre ho misericord reit din pardon ive,  
Reit din grasso necesser evit gallout bevan  
Herve an ordrenanç oc'h eus groet er bed-man,  
Ma c'hillin eur veach mont en êe d'ho guelet  
Evel oc'h heritour, p'oc'h eus bet ma frenet.  
Dre verit ar maro oc'h eus bet anduret.  
En anno ma Doue me a ya da gousquet.  
Me a recommand dec'h ma c'horf ha ma ine,  
Sant Mikel, ma el mad, ma sicouret ive.

### DÀOU DIAOUL.

#### *Ar Chenta a lavar :*

Chetu ni revinet ar voech-man gant eman,  
Ma na ellomp e gas dimeus ar c'hartier-man.  
Nen deus quet a gaz, mar er c'bavan cousquet,  
Men talveo dezan, rac m'er graï glac'haret.  
Ampech a ra ouzimp n'hor bezo muin netra  
Rac beza zo tud sot hac a gredo dezan.  
Ya, credet vezo palamour ma zeo bet  
Eun den var an douar quen terrupl revolte.

#### *An Eil Diaoul.*

Gouir sur a leveret, ret vezo dimp breman  
Ober moyen den cas dimeus ar c'hartier-man.  
Demp breman da esse e gavet,  
Mar guellomp ober ze e vomp rejouisset.

#### *Ar Chenta Diaoul.*

Gouir sur a leveret, ma c'hallemp c'hoas ontan  
E lacat da bec'hi, neuze ni ve contant :

Ni a dorfe e goug hac en precipite  
En creïs puns an ifern, assuret omp a ze.

*An Eil Diaoul.*

Ze eo dimp da ober, rac se breman demni  
Gant tentationno bemde d'en tourmanti.  
Demp breman da ober curuno ha luc'het,  
Ni raï dezan crena hac e vezo spontet,  
Ha pa vezo spontet groet dezan tourmancho,  
Mar deu er mes an ty neuze ni en attrappo.

*Ar Chenta Diaoul.*

Demp prest da ober ze, ni a raïo dezan  
Quen n'or bezo gallet dont a ben anezan.

---

*Sant Guillarm.*

Ma Doue, ma c'hrouer, me ho pet ar vech-man  
Dre ho misericord da zont d'am azistan  
A enep an droog speret a fel arre dezan  
Donnet da ober din quittat deus ar plaç-man.  
Ha c'boui, Goerc'hes Vari, mam dan Autro Doue,  
Me a recommand dee'h ma c'horf a ma ine;  
Gouennet din ar c'braç digant ho map breman  
Man bezo azistanç ha sicour digantan,  
Ha pardon deus ar c'hrimmo a meus groet er bed-man,  
A voellan o c'houlen bepret justic' ontan.  
Gouennet din poannio er bed-man digantan,  
Da bea ar fotto a meus groet er bed-man;  
Ha lemel an horol am c'hrimmo commettet,  
A voelan o c'houlen justic' ontan bepret.  
Rac se me ho suppli da gaout ar vadelez  
Da zont da azista breman eur pec'her quez.  
Reit din eur merq benac da c'hout penoz e zeo  
Roet din ar pardon deus ma oll pec'hejo;  
Ha me a zo contant bepret da anduri  
Quement sort tourmancho a vezo roet din.

*An El Raphael.*

Or sa, en em gonsolet breman a vir galon,  
Rac contantet oc'h eus Doue, roue an tron.  
Bet oc'h eus gouir bardon dimeus ho pec'hejo,  
Assuret oc'h da vonnet eun de dar barrados.

Rac se bezet content bepret da anduri  
Er bed-man poan ha fatiq, abars ma hefet di.

*Sant Guillarm.*

Ma Doue, ma C'hrouer, me ho trugareca  
D'am beza bizittet hac assistet breman,  
Gant eun El deus an èe, rac me ne voan quet dign  
E teujac'h d'am ziffen ous ar speret malin.

*An El Gabriel.*

Ne bon, ni a zeuio bepret d'ho coaranti  
Diouz an diaoullo, mar deuont d'ho tenti.  
Rac se me ho suppli da zonjal en Doue,  
Ma vezet evuras er barados goude.

*Sant Guillarm.*

Moez divin deus a beurs an Eternel,  
Me ho trugareca aman, Speret santed.  
D'am beza bizittet breman gant an Elle,  
Dre ho misericord, ous ma necessite.  
Ha c'houi, ma El mad, zo guir cannat Doue,  
Me recommand dee'h ma c'horf ha ma ine ;  
Ma henoret bepret deus ho compagnuez,  
Ma voelin ma Doue gant ar Sent assambles.

---

**DAOU DIAOUL.**

*Ar Chenta Diaoul a lavar :*

Diaout ! chetu ni revinet ar voech-man,  
Pa na ellomp mui dont a ben a eman.  
Evit quement tourmant on deus bet groet dezan  
Non deus james gallet e gas deus an ty-man.

*An Eil Diaoul.*

Ret eo dimp c'hoas eur voech donnet d'en incitta,  
Dre dentationno donnet da drec'hi varnezan.  
Dimeus eur feumeulen ar form a guemerin,  
Neuze e c'hin d'e dy evit dont d'en tenti.

---

*AN DIAOUL dindan form eur Plac'h yaouancq.*

Ma zad, me ho suppli da zigueri ho tor  
Da eur groadures zo o c'houlen digor.

*Sant Guillarm.*

Na piou a zo aze ha fel dezan antren ?

En ty-man ne antre enep sort feumeulen.

*Ar Plac'h.*

Me zo eur plac'h honnest a zo en em gollet,  
Ho clas monnet d'ar guer on aman en em gavet.

*Sant Guillarm.*

Het a lesse, ma merc'h, ne deuffet quet aman.  
Nen deo quet oc'h affer antren bars an ty-man.

*Ar Plac'h.*

Me zo eur plac'h honnest a zo a zy-a-bel,  
Evit clevet guenec'h comzo spirituel.

*Sant Guillarm.*

Vare'hoas, marqueret, en em gavet aman,  
Certen evit fenoz ne zeui den en ty-man.

*Ar Plac'h.*

Ho pet true ouzin ; me zo eur feumelen

A zo abandonnet, mar plich reit din quelen.

*Sant Guillarm.*

Danjerus e ve din c'houi da antren aman.

An Diaoul zo bemde ho clasq dont d'am zromplan.

*Ar Plac'h.*

Me na meus quet, ma zad, a goal intantion,  
Me dremeno an nos oc'h ober oraison.

*Sant Guillarm.*

Antrezet heta, ma merc'h, en anno da Zoue,  
C'houi yello en oc'h hent varc'hoas ar beure.

*Ar Plac'h.*

Ho servicheres, Autro, ar voech-man nan de quet  
An noz quenta ma meus bet an henor d'ho coelet.

*Sant Guillarm.*

Ne meus quet a vemoar ebars en ep cartier  
En be bet an henor d'ho coelet-tu, ma merc'h quer.

*Ar Plac'h.*

Me a meus bet ar c'hraç alliez d'ho coelet,  
Abed am boa en sonch d'ho cavet da pried.

*Sant Guillarm.*

Biscoas me na meus bed ar sonch a quemen-se,  
Rac se, me ho suppli, no gomzet quet a ze.

*Ar Plac'h.*

Partout e c'hallan comz, rac me a zo savet

Dimeus a voad huel, evit ma intentet.

*Sant Guillarm.*

E be sort nation e zoc'hu bet savet?

*Ar Plac'h.*

Me zo merc'h d'eur Roue, pa fel dec'h clevet.

*Sant Guillarm.*

Penos, merc'h d'eur Roue!

*Ar Plac'h.*

Ya, merc'h da eur Roue,

Unan ar re vrassan a guement a gaffet.

*Sant Guillarm.*

Penos oc'hu deut aman? Leretu dime ze.

*Ar Plac'h.*

Ma zad, me zo pel zo o vale dre ar bed,

O clasq cavet an heur da c'halout ho coelet.

*Sant Guillarm.*

Evit petare sujet oc'hu deut d'am goelet?

*Ar Plac'h.*

Me zo deut d'ho pidi da vezan ma friet.

*Sant Guillarm.*

Salocroas, deus a ze am escuzet, feumeulen,  
Entre m'am bezo bue me chommo evellen.

*Ar Plac'h.*

Mar deut d'am refuzi c'houi a pezo anquen.

Ma zad en laras din pa zon bed partiet:

Ar re ho refuzo en em gavo soazet.

*Sant Guillarm.*

Me na ran caz a ze, ma c'hridi a ellet,  
Birviquen na guittan an habit a voelet.

*Ar Plac'h.*

Goel ve dec'h ma c'havet en noz ous ho coste,  
Evit chom er bed-man ouarnet evel se.

*Sant Guillarm.*

Ret e zeo din beza er form-man em goele,  
Rac dre ma finijen e zeo din ordrenet.

*Ar Plac'h.*

Achu eo ho pinijen, assuret oc'h a ze,  
Dent d'am c'heureuji hac e vezet Roue.

*Sant Guillarm.*

Biquen na rin an dra-ze, me a chommo aman.

*Ar Plac'h.*

Ret eo din donnet da jouissan  
Eur veach ac'hanoc'h, quemen a m'ho carad.

*Sant Guillarm.*

Ma Jesus, ma sicouret breman,  
Rac hep oc'h nan don netra :  
Ma frezervet adare da goezan,  
Groet din ar c'hraç da drec'hi an dentation-man.  
Ha c'houi Goerc'hès Vari, mam ar guir burete,  
Me a recommand dec'h ma c'horf ha ma ine,  
Hac ho pet d'am ziffen ouz an dentation  
En deus din digasset an Diaoul diffesson.  
Rac se, tra infernal, en em den a lesse ;  
Ne rez nemed col poan gant graç ma Doue.  
Ma Doue, ma C'hrouer, me ho trugareca  
D'am beza prezervet ha delivret breman ;  
Rac se, me ho suppli d'am azista bepret  
En pep occasion, rac na ven surmontet.

---

*AN DIAOULO ASSAMBLES.*

*Ar ch'enta Diaoul a lar :*

Me a zonje din c'hoari mad ma roll,  
Mes me a voel er fat n'on quet evit e goll.  
Ret e vo da eun all don en pen anezan,  
Rac evel ma voe'es me ne meus groet netra.  
Me am boa quemeret ar form a feumeulen,  
Me sonje dre ennon er gonnit pen-da-ben,  
Ma zon bed repousset ha gonnezet gantan,  
Evidon en ep guis nan don quet evittan.

*An eil Diaoul.*

Me a ya d'er c'havet ha d'en tenti ive,  
Mar gallan en zigas er mes deus ac'hane.  
Men digasso er mes voar digare laret,  
E assiejer Poëtou, e renquer e gavet.

---

*AN DIAOUL a lar da Sant Guillarm :*

De bonjour dec'h, Autro, me zo deut d'ho cavet

Evit lavaret dec'h eun dra na ouzoc'h quet.  
Eun arme zo arru evit assieji  
Ar guer deus a Poëtou, ma na retornet dy.

*Sant Guillarm.*

Perac nen didi quet evit en em diffen,  
Nen deo quet quer facil donnet d'e surpren.

*An Diaoul.*

Habitantet ker nan dint quet evitte;  
Me ro dec'h eun avis, het da sicour ane.

*Sant Guillarm.*

Ma ve an traou-man tout divar ma zro lamet  
Ha rentet din armo, ha ma ven me guisquet,  
Me a raje lemel ar siej divar ker.

*An Diaoul.*

Me a zo deut guenen tout ar pez a renquer :  
Marqueret dont guenen e savatefet ker.

*Sant Guillarm.*

Ya, me oc'h c'heuillio, ma dibrenet breman  
Ha roet din armo.

(*An Diaoul a ouisq ar Sant hac a ro dezan armo : daou El a apparis.*)

*An El Gabriel a lavar da Sant Guillarm :*

Guillarm, chomet aze, c'houi ho poa promettet  
Da Doue e chomzac'h en e servich bepret.

*Sant Guillarm.*

Ret eo din mont gantan evit diffen ma c'her.

*An El Raphael.*

Na zentet quet ontan, enes zo eun trompler.

*Sant Guillarm, ha collet gantan ar goelet.*

O Doue, ma C'hrouer, me a c'houlen pardon  
Deus ma infirmite, deus a greïs ma c'halon,  
D'ho peza offanceet ha quittet ar plac-man,  
Ha promettet guenen chom birviquen ennan.  
Te zo eur malevrus d'am beza debauchet,  
Me a gret em c'halon e zout an drouc-speret.  
Rae se, ma Doue, ho pet ouzin true,  
Dre ho mizericord sicouret eur paour ques.  
Chetu me en eur stad ne on pelec'h monnet,  
Me zo rentet dal poc'h gant an Diaoul milliguet.

Reit din c'hoas, ma Doue, ar c'braç d'en em rentan  
Er plaç ma voan et evit ho servijan,  
Ha me bromet dec'h e salc'ho birviquen,  
Hep quittat en ep guis, da ober pinijen.

*An El Gabriel.*

Petra ma voelettu, Guillarmic, evel-se?  
C'houi ho poa promettet chom birviquen aze.

*Sant Guillarm, hac en dall.*

Me zo eun ermit quez a voa er forest-man,  
Ma zeo deut an Diaoul aben sur d'am zromplan.  
Dont a eure d'am zi, ha reï din da gridi  
E voa deut eun arme evit assieji.  
Ar ker deus a Poëtou, pehini a zo din.  
Neuze e sonjis monnet gant ar speret malin,  
Evit c'hoas dre gombat ho lemel ac'hane,  
O c'has quit en ho zro, repoussi ho arme.  
Doue en deus miret ouzin nan dajen quet,  
Ha lamas diguenen er plaç man ar goelet.

*An El Raphael.*

En eur guittat ho ty e rezoc'h pee'het bras,  
C'houi ho poa promettet e chomjac'h en ho plaç.

*Sant Guillarm.*

Ya assuramant, me heno an dra-ze,  
Promettet am boa bet e chomjen er plaç-se.  
Ma ve ho madelez ma c'has are dezan,  
Bette fin ma bue me a chomfe ennan.

*An El Gabriel,*

Deut guenem-ni are, ni ho rento aze,  
Er plaç elec'h ma voac'h ho serviji Doue.

*Sant Guillarm.*

Moez divin deus an êe, cannat an eternel!  
Me ho trugareca aman, speret sante,  
D'am beza bizittet p'am boa necessite,  
Me a recommand dec'h ma c'horf ha ma ine.

(*An Elez a ya en ho rout.*)

---

*Ar c'henta Diaoul a tar :*

Chetu ni revinet, ne ellomp quet ontan,  
Evit quement on deus groet nan domp quet evittan.

*An Diaoul.*

Demp-ni oll c'hoas dezan, pa nan da ac'hane,  
Ret eo dimp er pilat, ma collo e bue.

*Ar chenta Diaoul a lar d'ar Sant :*

Penos, ma mignon quer, nen doc'h quet inspiret  
Da guittat ar plac-man, pan boa dec'h lavaret ?  
Dalet prest da gommanç peamant evit se.  
Darc'ho adreus ar pen m'hor bezo e vue.

*(Pilat a reont ar Sant hac e leront) :*

Torromp e izili, troc'homp e ziscouarn,  
Rentomp-an en eur stat ma vo fin anezan.

*An Eil Diaoul.*

Nan don quet evittan, sur ne on petra ran :  
Eman zo den avoalc'h pan deo deut d'am seuizan.  
Mil malediction da goueo voar da dro,  
Mes carre en ifforn evit dont d'ho peo !

*Ar chenta Diaoul.*

An tan foeltr deus an êe da goeo var da ben,  
Pa na ellomp-ni quet dont ac'hanout a ben.

---

*AR SANT E HUNAN coet d'an douar.*

Ma Doue, ma C'hrouer, me ho pet ar vech-man,  
Sellet ar miserabl en petare stat e man.  
Jesus-Christ, ma Salver, me ho pet d'am diffen,  
Rae ho clasq ma lazan man ma adversourrien,  
Ho clasq terri ma fen ; me a zo dispennet.  
Me ho pet, ma Doue, ma sicouret bepret,  
Reit din, mar plich guenec'h, eur gonsolation  
Deus ho peurs deus an êe, da souten ma c'halon.  
Ha c'houi, Goerc'hes Vari, mam deus ar burette,  
Obtenet din ar c'hraq da recour ma ine.

---

*AR VOERC'HES GANT DAOU EL.*

*Ar Voerc'hes a lar :*

Petra rettu aze oc'hunan evel-se ?  
Ha clan en em guevet ma chommettu aze ?  
Meurbet ho cavan trist ha meurbet afflijet,  
Rae se discleriet din petra eo ar sujet.

*Sant Guillarm.*

Me a zo eur paour quez hac a zo afflijet,  
Oc'h ober pinijen am fotto tremenet.

*Ar Voerc'hes.*

Petra oc'heus-su groet, ma map, moc'h evel se  
Oc'h ober pinijen en eur c'hoat evel se ?  
Me ho quev afflijet ha meurbet desolet,  
Me a gret oc'h eus bet eur b'nijen calet.

*Sant Guillarm.*

Merittet mad am boa, m'er promet dec'h assur,  
Mar en devoa discoas merittet crouadur.

*Ar Voerc'hes.*

Ha c'houi a zo contant da souffri evel se,  
Quen a vezo contant ar justic a Zoue,  
Ar poannio a andur ar pec'her er bed-man ?  
Ma na ve quet contant na dal dezan netra.

*Sant Guillarm.*

Me a souffro joaüs balamour d'am Doue  
Quement poan ha fatiq a arruo guenen.

*Ar Voerc'hes.*

Rac se bezet fidel da serviji Doue,  
Hac en eum voelfet en êe assambles guene.  
C'houi a zo pardonnet, me oc'h assur a-ze,  
C'houi oc'h eus disarmet justic eun Doue.  
Rac se, ma map Guillarm, ho pet patientet,  
Ha n'ho pet quet a regret d'ar poannio a souffret.  
Ouz o quelet afflijet me zo deut eus an êe  
Evit ho conzoli : me a zo mam Doue,  
Hac oc'h assur ive e vezet curonet  
En mesq an oll Ellez, ar Sent ha Sentezet.  
Ya, ma map Guillarm, sevet deus a lesse,  
Het adare d'ho plac evit pedi Doue.

*Sant Guillarm.*

Goerc'hes, mam da Zoue, me ho trugareca  
D'am beza bizittet hac azistet breman.  
Pa meus bet an henor hac ar c'hraç d'ho coelet,  
Chetu me evurus hac ouspen contantet.  
Ma c'horf a zo groet yac'h, a drugare Doue,  
Gant ar Voerc'hes Vari zo rouannes en êe.

*Ar Voerc'hes.*

Adieu heta, ma map, en em sicouret bepret :  
C'houi à vezo evrus en palez an Drindet ;  
Ha quemeret courach hac en em gonsolet,  
Pa ho pezo affer me deuyo d'ho coelet,  
Evit ho coellat mar bezet maltrettet.

---

**SANT GUILLARM E HUNAN.**

Contant eo ma speret : omman zo din eur c'hraç  
Digant rouannes an êe hac an douar.  
Dont a ran da zonjal petra dalie dime  
Beza C'hondt en Poëtou ha Due da Quitaire :  
Evit quemen-se tout ne c'honnezen netra.  
Me ra muin a estim dimeus ma stat breman ,  
Me meus muin a blijadur ho vevan er guis-man  
Evit n'am boe biscoas gant grandeurio ar bed-man.  
Allas ! ha ma hine a voa precipitet  
En creïs puns an ifern, pa'amour d'e fec'het ,  
He bien, ma ine, deus da zonjal en êe,  
Hac andur da boannio palamour da Zoue  
En deus bet evidout er bed-man anduret,  
Bettec scuillan e goad da brena da pec'het.  
Lavaret a rer din e souffran poannio bras,  
Mes pa zonjan ive er joa hac er c'hraç  
A recevan bemde, neuze e lavaran :  
Ne meus quet anduret c'hoaz netra er bed-man.  
Souffr heta, ma ine, palamour da Doue,  
Ar poannio a roï dit herve e bolonte ;  
Souffr gant patientet bette fin da vue,  
Ma c'hilli mont eur voech d'e meuli da james.

---

**DAOU EL A ANTRE.**

*An El Gabriel a lavar :*

Deut d'en em gonsoli, ma mignon bras Guillarm,  
Achuet eo dija ho pinijen.  
Curunet e vezet souden ebars en êe,  
Ebars er barados, en mesq an oll Ele.

*An El Raphael.*

Deut d'en em dispozi da renta oc'h ine ;

Breman en em rentet entre daouarn Doue.  
E zoc'h prest da vonnet da guemeret partach  
Dimeus ar barados a zo oe'h heritach.

*Sant Guillarm.*

Biniguet vezoz an heur, me zo prest da vonnet  
Da voëlet ma Jesus hac e mam biniguet !  
Me ho trugareca, eil ferson an Drindet :  
Arru eo ta an heur ma hin me d'ho coelet !  
Guenec'h e zon rentet, breman ze zo patant,  
Voar ma innimiet me a zo triomphant.  
Penoz e renti-me grasso dec'h, ma Doue,  
Deus ar merco certen dimeus ho carante  
En andret eur paour ques a zo ho servijer,  
Ho tont d'en azista ebars en pep amzer :  
Me garre evidoc'h coll mil goech ma bue ;  
Pa dostan deus ma fin ho pet ouzin true :  
Me ho trugareca hac a raïo bepret  
Dimeus ar c'hraço bras oe'h eus groet em andret.  
Rac se, ma Doue, me a c'houlen pardon  
Dimeus ma sec'hejo, deus a greis ma c'halon ,  
Pere a meus, sivoas ! aliez commettet.  
Me a c'houlen pardon, ya, gant goir regret  
D'ho peza, ma Jesus, quelliez offanceet.  
Ha c'houi, Goerc'hes Vari, bezet avocades  
En êe dirae ho map evit eur pec'her ques.  
Rac se, me ho suppli, recevet ma ine  
Evit e bresanti en êe dirac Doue.

**F I N.**









# GAOUT A RER

## E TI J. HASLÉ E MONTROULEZ

S, RU A AIGUILLO, 8

Abreje eus ann Aviel. — Abreje eus ann Histor  
santel hag Histor an Ilis. — Ar Buguel sur da 3 blos.  
— An Doctor hag ar Buguel. — Almanakou galleg ha  
re brezounec evit ar blavez a rên. — Æl mad ar Vu-  
gale. — Bizitou d'ar Sacramant. — Boquet ar mission.  
— Buez ar Zent, great ha nevez gant ann aotrou Perrot,  
enn pehini he kaver kals ha hanoiou Sent ha Vreiz-  
Izel. — Brevier laïk. — Buez hor Salver J.-C. — Buez  
santes Germena Cousin. — Cantic santes Anna. —  
Cantic ar Magnificat. — Cantic sant Per. — Canticou  
Lampaul. — Canticou ar Verc'hes. — Canticou neves.  
Canticou spirituel evit usach ar Missionou. — Catekismou  
galleg ha brezounec ha Leon. — Catekismou galleg  
ha brezounec ha Guemper. — Cateki historik Fleury.  
— Chansonou brezounec var ar brezel 1870-71, ha  
diwar-ben cals ha draou-all. — Collocou ar C'halvar.  
— Collocou familier. — Curunen ar Verc'hes. — De-  
veriou ar C'hristen. — Devez Christen. — Devez mad.  
— Doctrin ar Guir Gristen, great gant ann Aotrou  
Marrec. — Exerciou Christen. — Hent ar Barados.  
Hent ar Groas : tri seurt da c'hoas. — Heuriou ar  
Christen mad. — Heuriou brezounec ha latin. — His-  
tor ha Vreiz. — Imitation ar Verc'hes. — Imitation  
hor Salver J.-C. — Imitation Jesus-Christ, gant  
reflexionou. — Istructionou ar Rosera. — Instruc-  
tionou santel. — Introduction d'ar vuez devot. — Levr  
Aour, pe humilite gristen enn pratik. — Manuel ar  
Guir Gristen. — Melezour ann Eneou. — Melezour ar  
Galon, pe examin a goustianç. — Mignoun ar Vreton-  
net, pe disput amusant. — Mignoun ar Vugale, gant  
ann Aotrou Troude. — Miz ar Galon sacr ha Jesus. —  
Miz Maë. — Miz ar Verc'hes Vari. — Mysteriou ann  
Oferen. — Preparation d'ar maro. — Tenzor ar Gris-  
tenien, ha cals ha Levriou brezounec all; ouspen-ze  
he caver ive bep seurt Levriou galleg evit Ofiçou ar  
Sul, ar Missionou, ar Retrejon, hag ar Scolacou ; Canti-  
cou galleg ha brezounec, Medalennou, Croachou, Cha-  
peledou, Taulennou, Paper, Plûn, Liou, etc., etc., etc.